

# BARR-HEOL

NIV. 96  
MIZ MEURZH 1978

WAR FEIZ HA BREIZH

9,00 LUR



**L. MORVEZENN (+ 1978)**

P. Le Grand, Concarneau  
An Aotrou L. Morvezenn ouzh ar mikro, e Gouelioù ar Rouedoù Glas, e Konk-Kernev.  
Bet e oa an Aotrou Morvezenn prezidant Kendalc'h ha teñzorer Kuzul Ar Brezhoneg.  
Marvet eo bet e miz Genver 1978 d'an oad a 58 vloaz. (Doue d'e bardono !).

## TAOLENN

1 - KLERG. Ur wech ouzhpenn : an F.L.B. ....	1
2 - Herve LANNDIERN. Ernest ar Barzhig .....	2
3 - A. DUVAL. Pupil ; Dirak an Dismant .....	3
4 - KLERG. Ar prosez war vuhez ha burzhudoù Sant Erwan .....	5
5 - Per ar MAENOUR. Bro-Gozh Hon Tadoù .....	7
6 - J.C. Henri Poisson, ur beleg breizhat .....	12
7 - A. BOURDELLEZ. Ar brezhoneg na deo ket mui brezhoneg? .....	14
8 - LEVRIOU .....	18
J.C. Adolphe Orian: <i>la chouannerie en pays gallo</i>	
J.C. Alain Groix, J. Guiffan : <i>Histoire des Bretons</i>	
J.C. Michel de Mauny : <i>Le Pays de Léon</i>	
J.C. L. Ergon et Loeiz Laurent: <i>Vivre au pays</i>	
J.C. Yann Bouessel du Bourg : <i>Xavier de Langlais</i>	
9 - Ivona KONAN. Ar c'hontour kozh .....	19
10 - J.C. Ar Gristenizh dirak Kador-Varn Gwenc'hian .....	21
11 - KLERG. Yezh Gwened .....	24
12 - KLERG. Ur skrivagner eus Bro-Wened: ar chaloni Matelin Prielleg (1869-1945) .....	36
13 - Celtic League, lizher gant A. HEUSSAF .....	38
14 - Ar «Santa Maria», Lestr Kristoforo Kolombo .....	37
15 - L. ANDOUARD. Jakez Karter: ur vevaj evit mann .....	38
16 - A.G. Lizher (Roazhon, 23 a viz Genver 1978) .....	40
17 - KLERG. Ar pezh a soñjer diwar-benn <i>Barr-Heol</i> .....	41
18 - <i>Keginerezh</i> .....	42
19 - KLERG. Pedenn an Iliz gant J. LEC'HVIEN .....	42
20 - KELEIER .....	45
Euskadi, Radio-Skinwel, Levrioù kembraek, Embannadurioù al <i>Liamm</i> , Gouel ar Brezhoneg, Mouezhiadegoù, Lanv du adarre, Priz Langleiz, Saveteit <i>Wanig ha Wenig</i>	
21 - Al lanv du: son gant Marie PRAT .....	48
Embannadurioù <i>Barr-Heol</i>	

Kement a sell ouzh renevezh BARR-HEOL :

Barr-Heol, 22300 LANNUON - Pellgomz : 37.64.37

Kement a sell ouzh ar sekretouriezh :

An Itron Galbrun, 22300 BRELEVEZ - Pellgomz : 37.66.37

## ur wech ouzhpenn : an f.l.b. (1978)

Deuet eo ar polis a-benn, goude hirenklaskoù, da zispenn unan eus brankoù an F.L.B., e departamant Aodoù-an-Hanternoz (22). Da gentañ e oa deuet poliserien eus a Bariz d'ober an enklask, met chat o devoa graet. En dro-mañ : 8 F.L.B. o deus tapet tud hag o devoa graet da veur a hini eus ar savadurioù ofisiel sailhat en aer, hag o zouez delwenn ar c'honestabl Gwesklen, e Bronn.

E gwirionez abaoe tost da 50 vloaz 'zo, ez eo krog ar Vretoned da c'hoari gant dinamit : abaoe ma oa bet lakaet da darzhañ Monumant ar Vezh, e Roazhon (Eost 1932), ha biskoazh ne oa bet tapet «sav-e-doull» (gouez da Loezi Herriou) dre n'o devoa ket keneiled Neven an Henañ goulet hen flatoullat. Fent en dud, ha stad enno zoken.

Goude-se, setu Gwenn-ha-Du... Ha bremañ abaoe 10 vloaz 'zo, setu an F.L.B. Na pebezh souezh o welout e oa bet tapet beleien ! Ne gomprens ket ar bobl, met tamm ebet!-petra ar foeltr e oa aet ar veleien d'ober en afer-se... Abaoe ez eus bet beleien all o tahva soubenn ar Republik en toull-bac'h, o vevaj ma tamalled dezho bezah F.L.B.

An taol hag en devoa graet ar muiañ trouz e oa bet diskaridigezh Piliier Roc'h Tredudon, dre ma oa bet lamet digant ar bobl o c'hoariell vuiañ-karet : ar Skinwel.

Ha diwar skouer taolioù paotred Breizh, setu skingaserioù bras, e Bro-Okitania hag e Korsika diskennet diwar o sichenn !

Daoust ma'z eus bet grozmodadeg, ha diskleriadurioù gant kement kostezenn bolitikel a zo, ha gant ar sindikadoù a bep liv, ne c'heller ket lavaret ez eus bet kement a chao ha ma oa bet e 1968-69. Daoust ha kustumih a rafe an dud ? Gwir eo kement a draoù all a zae da zedennañ o evezh !...

D'hor meno, n'eo ket diaes kaout an orin eus an taolioù-nerzh-se : skouer lwerzhon, gant taol-dispac'h Lun-Fask 1916. Ur skouer pegus ha stagus. Kustumet eo bet ivez ar bobl diouzh an taolioù-nerzh gant ar brezelioù a zo bet, an taolioù krisder, e-kerz ar brezel diwezhañ, e-skeud ar Stourmerez-kuzh. Neuze, Indez-Sina, Hungaria, Aljeria, hep menegiñ brezelioù ar Reter pellah (abaoe m'o deus ar Frahsizien sachet o skasoù ganto) ; brezelioù ar Reter-Nesañ : Israel, Ejipt, oberoù ar vraouac'herien, an distroerien girri-nij, an daperien-ouestlidi, h.a.

Ha bremañ, ken aezet ez eo pourchas ha prenañ armoù : danvezioù-tarzhus : pennoù an F.L.B.-A.R.B. nevez-dastumet gant ar polis, a oa armoù ganto en o gweter, hag e komzer zoken eus ur guzhiadenn-armoù : evel pa vijent bet e-sell da sevel e Breizh, arme ar Reveulzi... E-touez ar re paket evel-se e oa tadoù-familh ha daou skolaer... Un taol-dievezh bennak, pe re fiziñs e «mignoned» 'zo, o deus o gwerzhet. Ur vicher diaes-maurlbet e eo bezah dispac'h-her...

Petra a lavar an dud diwar o fenn : los desperados ? Paotred hag o deus kollet pep fiziahs e lealded ar Stad, da lavarout eo, e Gouarnamant Pariz hag er bolitikerien. Kollet fiziahs en hentoù hag en doaroù demokratel, er stad m'emañ an traoù evit disoc'hañ gant o uhelvennad : Breizh o tonet da vezah ur Stad adarre. Bez'ez eus darn anezho marteze hag a blij dezho ar vuhez riskus-se, hag a vefe dispac'her, n'eus forzh e peseurt bro e vefent ? Lakomp, met chom a ra ar gudenn-mañ : evit petra emaint o vrezeliñ ? Hag eno emañ an dalc'h, rak diouzh ar respont a roiet, e komprenot pe ne gomprenot ket o enzalc'h hag o oberoù.

• •

A-enep dezho, emañ ar bobl dre vras, hag ar c'hostezennoù politikel ha micherel e-giz m'emaomp o paouez merkañ. Met daoust ha difrouezh-krenn ez eo bet labour an F.L.B., e gwirionez ? Piv a gredfe hen

lavarout ? Kalz a hardizhegezh a zo savet abaoe d'ar c'hostezennoù politikel : n'eus ket unan pelloc'h a gement ne ra ket meneg eus Breizh war e rolloù-labour ! Pe e plij pe ne ra ket, ne deo ket bet oberezh an F.L.B. ul labour-diskar pur. Ha neuze, kerket goude bezañ kondaonet taolioù an F.L.B., e tiskleriont holl ez eo poent cheñch penn d'ar vazh, evit pezh a sell ouzh Breizh !

po klask lakaat un tamm poell (m'o deus ezhomm) en dud-se hag o deus aberzhet o ziegezh, o bugale, o micher, ne zeuot ket a-benn ; kaer he defe an liz o eskumunugañ (lakaomp e vefe c'hoazh eskumunugennoù) e vefe amzer gollet. N'eus nemet un diskoulm d'ar gudenn : lemel pep digarez, pep abeg, digant ar Vretoned da glemm. Gwir eo, ez eus hag e vo bepred pennoù-fall diaes da segaliñ, kaer ho po ober. Met evel-se da vihanañ e vo sklaeroc'h an traoù, ha tu a vo da «zizanveout» e-giz ma lavar Tregeriz, an dud aheurtet diouzh an dud a youl vat.

KLERG

## Ernest ar Barzhig

UR GERIG A-RAOK

*Komz a rae Barr-Héol 1977 eus ar skrivagnerien. Sed amañ unan nebeutoc'h : Ernest ar BARZHIG, marvet e Mur d'an 1 a viz Kerzu 1977, unan hag a skrive ur yezh heñvel-mik ouzh brezhoneg. Dleet e oa da Varr-Heol reiñ ur plas a-ratozh dezhañ-eh hag a bourchase skridoù bev ha saourus d'ar gelaouenn. Pennad Kervourc'h amañ war-lerc'h a zo un testiñ kaer ha fromus eus talvoudegezh ar Breizhad, an Den, ar C'hristen ma voe Ernest ar Barzhig.*

Barr-Heol

Ganet e oa bet Ernest ar BARZHIG d'ar 4 a viz Mae 1917 e Kaouenneg, kanton Lannuon, eus un tiegezh tregeriat-rik. E 2

dad, roc'hard a-ouenn, a oa is-ofiser war vor, er verdeadurezh-Stad, met artizanet e oa bet e c'hourdadoù a rummad da rummad.

Tad-kozh Ernest, amunuzer-koad, goude bezañ kroget gant e studioù evit bezañ beleg, a oa bet dimezet gant Janed-Mari Krec'hriou, ken paour hag he gwaz, daoust dezhi da ziskenn eus un tiegezh noblañs kozh. Devot-tre e oa homañ hag ezel eus Trede-Urzh Sant Frañsez.

Eus Kaouenneg e oa mamm Ernest. He zad-hi, Manuel Troadeg (daoust dezhañ da vezañ jandarn -hag he mamm, Marivon an Impalaer (Mamm-me) a oa eus tiegezhioù perc'henn d'o douar, ha mat a-walc'h ar stal ganto.

Tremen a reas Ernest e vugaleaj e Kaouenneg, en un aergelc'h brezhoneger

pur ha goude-se er Roc'h e-lec'h m'o devoa e dud lakæet sevel un ti.

E kom an tan, e lenne «Mamm-me» «*Buhez Santez Jenovefa a Vrabant*». Diwezhatoc'h, e-kerz e oad-krenn, e raio Ernest anaoudegezh gant «*Buhez ar pevar mab Emon*» ha «*Pipi Gonto*», met dre levezon e voereb muiañ-karet «*Tintin Mari*», c'hoar henañ e dad, konterez dispar, a heulie evel e skeud, eo e tihuno e c'halvidigezh skrivagner.

Diwezhatoc'h e-kerz e servij berr er verdeadurezh, e kejo gant Rojer Praud-Predig, ur Breizhuhelad desket gant brezhoneg dre garantez-vro, hen lakaio e da-rempred evit ar wech kentañ gant an Emsav, hag hen lakaio da anavezout «*Gwalarn*» hag hen sikouro da zeskif skrivañ e yezh.

Diouzh e alioù e raio e daolioù-arnod kentañ er gelaouenn «*Breizh*» renet gant Erwan ar Moal (Dir-na-Dor). Skolaer kristen da 20 vloaz, e Mur, ha goude kelennet war al lennegezh ha skolaer, e Roazhon, betek e retred e 1974, Ernest ar Barzhig n'en deus ket paouezet abaoe, da skrivañ, ken e brezhoneg, ken e galleg.

Ouzhpenn an oberennoù bet moulet distag evel «*Kalonoù tregeriat*», «*Loeiz Lezongar*», pe «*Buhez ha Faltazi*», en deus kenlabouret aketus hag e-pad bloavezhioù gant un niver bras a gelc'hgelaouennoù e-lec'h m'en deus embannet ar pep pennañ eus e oberennoù, peurgetket : «*Brud*», «*Barr-Heol*», «*Breizh*», «*Al Liamm*», «*Hor Yezh*», «*Skol*», hag ouzhpenn, journal René Pleven «*Le petit Bleu des Côtes-du-Nord*» en deus bet kaset dezhi istorioù ha kontadennoù e brezhoneg.

Diskouezet en deus ivez bezañ un troer dispar. E droidigezh diwar Hauff, Valere Depauw, Paol Feval, Plautus, Dan Breen, Aod de Blacan, dreist-holl Soljenitsyn ha kalz a re all, e sav, d'am meno, war an dachenn-se da renk Jarl Priel.

Kasaus eo e vefe bet skrivet e galleg e studiadennoù istorel ha douaroniel war Vur hag he rannvro, ar Roc'h, an Enez-Veur Logi-Plaerang, Nasis Kelien, Frañsez Vallee, Yann Choleau, tiegezh Krec'hriou, tiegezh Magon eus Sant-Maloù. Ken plijus e vefent bet da lenn e brezhoneg herrus ha gweva Ernest ar Barzhig.

Marvet eo bet trumm d'ar 1añ a viz Kerzu 1977, en e di, e Mur, e-kreiz e labour.

• •

Abaoe an amzer ma kenlaboure Ernest ar Barzhig d'ar gelc'hgelaouenn-mañ, ma vo kavet diaes chom hep gwelout e sinatur warni hiviziken, nemet ur wechig bennak evelkent e vo gwelet ur gontaden bennak chomet diembann e-touez e baperoù -e-giz ma sav delioù ha brostoù d'an nevez-amzer diwar un dervenn diskaret e dibenn an hañv.

Ezhomm a vo ur pennad brav a amzer evit peurembann an dornskridoù niverus chomet war e lerc'h, dornskridoù kalz re hir evit ma kavfent lec'h ar gelc'hgelaouenn-mañ. Soñjal a ran dreist-holl e troidigezh pemp romant gant Paol Feval, pevar anezho frouezh e genlabour gant Per Denez (1) a hini efivorennoù brezel Dan Breen : «*Va emgann evit Iwerzhon* (My fight for Irish freedom), en hini a savas gant an Dr. Caoulet : «*Ti an Tasmant* gant Plautus, dispar e-keñver fent ha birvidigezh... ha neuze e «*Efivorennoù ar... Barzhig*». Oberennoù savet gantañ, pe troet gantañ e-kerz bloavezhioù diwezhañ e vuhez a voe evitañ hsp mar ebet, ar re frouezhusañ dre m'en devoa amzer hiviziken ha dre ma oa ur c'hi-labour en em ouestlet penn-da-benn d'ar skrivañ, ha c'hoazh n'em eus meneget nemet ar pezh a chom diembann (ha tu a vefe da verkañ meur a ditl all a-hend-all). Bezet pe vezo ha daoust da fonnusted an oberenn a lez ganeomp, ne c'hellomp herzel da soñjal gant kerse bras en hini e vefe bet gouest da gas-da-benn, mar bije bet youl Doue.

Marvet eo bet E.B. da 60 vloaz, e-kreiz e vrud, e-kreiz oberiantiz-krouiñ, p'edo o vont da seveniñ, evel m'en devoa graet Jarl Priel araoc'h, ur c'hendeziñ personel-meurbet eus ar yezh lennegezh e-giz m'eo bet legadet dimp gant GWALARN hag eus ar yezh desket gantañ war barlenn e vamm.

Marv un den seurt-se, anezhañ ur skrivagner ken donezonet a zo evit hor pobl hag evit hor sevenadur ur c'holl diremed.

• •

A dra-sur, n'hon eus ket e gollet penn-da-benn, rak lezet en deus ganimp en e oberennoù ar pep gwellañ anezhñ e-unan.

E soñj a oa dastum e gontadennoù hag e zanevelloù e 4 pe 5 kelc'hgelaouenn, ha Barr-Heol er c'hentañ renk, evit sevel ganto ul levr e doare «*Buhez ha Faltazi*», 3



ha spi hon eus e c'hello an dra-se bezañ kaset da benn hep re a zale.

Ouzhpenn talvoudegezh e labour war dachenn al Lennegazh rik a ra eus E.B. unan eus hor gwellañ konterien, ha diouzh an hengoun a-wechall, ha marteze a-walc'h an hini diwezhañ eus al lignez, e tegas e labour ur c'hempouez talvoudus d'al lusk kasas a vount skrivagnerien vrezhonek 'zo ober gant ur yezh chimik, pounner, «sofistikel», leun-kouch a c'herioù-nevez, ha nebeut-tre diouzh spered hag ijin ar brezhoneg.

Ur brezhoneg bev ez eo dreist pep tra brezhoneg E.B. ket ur yezh arkeologel ha «nevet» graet hepken evit un nebeudig tud sklerijennet.

• •

Met E.B. ne deo ket hepken ur skrivagner donezet-kaer, ur c'hristen eo bet ivez hag ur Breizhad gwirion, hag evit ar re o deus e anavezet, an hini gwellañ eus ar vignoned.

Penn-da-benn e vuhez ez eo chomet feal da relijion e vugaleaj a zo bet ivez hini e zeiz diwezhañ. Desavet en un aergelc'h a feiz hag a zoujañs-Doue, e soñjas ur pennadig mont da veleg, a-raok kaout e savidigezh un tiegezh, e c'halvidigezh wirion.

Hep bezañ bet nepred emellet er politikerezh, en deus stourmet a-hed e vuhez evit Breizh, e vammvro nemeti, hag evit ar yezh.

Stourm disked, pemdeziek, boutin, efedus. Pa veze ar re all oc'h ober dibunadegoù war-lerc'h skritelloù, pe o tistagañ prezegennoù entanet, en a dremen e amzer o skrivañ brezhoneg. Atav e komze brezhoneg ouzh e vugale-vihan evit na vefe ket torret ar chadenn-sour a liamm ar rummadoù nevez ouzh an hendadoù.

Studiañ a rae dibaouez ha deskiñ d'e ziskibled-etre e labourioù ofisiel, istor ar Vro ne c'heller ket heptañ deskiñ he c'harout.

Bez'voe evidomp-holl ur mignon hep e bar ; a-dreuz Breizh hag en tu-hont, betek ar broioù keltiek tramor, en doa ur rouedad stank a vignoned ne ehane ket a genskrivañ ganto, hag a zeue alies da azezañ ouzh e daol digor bepred evel e galon. Atav e oa prest da rentañ servij, zoken ar servijoù diaesañ.

E di Mur ma oa deuet da chom goude ma oa bet rediet gant e yec'hed da gemer e retred a-raok ar c'houlz, a oa deuet da vezañ ul lec'h a berc'herinded, kement ha ken bihan ma ne oa ken gouest da labourat ken e-pad ar vakañsoù, e-kerz an hañv, dalc'het evel ma veze gant ar weladennerien, gwashoc'h eget un depute bennak pe ur c'huzulier-kanton !

Karout a rae e diegezh a-greiz e galon hag e veve e kumuniezh gant ar re vev hag ar re varv. Ul lodenn vras eus e oberennoù e brezhoneg pe e galleg a zo gouestlet dezho. Bet eo bet an hini gwellañ eus ar priedoù, eus an tadoù, eus an tadoù-kozh.

Marv e vab nemetañ, Erwan, hag a oa evel un adskeudenn vev anezhañ, hag en devoa lakaet ennañ goanag e vuhez a oa bet un taol spontus evitañ ; asantet en devoa dezhañ evelato, ha pleget da youl Doue, hep kompren.

Leun e veze bepred e di gant e vugale-vihan a gemere alies e pañsion ; hag ordinal e veze unan anezho war goul e vrec'h pe war e zaoulin, pa zeue tud d'hen gweladenñ, zoken e-pad ma veze o labourat. Ha war galz eus e zornskridoù e veler dindan e skritur-ef skrabadennoù-yez e vugale-vihan.

• •

Setu pezh a voe Ernest, hor mignon, unan eus gwellañ tud ez eus tu da gejañ ganto war an douar-mañ. Doue en deus hen galvet davetañ ha bremañ dimp-ni hag a zo chomet war e lerc'h e seblant ar bed bezañ goullto-eston.

Herve Lanndiern  
(1-1-1978)  
«Malonce»

## Pupli

Testeni va aberzh d'an dour a garan  
Stell va c'harantez d'ar Vro 'zo va hini  
Em yaouankiz tenerañ  
Va c'halon leun a spi  
War c'hlann ur wazhig seder  
E dour boull o hiboud  
Am boa plantet bod ha bod  
Gant Feiz, Doujañs ha Preder  
An danvez gwez pupli

Burzud ar Vuhez  
An Heol hag an Dour  
C'hwezhañ reas ar bronsoù  
War o ruskenn flour  
Ar sev o sevel stoulik  
Eus ar gwrizioù bihan nevez  
Glazañ reas prim ar bodoù

An danvez gwez pupli

A. Duval

• •

## Dirak an Dismant

Tadoù-you va c'hendadoù  
Eus Gwenva ar Gelled  
Gwellt o tiverañ va daeroù

War ho labour dismantret  
Nag a boan, nag a c'hwezenn  
Oa kousket deoc'h ar c'hleuzioù  
Plantet 'poo koad war o leinoù  
Klaz ha goudor pep tachenn  
Badezet park hag ogel  
'Vel ma vez graet d'ur bugel.

Disvadezet int-i bremañ  
N'eus mul na park nag ogel  
Na koad, na grad, na lann  
Digor holl d'ar pevar avel !  
— Ha d'an adlodennañ —  
Ur gouelec'h arrok pell.

... Drouklazherien an Natur  
'Deus touret ar c'hleuzioù  
A ! Kalonioù dinatur !  
Labour hor Hendadoù  
Kened maazioù ar Gelled :  
Pep park oa un neved...  
En o sav war bap kleuz  
Ar gwez 'vel gedourien  
Pa rae 'n avel e reuz  
Ar gwez oa o difenn  
Difenn an tavadoù  
Goudor ar chatal mut  
Kanañ raent evel ograoù  
Bremañ 'n dour 'zo mut  
Mut al laboused... hag an dud.

A. Duval  
(16 C'hwevrer 78)

# AR PROSEZ WAR VUHEZ HA BURZHDOÙ SANT-ERWAN peñse kervouster

(La Borderie, paj. 194-196)

Ur sadornvezh a viz Mezheven ; er bloaz 1314 e oa aet morerien eus parrez Pleuveur-Gaoter da gerc'hat merl da aostez Enez Vaodez, en aber an Trev. Eizh e oant; mestr ar vag a oa Yann ar Gorreg, mab ar Gorreg, eus parrez Pleuveur-Gaoter, un den e-kreiz e nerzh pa ne oa nemet 24 bloaz bennak. Neuze e oa gantañ Eozen ar Gwiader, Amon Skuber, Jakez Gwilhoù Vihan ha pevar all. Ur garg vat o devoa graet, hag edont o tanzen donet d'ar gêr, pa savas un tempest eus

ar gwashañ a-daol-trumm. Kent n'o dije bet amzer ar vorerien d'an em soñjal, e oa aet ar vag da stokañ moarvat ouzh ur garreg ha torret-mik ha darc'havet an dud er mor.

Yann ar Gorreg, patron ar vag, kerkent ha ma welas e pebezh riski edo, en em erbedas ouzh Sant Erwan : «Aotrou Sant Erwan, emazañ, va sikourit ! En em ouestlañ a ran deoc'h, hag e prometan, mar deuan a-benn da dec'hel eus ar risk-mañ, mont en noazh-pilh betek ho pezh, mar salvit din va buhez !».

Derc'hel a rae da c'hervel Sant Erwan da zonet d'e sikour. An den kaezh ne oule ket neuial hag e konte diwezhatoc'h d'ar varnerien karget eus prosez Sant Erwan : «*War-dro teir eur e oa en em gavet an darvoud-se ganin ; ur burzhud a reas Sant Erwan em c'heñver, rak ne ouien ket neuial, ha sur-mat, mañ ne vijen ket bet en em ouestlet da Sant Erwan, e vijen bet bezuet evel ar re all... Eizh e oamp hag ar re all a oa aet d'ar strad raktal, nemet Eozen ar Gwiader ; hennezh ivez a bedas Sant Erwan, rak klevet am boa se gantañ da c'houde. Hag eñ kennebeut all, ne oule ket neuial... Ha kaeroc'h 'zo: kerkent hag am boa graet va gouestl da Sant Erwan, e tavas ar gorventenn hag e teuas kalmijenn vras... Ur pennad brav avat, a rankis chom evel-se er mor; eus adalek teir eur betek kuzh-heol, eus adalek Enez-Vaodez betek da gehver Kervouster, war-du Lezardrev. Neuze ec'h erruas morærien, amezjein din eus Pleuveur-Gaoter, hag am savas me hag Eozen ar Gwiader. Ar re all a oa bezuet.*

Se 'oa d'ar sadorn, e-kerz miz Mezheven, evel m'am eus lavaret deoc'h. A-benn al lun war-lerc'h, e oamp aet hon-daou, Eozen ar Gwiader ha me, betek bez Sant Erwan, hag en noazh evel m'hor boa prometet. Ya, c'hwezek vloaz 'zo abaoe».

#### Notennoù

Klasket hon eus kendeuziñ testeni Yann ar Gorreg hag hini Eozen ar Gwiader. Troet hon eus war-eeun diwar al latin e brezhoneg, an anvioù ha na seblant bezañ kudenn ebet war ar ster anezho. Evel ma ouzer e vez dalc'hmat an anvioù-tud en-dro-c'heneil (genitive) ; Yann ar GORREG = *Johannes Tardi (tardus)*. Hemañ hon eus lakaet da vestr ar vag, dre ma oa eñ ar sturier, al levier, rak lavarout a ra : «*tra m'edon o sturiañ*» (cum duceret = *p'edo o sturiañ*, eme al latin).

Eozen ar GWIADER = *Yvo Textoris (Textor)*. Hemañ avat, a vez graet anezhañ e latin : *Yvo TEXTORIS*, filius Oliverii CECI, da lavarout eo Eozen ar Gwiader, mab da Olier an Dall. Techet omp da grediñ e oa GWIADER anv-familh hon den, ha neuze DALL, lesanv e dad. Met marteze ez eo ar c'hontrol eo a zo gwir, ma seller Gwiader evel un anv-micher ha netra ken.

Jafrez Gwilhoù Vihan = *Gaufridus Guilloti Parvi*. Amañ avat, e c'hellfed treiñ ivez Jafrez Gwilhoù ar Bihan, peogwir e

c'hell talvezout ar ger Parvi (Parvus) evel anv-familh pe anv-gwan-doareañ.

Skuber (latin) : *Sceparii (Sceparius)*. N'e gaver e geriadur ebet an anv SCEPARIUS. Zoken e Ducange. Setu perak e kinnigomp lenn *Scoparius*, da lavarout eo *Skuber, Skubour*, marteze *Skubellenner* pe *Skubeller*. R. Hemon a ro *Skubeller* en e c'heriadur ; an hini a ra pe a werzh skubellennoù. F. Gourvil ne ra meneg ebet eus ar ger en e levr *Noms de famille*. Kemer neuze *Scoparius* evel un anv-micher ha netra ken, pe evel un anv-familh, da dostaat ouzh an anvioù all a gaver en destenn : *Textor*, ha re all evel *Faber* evit ar Gov, h.a. E Glossaire Ernod, ne deo ket meneget kennebeut evel anv-familh.

Lezardrev = skrivet Lesasdreau, ur fazi aezet da reizhañ.

Enez-Vaodez : el latin : *Inter sanctum Maudetum de Insula (Etre Sant Vaodez an Enez)*.

Pleuveur-Gaoter : teurel evezh ouzh al latin : *De Plebe-Magna Galteri*.

Hervez al latin'ez eo anet e tleer stagañ magna ouzh Plebe, evel anv-gwan. E 1330 e oa sellet ar ger MEUR evel anv-gwan ; hervez al latin, n'eus diazez ebet d'ar re a garfe gwelout er ger-se un anv-den ha treiñ neuze Pleuveur-G : parrez ar Meur. Ret e vefe klask prouennoù e lec'h all. N'tomp Parrez ar Maur. Ret e vefe klask prouennoù e lec'h all.

Notomp ivez ne giever mui den o tista-gañ Gaoter pe Goter, met Gotie, dre evel. an anv-familh Gaoter (*Gauthier*). Ur gallekadur moarvat.

Evit Kervouster n'eus diaezamant ebet oc'h adreiñ ar stumm brezhonek d'an anv latin *Villa (M) Moustier* paj. 195 ha *Villa (m) Moster*, paj. 196.

(Peñse Tud Plonez (paj. 228)

## peñse tud plonez

Bez'e oa an droukchañs, evel ma vez lavaret, o c'hoari a-enep tud kornad-bro Lezardrev, rak ur miz goude peñse Kervouster, e miz Mezheven, e voe ur peñse all damdost eno, war-dro hanter miz Gouere, er memes bloaz, e 1314. E 1330, avat, ne oa nemet un test o tougen testeni,

diwar ar 5 a dud o devoa graet peñse, rak ne oa nemet unan anezho bev : tri anezho a oa bet bezuet hag an hini all hag en devoa tapet saveteiñ e vuhez a oa marv a-benn prosez Sant Erwan. Met klevit kentoc'h, hervez testeni Alan eus Landouezeg.

An Alan-se eus Landouezeg, a oa eus parrez Plonez, en eskopti Sant-Brieg, d'ar c'houlz-se. Gantañ e oa, moarvat o pesketa, peogwir ne gomzer ket eus «*terra marina*» = merl, en dro-mañ, - Jafrez Gwilhoù Vihan, Richard Gwilhoù Vihan, Amon Skoben ha Richard Gwilhoù Vras. War-dro hed un tenn-bir e oa ar vag pa voe skoet ouzh ur garreg gant ar lanv. O welout e pebez riski edo, Alan en em ouestlas da Sant Erwan e brezhoneg (in bretonico) ha gant feiz ha devosion, er stumm-mañ : «*Sant Erwan, me en em ro deoc'h, evit ma plijo ganeoc'h va degas d'ur gwir gofezion, ha ve zennañ eus an dahjer-mañ, hag e prometan profañ deoc'h 4 diner bep bloaz*». A-boan ma oa echu e bedenn gantañ ma'z eas ar vag a-dammoù hag e voent taolet holl er mor. Alan a yeas da strad ar mor en ur lonkañ ur bern dour a antreas, emezañ, dre e c'henoù hag e beultrin betek e gof (1). Gant ar mor oc'h emouiñ e teuas en-dro war benn an dour, ha chom evel-se war c'horre. Tra ma oa evel-se taolet-ha-distaolet war an dour, setu m'en em ouestlas adarre da Sant Erwan, ha kerkent e savas eus ar vag, a-greiz ar mor, un tamm koad. Hag hemañ evel just, o tapout krog en tamm peñse-se, hag e chomas evel-se eus adalek 3 eur goude kreisteiz betek kuzh-heol. Neuze ec'h erruas daou zen, unan eus Pleuveur-Gaoter, Yann Kanig, en eskopti Treger, hag un all eus parrez Plonez, en eskopti Sant-Brieg, Alan Seven, mab da Andreu ar Braz. Ar re-mañ a dennas Alan er-maez an dour, hag ivez Richard Gwilhoù : hemañ ivez a oa en em ouestlet da Sant Erwan, ha setu perak, a lavare Alan eus a Landouezeg e oa bet saveteet eveltañ. A Richard-se, a oa marv a-benn 1330 ha setu perak n'emañ e anv e-touez an testoù. Ar re all avat a oa bet bezuet : Jafrez Gwilhoù Vihan, Richard Gwilhoù Vihan, ha neuze Amon (Hamon) Skoben.

#### Notennoù

Iskis a-walc'h ez eo gwelout div wech ar memes anv, en istor an daou beñse : Gaufridus Guilloti Parvi : Jafrez Gwilhoù Vihan. Met ne c'hell ket bezañ ar memes

den, peogwir e oa bet bezuet unan ur miz bennak kentoc'h. Ha war a seblant e oa ar Jafrez Gwilhoù kentañ eus Pleuveur-Gaoter hag hemañ moarvat eus Plonez.

Lavarout a reomp e ranke an eil Jafrez Gwilhoù bezañ eus parrez Plonez, rak an test e-unan, Alan, a oa eus Plonez ha c'hoazh ez eo merket eus peseurt kêriadenn eus Plonez edo : *Landehoez*. An anv gwirheñvelañ, evit *Landehoez*, ez eo Landouezeg (*Landouézec*, war ar c'hadrast) distaget *Landoueg*, e brezhoneg gant ar bouez-mouezh war Dou. Un anv evel *Touezeg* e rank bezañ, gant ar Z distaget *Th dous* en amzer Sant-Erwan. Merket eo bet an anv-se gant J. Loth, en e levr *Les noms des saints bretons* (1910) er bajenn 121. Hennezh eme Loth, en devoa e chapel e Plonez hag hennezh eo an Towedocus a gaver e buhez Sant-Paol Aorelian.

Merkomp penaos ez eo skrivet an anv PLONEZ amañ : *Ploenet*. Kement a fazioù a zo e-keñver an anvioù, en dornskrid embannet gant La Borderie, ken ne deo ket souezhus gwelout PLOENET amañ, daout ma c'hellfe an T bezañ evit an distagadur TH. Nemet fazioù a rafemp e kaver ur wech hepken ar stumm PLOENEZ, en dornskrid a studiomp, paj. 229, pa gomzer eus Herveus Golien, genidik eus parrez PLOENEZ. Bez'ez eus er bajenn 266 ur stumm all c'hoazh.

Herveus Golovia, parrochie Plebis Judi. Hep mar ebet, ez eus anv amañ eus Plonez, rak an Herve-se a oa eus Bro-Weloù, hag eus parrez «*Ploenez*» evel n'emaomp o paouez gwelout. O chom edo e Landreger ha nouspet gwec'h, eo meneget evel test. Ar skritur GOLIEU, GOLOVIA, GOLOVIE, h.a., a zo, na petra 'ta, stumm latin ar ger Gwelou : ar gwir stumm avat o vezañ Golovia. Neuze e vefe Plebis Judi da vezañ lennet Plebis Nudi La Borderie en un notenn, paj. 501, a ginnige lenn Plebs Nudi ha treiñ *Parrez an Neizh*. Evel just, n'en deus ur seurt diskleriadur chañs ebet da vezañ gwir. Dleout a ra bezañ ar wirionez gant J. Loth, pa ginnig kompren : parrez NEDD, met en ur reiñ d'an daou DD talvoudegezh an TH kalet...

Gwelet hon eus e oa bet tennet Alan eus a Landouezeg eus an dour gant Yann Kanig hag Alan Seven, mab Andreu ar Braz. An hini kentañ eus Pleuveur-Gaoter hag an eil eus a Blonez.

KANIG (e latin Johannes Canic). Gant

ur wrizienn evel **KAN** pe **Kann** ez eus peadra da ginnig meur a ster. Hogen, d'hor meno, an eunef hag an aezetañ ez eo kemer an anv evel m'emañ ha kompren : **Houad**. Anavezet mat ez eo ar ger **KANIG** e Bro-Dreger, gant **KANIGOU** el liester, dreist-holl e Bro-Landreger, e Treger vihan hag er Gwelou. N'eo ket sur tamm ebet e teufe diwar ar galleg, evel ma seblante a-walc'h. Un anv o tonet diwar gri al labous, un anv o tazrevell e gri, ha netra ken. Selaoit ur vamm-gozh o lavarout d'he bugale vihan : «*Deomp da welout kan-kan* !» da lavarout eo, mont da welout an houiñ (hiwidi, e yezh Treger). Ha n'eo ket tamm ebet «*Kouak! kouak!*» pe «*Koef-koeff*» eo a ra an houiñ e brezhoneg, met «*Kan-kan!*» gant un a hir-tre. Nebeut-tre a dud a oar kement-se bremañ, rak ne veze ket savet nemeur a houiñ gwechall, en tiez-feurm. Gwazi avat, ne lavaran ket (Gwai-ed, e yezh Treger). Netra iskis eta en anv Yann Kanig pe Yann Ganig, lesanv pe anv-familh. Unan o vale ével un houad !

An eil saveteur a oa eus a Blonez eta hag e oa e anv : **Alanus Seven Andree Magni**, en destenn latin. Ar gwellañ stumm da dreiñ marteze e vefe : *Alan Seven (Mab) Andree ar Braz*. Gant reiñ d'ar ger **seven** e dalvoudegezh kozh, *kreñv, yac'h, bagol*. Ne welomp ket traoù all.

Lezet hon eus da echuiñ an anv diaesañ holl : **Hamo filius Scobennius**. Hamo (Amon, Hamon) a zo sklaer. Anv e dad avat! **Scobennius** ? Ne deo ket un anv latin; ret eo krediñ ez eo un anv brezhonek staget outañ ul lost latinek. Lennomp neuze **SCOBEN(N)**. Ar gudenn a chom ez eo kudenn un **N** pe zaou **N**. Ne gredomp e vefe un dra a-bouez, hag e lennomp neuze, hep mui gortoz, **SKOBEN** hag e rannomp ar ger : **SKO-BEN** hag e teu sklaer-tre an anv : **SKO** diwar **skelñ**, ha **BEN** (gant un **E** hir, evel-just) diwarar verb **Benañ** (*tailhañ, troc'hañ*) : **SKO (h) TROC'H**. Lesanv un den *kreñv, pe ur fougaser bennak, hag a droc'h* kerent ha ma sko ? Daoust ma ne glot ket ervat ar ster, e c'hellfed tostaat al latin «*punctim et caesim*» hag ar galleg anavezet «*estoc et de taille*». Un den oc'h ober «*varc'heger*» ?

An anv **SCUBAN** hag a gaver e dielleur Redon ha meneger gant L. Fleuriot, en e c'heriadur eus an Henvezhoneg, paj. 304, a zo heñvel a-walc'h ouzh hor **SKOBEN**, met ne c'hellomp lavarout hiroc'h.

#### (1) - ADNOTENN

*Evel-hen emañ al latin «et aqua maris per os ipsius et pectus ejus usque ad viscera, et non ultra quod sentiret, subintravit». An islavarenn «et non ultra quod sentiret» a zo iskis a-walc'h ha ne c'hellomp ket lavaret e komprenomp anezhi «Hep mont pelloc'h, e kement ha ma sante e-unan» pe «e kement ha m'en em rente kont» ?*

#### DAOUST HAG E OUIE SANT ERWAN GRESIANEG ?

En em c'houlennet hor boa hag-eñ ne oa ket anv gwreg Riwallon, muziker Prizieg degemer e ti Sant Erwan, un anv gresianek roet dezhi dre fent, gant Sant Erwan, lakomp, pe unan all, en askont d'hec'h ampartz da ganañ : **PANTONADA** : a gan pep tra, pe, kanerez pep tra.

Skrivet hor boa d'an Aotrou F.R. kelenner e Skol-Veur Anjev, un den gouizie-kmeurbet war istor ar Grennamzer. Ha diskouezet en devoa en e respont, ne oa ket gouest Sant Erwan da reiñ ul lesanv evel-se, dre ma ne c'helle ket gouzout gresianeg. O vont da embann e respont edomp p'hon eus bet ansoudegezh eus ur studiaden gant an Itron de Romilly (Bulletin de l'Association Guillaume Budé, 1977 n-enn 1) : **CINQ SIECLES D'HELLENISME EN FRANCE**, studiaden hag a laka diwar-krenn ne ouie ket Sant Erwan gresianeg. Setu amañ un nebeut bloaziadoù. E 1311, e sened Vienna, e kinniger sevel div gador da gelennañ gresianeg e pep Skol-Veur. Er c'hantved war-lerc'h, ar Pab Nikolaz-V a zastumas levrioù gresianeg hag a erbedas ober an droidigezh anezho. E Pariz e 1430 ez eus ur Golaj o c'houlenn groñs ma vefe savet kentelioù war ar gresianeg, an hebreeg hag ar c'haldeeg... E gwirionez ne grogas an dud da studiañ ar gresianeg nemet pa zeus Gresianed da glask repu e broioù ar C'hornog, goude ma oa bet kemeret Konstantinopl e 1453 gant an Durked. Anat eo ne veze ket desket gresianeg en amzer Sant Erwan, e Pariz hag e Orleans e-lec'h ma reas e studioù (1267-1279). Ha neuze Sant Tomaz Akuinaz e-unan ne ouie ket gresianeg hag a ranke kaout ur jubennour evit ar gresianeg. Studiet e veze ar skrivagnerien c'hresianek e troidigezhioù latin, ha zoken e troidigezhioù latinek diwar droidigezhioù siriek graet o-unan diwar ar gresianeg ! Meur ha meur a dra direzis ha faos e veze a dra siur el labourioù latin a-barzh ar fin... **Klrg**

## BRO GOZH HON TADOÙ

### PER AR MAENOUR

Ar re a oa er skol hanter-kant vloaz 'zo bremañ er devije sur-mat meur a dra da gemmañ er pezh a oa bet desket dezho d'ar mare-se. Rak meur a dra nevez a zo bet lakaet war-wel abaoe, n'eo ket hepken kavadennoù nevez evit an amzer da zont, met ivez dizoladennoù evit ar pezh a sell hon amzer dreanenet.

Gwechall ne veze arvar ebet e spered hor c'helennerien : ar sklerijenn a zeue eus ar Reter. Ul lodenn wirionez a oa sur-mat e kement-se ; met un tammig untuek da welout an traoù e oa ivez. Gwir eo ez eo bet renet buhez speredel broioù ar Gornaoueg gant pobloù hag o devoa tennet o mad eus an herezh lezet ganto gant pobloù ar reter (ur reter hag a vije tost d'ur gevred evidomp) : an testenioù diwar kentañ diwar-benn «Istor ar pobloù sevenaet» a zeu deomp eus Egipt (Piramidennoù !) hag eus Mesopotamia. Ac'hano en em ledas ar sevenadur war-zu inizi Bro-C'hres (Krete) ; alese neuze etrezek an douar-bras. Hag eus Bro-C'hres e reas ul lamm war gostez an Itali, ha pelloc'h d'en em skignañ war ar pezh a zo bremañ ar Spagn, koulz ha war ar peurrest eus Europa. Diwar an tu-se dreist-holl eo e vije bet degaset war an tu-mañ ar boaz da sevel tiez-mein, ar re-mañ o lezel, anat eo, muic'h a roudoù war o lerc'h eget ar foukennoù koad. Kreñvaet eo bet c'hoazh levezon ar Reter war ar bed kozh gant nerzh ar relijionoù a zo bet o rin en tu-se eus ar bed : Yuzevien, Kristenien ha Muzulmiz.

Setu marvat perak ez eus bet graet **hentoù roman** eus an holl hentoù kozh a gaved er vro-mañ ha **Kampoù Kezar** eus dilerc'hiadoù holl lec'hioù kreñv an Henamzer. Pell 'zo bremañ koulskoude e toueter ez eo ar pep brasañ eus an «hentoù roman»

nag eus «Kampoù Kezar» kalz koshoc'h eget donedigezh ar Romaned dre amañ.

\*  
\*

Nevez 'zo em eus bet digarez da lenn ur pennad-skrid bet savet gant an aotrou Colin Renfrew, kelenner war an Hendraoueriezh e Skol-Veur Southampton, e Breizh-Veur. Hag er pennad-se e kaver peadra da sebeziñ ar re a zo bet o teskiñ istor un nebeud bloavezhioù 'zo. Ha ni, e Breizh, hon eus kalz da zeskiñ diwar ar pezh a gaver da lenn er pennad-se. Setu perak e fell din reiñ amañ da heul un diverra eus ar pezh a gaver displeget ennañ.

Pa oa aozet ar pennad c'hoazh studier, en devoa bet digarez da vont da Enez v/Malta, hag a zo er Mor Kreiz, war-dro kant kilometr er Su da enez vras Sikilia. Eno en devoa bet digarez da ober ansoudegezh gant restajoù eus ar pezh a c'helle bezañ bet kestall pe azeuldioù. Ha d'ar mare-se e oa bet dedennet-tre gant an dilerc'hiadoù-se eus an amzer gozh; en o zouez e oa pikolioù skeudennoù tud, benet e maen-raz ar vro, anezho merc'hed «maget-mat», pa na ve ken. Met ne ouie ket e oa dirak e zaulagad neuze koshañ temploù maen anavezet bremañ er bed-mañ, na kennebeut all koshañ skeudenn den brasoc'h eget un den gwir a zo er bed.

D'ar mare-se, ugent vloaz 'zo bremañ, e soñjed e c'helle ar savadurioù-se bezañ bet savet war-dro 1 800 vloaz a-raok donedigezh ar C'hrist, da lavarout eo war-dro 3 800 vloaz 'zo bremañ, d'ar muiañ. D'ar c'houlz-se ne oa anavezet-mat, e-touez an dilerc'hiadoù koshañ, nemet oad re an Egipt, ha neuze hini re Sumer, e Mesopotamia. D'ar re goshañ-se e roed neuze un oad



a bemp mil bloaz. (Peurvuiañ e vez roet oad an dilerc'hiadoù kozh en un niver bloavezhioù kent donedigezh ar C'hrist, met evel ma tostaomp bremañ ouzh ar bloavezh daou vil, e kavan eunoc'h reiñ an oad e-keñver an amzer vremañ. Evit kaout an hini a-raok ar C'hrist ne vo nemet lemel 2 000 kuit).

Pa glasked sevel henistor ar bed european ne oa tu eta, gwechall, nemet da loc'h eus an diazezoù oad-se. E Malta, e kaver, en hini brasañ eus an temploù, hini Tarxien, mein garant enno troellennoù hag an dud a skiant a lavare e tenne an troellennoù-se d'ar re a gaved e Mukenae, e Bro-C'hres, ha dre gefveriadur gant re all eus Egipt e roed d'ar re-se un oad a 3 600 vloaz. Eus «oadvezh an arem» e vijent bet; gouzout a reer e kaver troellennoù eus ar seurt-se ivez garantet er vein e Breizh (inizi ar Mor Bihan) koulz hag en Iwerzhon. Hag anat e oa evit an holl e oa en em skignet tamm-ha-tamm kiz an troellennoù eus Egipt da C'hres, ac'hano da v/Malta, d'ar Spagn ha vroioù all ar C'huzh-Heol.

Honnezh a oa ar gredenn ivez evit ar beziadurioù mein eus «Oadvezh ar Vein-Veur», hag a gaver ken stank, n'eo ket hepken amañ e Breizh, met en holl vroioù a ya eus Spagn hag ar Portugal betek Bro-Skos ha zoken Skandinavia. Rak en Enez Krete e ouied e oa ivez «beziou ront» hag o devoa un tamm heñvelidigezh gant ar re a gaved er Spagn. Hag evel ma ouied e oa bet savet ar re-mañ war-dro 4 600 vloaz 'zo, e kreded, anat eo, ez eo moraeien aet eus Krete da drevadenñ ar Spagn eo o devoa kaset d'o heul ar c'hiz da lakaat korfoù o re varv dindan savadurioù maen. Hag eus arvor ar Mor Kreiz e vijent en em skignet pelloc'h, ha tamm-ha-tamm, goude a-hed aodoù ar Mor Atlantel ha re Mor an Norzh. E doare ma vije ar re goshañ anezho war-dro 4 200 vloaz e Breizh Vihan, betek tizhout Inizi Ork, e penn Norzh ar Skos war-dro 3 700 vloaz 'zo.

A oa brav-kaer; ha tre diouzh doare kelennadurezh ar skolioù: ar sklerijenn o parañ war vroioù ar Sav-Heol, hag oc'h en em ledañ tamm-ha-tamm etrezek ar C'huzh-Heol ha «Mor Skorn an Hanter-Noz»: Egiptiz ha Mesopotamiz; Hellas; Roma; Gallia; Bro-C'hall; Bro-Saoz...

Ar c'hemm bras a zeuas diwar studi nerzh ar bannoù a vez skignet gant an holl zanvezioù natur. War-dro ar bloavezhioù

'40 eus ar c'hantved-mañ e krogas un amerikan, an Dr Willard F. Libby, da studiañ penaos e vije tu da reiñ un oad resis da zilerc'hiadoù kozh gant harp ar c'harbon (pe glaou) skinaouek, ar radiokarbon pe karbon 14 (an danvez ordinal eus ar glaou o vezañ ar c'harbon 12). Gouzout a reer ez eo ar pep brasañ eus an danvezennoù, pe «korfoù» natur, ur meskaj eus meur a isotop, anezho peurvuiañ unan oc'h ober ar bras eus an danvez, an hini pe ar re all oc'h ober hepken ul lodennig vihan eus an danvez, ha ret e vez ober studioù pizh evit dont a-benn d'o lakaat anat. E pep korf bev, pe bet bev, e kaver karbon, hag ur rannig eus ar c'harbon-se a zo hini skinaouek. Kementad ar c'harbon 14 skinaouek-se keñveriet ouzh hini ar c'harbon hollek a chom digemm keit ha ma chom bev ar c'horf; met dal ma vez marv e krog da gemmañ ar c'heñver a zo etrezo, rak ar c'harbon a grog da goll neuze darn eus an danvez. Seul nebutoc'h a chomo eus an hini 14 e-keñver an hini all, seul bell amzer a vo abaoe m'eo marvet ar c'horf, pe e vo en eskern an dud pe al loened a dalvezze dezho da vevañ, pe e ve er c'heñved a raent tan gantañ pe er c'hoad a savent o ziez gantañ.

En ur reizhañ an oad degemeret betek neuze gant ar pezh a voe kavet en ur vuzuliñ ar radiokarbon, e voe kavet ne glote ket bepred mat ar pezh a greded gant an oadoù nevez kavet. Beziou Los Millares, e Su Bro-Spagn hag a greded bezañ war-dro 4 600 vloaz abaoe ma oant bet digoret, a voe kavet bezañ daou-c'hant yaouankoc'h eget se, hag an oad-se a 4 400 vloaz a voe kavet ivez evit Tarxien e Malta. E Breizh e roed 4 400 vloaz da veziou eus Enez Karn, e parrez Gwitalmeze, e Leon, met en ur studiañ ar c'harbon e pignas an oad anezho da 5 300 vloaz, ha peogwir e oa gwelet evel-se e oant nav-c'hant vloaz koshoc'h eget re ar Spagn e oa diaes d'ar re-mañ bezañ bet kemeret evel skouer evit sevel re Vreizh. Ha savadur bras Stonehenge, e Bro-Saoz, hag a roed dezhañ 3 500 vloaz betek neuze (dre ma soñjed e oa bet levezonet gant skouerioù o tont eus Mukenae) a dapas kaout 3 700 vloaz, ar pezh a lakaas an tamm disfiz war an darempredoù a c'helle bezañ bet etre an daou lec'h. Ha savadur Maeshowe, en Inizi Ork a voe kavet dezhañ ivez daou-c'hant vloaz muic'h: 3 900 e-lec'h 3 700.

Er penn-kentañ e oa bet lakaet da wir e

vane digemm a-hed ar c'hantvedoù ar c'heñver a oa etre karbon hollek an aer, ha dre-se ivez hini ar c'horfoù bev, hag hini ar c'harbon 14, rak ne anavezad doare ebet da c'houzout ha bez e vije bet ur c'hemm bennak. Evit dont da-benn d'her gouzout e oa ret kavout un «horolaj» debrezek karbon evit merkañ an amzer...

Un horolaj eus ar seurt-se a anavezet mat; ha kement-se en holl vroioù ma vez un heuliad hafv (= amzer ar c'hresk) ha goañv (= amzer an ehan). Kement-se evit ar plant, ha dreist pep tra evit ar gwez. An holl dud o deus bet gwelet ur wezenn troc'het gant an heskenn a oar mat ez eus tu da c'houzout oad ar wezenn-se diouzh niver ar c'helc'hioù a vez er c'hoad. Pep kalc'h o verkañ ur bloavezhad ober koad. Met hon horolaj a zo bet savet he fouezioù dezhi ur wech hepken: gwez hor bro ne badont d'ar muiañ nemet un nebeud kantvloavezhioù, c'hoazh pa ne zeu ket an den d'o diskar e barr o yaouankiz! Hag anat eo ne dalvezint ket kalz a dra evit reiñ keloù diwar-benn darvoudoù c'hoarvezet meur a vil bloaz 'zo.

A-raok mont pelloc'h e vo mat din marteze displegañ ez eus tu da c'houzout oad ur wezenn hep na vije ret heskennat houmañ. Evel ma'z eus bet ijinet talaroù kleuz evit sondañ diabarzh an douar, evit gwelout petra a zo ennañ, hag ivez oad pep gwiskad, evelse o deus ar goadourien ijinet doare talaroù kleuz evit sondañ ivez diabarzh ar gwez, evit gouzout, da skouer, ha yac'h eo koad ur wezenn a-raok he diskar. Hag ivez mar bez c'hoant da da c'houzout pe oad he deus, an talar o troc'hañ ur seurt krannenn goad eus ar rusk betek kalonenn ar wezenn, ur granenn hag a ro tu goude da gontañ an niver kelc'hioù kresk a vez enni. Evit ar skiantour o devez ar c'helc'hioù-se talvoudegezh all eget hepken reiñ un oad d'ar gwez. Rak kresk a vez enni. Evit ar skiantour o devez ar c'helc'hioù koad a lavar meur a dra en tu-hont d'an oad, lavarout a reont ivez allies peseurt amzer a vo bet d'ar mare ma rae ar wezenn he c'hresk. Tu a zo bet evel-se da adkavout bloavezhioù sec'hor vras, da skouer, a vez kavet meneged en dielloù, met ne ouezer ket just ar bloaz resis. Rak pa vez sec'hor e kresko kalz nebutoc'h ar c'hoad eget er bloavezhioù ma vo bet dour a-walc'h, ha dreist-holl e paouezo ar c'hoad d'en em ober a-daol-trumm pa vo santet an diouer a zour gant ar gwizioù; anat eo ivez e vo e «finoc'h» greñ ar c'hoad er

bloavezhioù sec'h eget er re leizh e-pad an hafv, hag ingaloc'h e vo ivez er bloavezhioù ma vo bet ingal an amzer. Met evit ober studioù eus ar seurt-se e vo ret labourat war meur a wezenn er memes karter, o vezañ ma c'helle unan eus ar gwez bezañ bet levezonet gant un darvoud bennak ha ne dalvez nemet evit he-unan.

Ha setu koulskoude ma'z eus bet kavet un horolaj hag a chom savet he fouezioù e-pad pelloc'h eget hini gwez hor broioù-ni. Du-hont, pignet uhel e Menezioù Gwenn California, e vez kavet ur seurt gwez tort ha korigamm, pikolioù kefiou hag a ra an Amerikaned anezho «bristlecone pines», ar pezh a vefe un dra bennak evel pin avaloù spernaouek e brezhoneg. Ma, ar gwez-se eo koshañ traoù bev a zo anavezet war an douar. Hiniennoù anezho, bepred bev, a zo krog da greskiñ ouzhpenn pevar mil bloaz 'zo!... Evit doare e ro ar gwez-se koad «divreinus», rak, en ur labourat war un dro war ar gwez bev hag ar re varv, ez eo deuet a-benn ur c'helenner eus Skol-Veur an Arizona, da sevel ur rigenn-oad dre gelc'hioù gwez a gas betek tost da 6 300 vloaz a-raok ar C'hrist, ar pezh a ra ouzhpenn eizh mil bloaz 'zo bremañ!

Koad «bristlecone pine» eo en deus servijet eta da studiañ emzalc'h ar c'harbon 14 a-hed ar bloavezhioù. Ur c'helenner eus Skol-Veur California, e San Diego, en deus studiet kementad karbon 14 pep hini eus kelc'hioù koad bloavezhiek ar gwez-se; ur pezhad-mat a labour a basianted en deus an den-se, Hans E. Suess, kaset da benn aze. An daolenn en deus savet a ziskouez mat e oa «direizhderioù» er c'heñver karbon 14/karbon hollek e-pad an amzerioù. Hag anat e oa e veze kavet bepred ur c'hementad re zister a garbon 14 pa'z aed pelloc'h eget tri mil bloaz 'zo, da lavarout eo e veze re verr an amzer a veze muzulet gant an doare kozh. Diwar an daolenn-se eo bet eta reizhet an oadoù kozh: bez Enez Karn, hag a veze roet dezhañ 5 300 vloaz gant ar radiokarbon a giz kozh, a vez roet dezhañ bremañ, ur wech dalc'het kont eus ar c'hementad karbon 14 a gaver e kelc'hiennoù koad ar pin amerikan, un oad a 6 000 bloaz. Koshaet a seizh-kant vloaz en un taol!

Ar pezh en deus lakaet an tammig enezenn a netra-se da zont da vezañ unan eus lec'hioù-meur ar bed: *eno emañ koshañ savadur maen ar bed-holl*, kement ha ma c'heller gouzout bremañ da

vihanañ, 900 vloaz koshoc'h eget beziou Los Millares, hag a zo bet koshaet ivez koulskoude ha kavet dezho adarre ar memes oad hag azeuldiou Tarxien e Malta. Ha savadur Stonehenge a roer bremañ dezhañ 4 100 vloaz, un tammig brav a oad ivez. Ha c'hoazh e kreded e oa bet sikouret e sevel gant ijinourien deut eus Mukenae, c'hwezek-kant vloaz 'zo l...

Kement-se a laka anat mat e krogas ar «sevenadur» er rann-mañ eus an Europ ken abred ha n'eus forzh pe lec'h all, hag eo bet ar broioù-mañ kement «kreizenn ar bed» ha m'eo bet broioù ar Reter Tostañ, zoken mar deo bet ar re-mañ trec'h e mareoù a zo. Hor broioù eo a zo bet er penn kentañ ivez evit ar pezh a sell al labour-douar hag ar magañ loened, ar pezh a zispleg ivez e vijent bet trec'het allies gant pobladoù all ha na oant ket ken stag ouzh an douar, hag a zeue eus an diavaez da ober brezel. Ar Romaned a voe, a-raok ar C'hermaned, ar bobl alouberien hag a roas «he liv» da walarn Europa. Met Europa a-bezh eo a seblant bezañ bet kalz muioc'h en araog eget na grede d'an istorourien ofisiel ur mare a oa. Hag ar Varbaned ne oant ket ken barbar-se bepred. Kavadennoù bet graet er bloavezhioù diwezhañ-mañ e traonienn an Donav

a laka anat e oad krog eno da ober binvioù kouevr war-dro 6 500 vloaz 'zo. Hag en ur bez bet graet war-dro mil bloaz diwezhatoc'h, ez eus bet kavet bravigoù aour labourer gant ampartiz ha, kenteliusoc'h c'hoazh, pigelloù, morzholioù ha gennoù kouevr, heñvel-bras ouzh ar c'hlavioù a vez en implij bremañ c'hoazh, ar pezh a ziskouez ivez ez eo bet kavet abred ar stummoù dereatañ da reiñ d'ar binvioù labour.

Kement-se a zo plijus evidomp. Diskouez a ra da nebeutañ e oa ar pobloù a oa amañ en hor raok pell eus bezañ ken gouez ha ma oa c'hoant d'hol lakaat da grediñ. Hor bed a-vremañ n'eo ket bet savet en un nebeud bloavezhioù, na zoken en un nebeud kañvedoù, met gant poan an holl rummadoù an eil war-lerc'h egile, a-wechoù o vont war-raok, a-wechoù ivez o vont war-gil, hervez an degouezhioù. Sur-mat ez eus bet emgannoù, brezelioù, lazhadegoù, merventioù, met ivez labour aketus ha dalc'hus. Ha kement-se holl eo hol laka da vezañ stag ouzh ar rummadoù tremenet ha da boaniañ ivez da lezel war hol lerc'h un dra bennak ha ne vo ket hepen labour distruj.

## HENRI POISSON UR BELEG BREIZHAT

D'ar yaou 22 a viz Kerzu eo bet lidet obidoù Herri Poisson, en Iliz-Veur Roazhon, dirak kardinal -arc'heskob Roazhon : setu un arouez a zoujañs e-keñver ar beleg. Deuet e oa ivez stourmerien vreizhat ha mignoned eus Boulvriag hag eus a belloc'h: setu un arouez a zoujañs e-keñver an den gouestlet e vuhez penn-da-benn da Vreizh. Ur c'heuz avat: daoust da ganoù an oferrinn bezañ re al Liderezh gregorian kozh, ne voe ket doare an oferrinn dre vras an hini a vije bet diouzh c'hoant don ar chaloni Poisson. Hiziv an deiz, n'eo ket ken pouezus-se youloù diwezhañ un den,

e-tal an diktatouriezh nevez o c'hoari en un iliz na voe biskoazh komzet ganti kement ha bremañ eus gwirioù mab-den.

E vuhez e berrgomzoù. Ganedigezh : Roazhon, 2 a viz Here 1898. Kloerdi bihan : Kastell-Jiron, 1913. Kloerdi bras : Roazhon, 1920. Belegiezh : 1925. Anvet da gure-skolaer e Sant-Jakez-al-Lann, 1925 ; e Roazhon (St-Albin) : 1926-1959. Anvet buan da rener skol Santez Anna ha chapalen eskobel : 1950. Aluzener leanezed Santez

Klara, Roazhon, 1959. Chaloni an Iliz-Veur : 17 Mezheven 1970. Marvet : 19 a viz Kerzu 1977.

Ar skrivagner : Komzet e voe e prezegenn e obidoù eus ar beleg hag eus ar mestr-skol, nebeutoc'h avat, eus ar skriva-gner hag eus ar stourmer breizhat. Evelato, ez eo en abeg d'an dra-mañ eo e vo dalc'het koun eus H. Poisson, en efivor ar Vretoned : en abeg d'e stourm breizhek dre skrid.

Tra souezhus hag un tammig fentus : heñchet e voe H. Poisson (evel meur a hini all) d'ar stourm breizhek diwar levezon ur c'helenner, ar beleg Rouxel, feal da «L'Action Française» (Dav eo lavarout e oa evit gwir, Ch. Maurras, ur Provesiad penn-kil-ha-troad, enebour d'ar Republik ha d'ar c'hreizennerzh). Setu diwar ar menozioù-se, e voe heñchet ul lenner breizhat bennak da brederiañ war gwirioù Breizh. A-unan gant Loeiz Herve ha re all, e savas H. Poisson, er c'hloerdi bras, ur strollad «Foi et Bretagne» (Feiz ha Breizh) : 1924.

Kelenner. Gouzout a ra a-walc'h e chom nebeut a frouezh diwar ar gomz ma ne vez ket skoazellet daoulagad ar bugel gant ul levr-don. E 1930, ec'h embann H. Poisson ur «Petite Histoire de Bretagne» (Istor berr Breizh), a voe adembannet meur a wech ha tennet meur a zekmil anezhañ. Troet e voe al levrig dindan an titl Istor Breiz evit ar vugale (Gwengamp, 1932) : un dra vat, rak diviet e oa pell a oa Istor Breiz gant Trivarez : 1910.

Diwezhatoc'h, e 1948, e teuas er-maez Histoire de Bretagne, ul levr fetis. Evit gwerzhañ aesoc'h e levr e stagas H. Poisson d'ober e Dro-Vreizh : presbitalioù, skolaioù, prevezidi. Evel-se ivez e c'helle lakaat ur gwenneg bennak a-gostez, e-lec'h lezel un tamm mat eus ar gonid gant al levr-diourien, evit gallout adembann e levr da c'houde.

Met, e 1946, dindan al lesanv Benead Al Lann, e reas moulañ un oberenn, 88 pajenn enni, «Rétrospective» (Kisellad) a zispleg sklaer-tre ar perag hag ar penaos eus ar stourm breizhek, ur gweledva berr ha kalonek... Goude, e teuas er-maez ar

buhezskridoù : «L'Abbé Jean-Marie Perrot (1955) ; L'Abbé Pierre-Marie Lec'hvien (1959) ; Yves Le Moal (Dir-na-Dor) (1962). Dav eo ivez ober meneg eus e oberennoù-goù : Saint-Aubin, Rennes : Le Culte de Notre-Dame de Bonne Nouvelle (Roazhon) ; Notre-Dame de la Pénitence (St-Didier) ; Sainte-Anne de la Boisserie (Romanieg) ; Saint-Armel et son culte. Ha neuze ul levr diwar-benn unan eus eskibien gozh Roazhon : an Aotrou Maieug.

Ar stourmer breizhat : Evit kalz a dud, ur stourmer eo an hini a c'hoari dre ober, ambrougadegoù, amheuladegoù, manifestadegoù, pefañ-skritelloù, skignañ traktoù, h.a. ; ha dre gomz en emvodoù ofisiel ha prevez. Disonjet e vez ar re a labour en ur stumm ha n'eo ket ken hewel, donoc'h avat, allies : ar re a gelenn, ar re a bourchas, dre ul labour uvel ha didrouz, ar benvegoù-stummañ : renerien ar c'helaouennoù, ar skrivagnerien... Padal, reiñ a reont da Vreizh kalz eus o amzer, muioc'h allies eget meskerien pe hejerien-o-ravr ! Ken entanus e c'hell bezañ o c'halon hag o skridoù ha stultennoù hufivreeion 'zo ankouaet ganto skouer U.R.S.S. Ha disonjet ivez ganto ur mare lesanvet an «Dieubidigezh».

N'eo ket dre faltazi eo e kemasas H. Poisson un anv all evit embann «Kisellad», e 1946 : dav dezhañ kuzhat al levrioù-se er-maez eus e di, goudoret ouzh furhadegoù ar polis. Zoken e 1948, e oa un taol hardizh embann un Istor Breizh, ennañ spered Beltram Arc'hantred ha de la Borderie, ha ket spered dornlevrioù-istor ar Stad C'hall.

Evel m'en deus skrivet Per Roue (Roy) : daoust d'e neuzioù sioul ha tavedek, e oa H. Poisson un den youlek, douget a-greiz e galon d'ar reizh ha d'ar justis. Aze 'mañ andon e holl oberiantiz. Anat e oa dezhañ e rae ar Stad C'hall fae war ar feurioù ha war gwirioù Breizh. Anat e oa dezhañ e veze lamet digant ar Vretoned ar gv. da anavezout o istor hag o yezh.

Anat e oa dezhañ e oa dre gasoni eo e oa bet drouklazhet ar Breizhad-mañ-Breizhad e 1943 ha 1944. Dre ma ne c'helle ket reiñ e amzer hag e nerzh da stourm a-enep kement fallentez ha gaou a zo dre ar bed, e laka e enklaskoù hag e imbourc'hioù war ar



Reizh hag ar Wirionez, e servij e vro. Ne c'helle ket displegañ istor Breizh en ur ster all estreget an hini a oa er wirionez ouzh e zaoulagad.

Skrivet eo bet an istor-se diouzh un tu broadel ; skrivet eo bet diouzh un tu kristen. Setu perak ez eo taget an oberenn-se gant ar Vretoned ha na blij ket dezho e vefe peget ouzh Breizh, evel arouezenn-doareañ : ar gristeniezh (Setu aze avat, danvez-rendael ! pa seller ervat ouzh Breizh en he fezh ha pa genverier outi Bro-Iwerzhon ha Bro-Bolonia, don enno ur santad kristen, bet saveteet marteze en abeg d'ar stourm a-enep an alouberien protestant pe ortodoksour, kement ha ken bihan m'eo deuet lliiz-Roma evel arouezenn-doareañ er broioù-se... E kentskriz Istor Breizh, H. Poisson e lavar Dom Aleksiz Presse, abad Boken : «*En Istor Breizh-mañ, e kavo al lenner ar pezh a c'hell reiñ ur bobl sanket enni a-hed ar c'hantvedoù ar menoz kristen. Bez' e voe ar menoz-se ar goell en deus intrer tamm-ha-tamm ar bobl a-bezh ouzh he zreuzfurmiñ.*»

Degemeret mat e voe an oberenn, ken sklaer e oa an destenn displeget en un doare-kelenn, aes da embreger evit an hini en devez c'hoant pe ezhomm da anavezout ur c'hraf-istor bennak, kuit da vont da furchal e labourioù an istorourien vras. Ouzhpenn-se, e oa al levr-istor nemetañ a gaved da brenañ e-pad 20 vloaz. Zoken hiziv an deiz e talc'h bepred da ober berzh. Gwell-a-se !

Kadarned c'hoazh evit lakaat, zoken e 1955, Yann-Vari Perrot da vezañ muioc'h anavezet ha brudet. Kenderc'hel a rae ar gaou hag ar gasoni zall da ober e reuz. Evel just, ne c'helle ket ar skrivagner dibunañ pep tra, daoust d'e garantez ouzh ar

wirionez ; reiñ a ra kement-se da c'houzout d'e lenner : «*Re a zo da lavarout pe re nebeut : komprenet e vo perak ez eus bet tavet war dra pe dra.*» Skoulmet e chome teod un test bennak gant an aon. Met diwar neuze e voe torret an «tabou» gant oberenn H. Poisson.

Dre e labour poellek ha kendalc'hus en deus hor mignon lakaet tamm-ha-tamm spered ar Vro da greskiñ en eskopti Roazhon. Ha daoust ma ne zeue ket aes-tre ar brezhoneg gantañ, e oa akuit a-walc'h war ar yezh evit he lenn. Souezhus eo, memes tra, gwelout ez eo gant ur beleg eus Breizh-Uhel ez eo bet skrivet buhez tri beleg brezhoneger. Barrek e oa da sevel al labour-se hep distummañ na falsañ spered hag ene e bersonajoù. Dre garantez ouzh Breizh, ec'h asantas ivez bezañ enrollet en Urzh Marc'hegerien St-Yann-Jeruzalem (Urzh Malta) a labourde da grouiñ ur rann evit ar «yezh vrezhonek».

Den ar fealded, den an hengoun, ne bilias ket dezhañ alouberezh ar galleg el liderezh : aes e oa rakwelout ez afe da greskiñ pouez lliiz Bro-C'hall, e Breizh, ha da wanaat spered ar Vro er vuhez relijiel. Lañchenn an amezeien, e Roazhon, a lavar penaos al leanezed, gant an debron da vezañ sellet evel merc'hed a-raok, o dije kavet e oa re droet gant al liderezh latinek, ha goulennet unan all diouzh ar mod nevez... Anvet e voe neuze H. Poisson da chaloni an lliiz-Veur. E oad 72 vloaz ! Un oad a-zoare evit goulenn e retred, met siwazh, d'an oad-se ez eo gwanoch ar yec'hed... Ne voe ket dilezet gant e vignoned, evel ma tiskouezas ar c'halz a dud deuet d'e obidoù da bediñ a-unvan evit ar stourmer breizhat.

J.C.

## AR BREZHONEG NE DEO KET MUI BREZHONEG ?

Setu brud adarre en-dro d'an dezenn c'houllou-mañ : ar brezhoneg n'eo ket brezhoneg. Setu amañ avat ar c'hudennoù a vefe ret dirouestlañ evit gouzout tra pe dra asur :

1- Pegen gallanekaet e oa an Arvorig ?

14

Da vare donedigezh ar Romaned, marteze ne oa ket peurec'halianekaet. Rak nebeut a anvioù-lec'hioù gallanek a gaver. Ur wech deuet ar Romaned e talc'has avat, ar galianeg da c'honit tachenn e-pad ur pennad. Daoust en Arvorig ? (1).

## 2- Dindan ar Romaned (diw yezh)

An aotronez en em latinekae. Un emsav-pobl a zo bet en trivet kantved (perak ? dre ma troe an aotronez galian kein d'o fobl ??). Trec'het eo bet an emsav. Hag adalek neuze ez eo bet lakaet tud ar bobl da *sklavourien* hag an aotronez a drevezas muioc'h-mui doareoù ar Romaned Atantoù bras, kestell (Villae : *Silfieg* = silvanicus ; *Seglian* = segalianus fundus ; *Campeneae* = campiniacum). (2).

Setu pa furcher en douar, e kaver peadra da lavarout ez eo bet ar bevarvet kantved un amzer a binvidigezh hag a beoc'h evit an aotronez.

Ne gaver *netra* war zoareoù-bevañ ar bobl vunut.

### Hag ar Yezh ?

Aotronez ar Villae a gomze latin sur-mat. Ar skolioù a gelenne latin.

Tud ar Bobl, ar werin, a c'heller lakaat da wir e komzent *galianeg*. *Peseurt galianeg*, avat ?... Evel ar brezhoneg-pobl a-vremañ, mesket gant gerioù latin, breinet ger ebet anezhañ er skolioù. Tud ar bobl n'o doa ken na douar, na sevenadur, moarvat.

3- Ha setu donedigezh Breizhiz. Diwar-benn ar re gentañ, ne ouzer *netra*, nemet mojennoù (Konan Meriadeg). Met ur mare a zeu ma welomp en o fenn, aotronez ha menec'h : tud a c'halloud, tud a ouiziegezh.

Petra eo deuet neuze *Arvorig* da vezañ ?

a) An atantoù bras a zo bet lodennet, n'eus douetañs ebet. Hag an aotronez latinekaet n'int bet en em zifennet nemet en-dro da Wened. Perak ?

b) E meur a lec'h all, e Bro-C'hallia, ez eo aet tud ar bobl *a-du gant ar Varbared*. Moarvad, ez int aet a-du gant Breizhiz, e Breizh. Ne oa nemet ur gonid evito : o yezh a oa kar... o lodenn-douar o doa da gaout.

k) Un dra all c'hoazh : ar venec'h a groue skolioù a veze kelennet enno latin ha brezhoneg. Dre al latin, e c'helle bugale latinegourien an Arvorig mont d'ar skolioù-se. Dre ar brezhoneg e teskent yezh ar *vistri nevez*, ur yezh lennegel eta, deuet a Vreizh-Veur.

N'eo ket da lavarout e vije bet en em ledet Breizhiz dre an Arvorig, en un taol, 15

met an dachenn n'eo ket bras-bras, ha Konomor, lakomp, a reas e vestr e-kreiz ar vro buan a-walc'h, hag ac'hano, e klaskas aloubiñ an hanter-noz hag ar c'hreisteiz... Yuzikael ivez, ha kalz a re all, a doullas hent etrezek kreiz an douaroù. Hentoù «roman» a oa.

Yezh ar bobl, kerkoulz all, n'eo ket bet mouget war an taol. Tammoù pe dammoù eus ar meskaj galianeg ha latin a zo en em silet er «brezhoneg yac'h».

Ar pezh a zo diavar, avat, eo e c'hoarvezas un deiz ma oa deuet an *Arvorig da vezañ Britannia* ; anvioù ar *parreziou* da vezañ anvioù brezhonek (nemet unanig bennak) ; hag ar yezh da vezañ *brezhoneg* n'eo ket *galleg* (nobilis lingua britonica -ha n'eo ket *deceis gallica* - evel ma lavaro diwezhatoc'h adembanner ar c'h-Catholicon).

Evel just, e c'heller klask gouzout pet ger brezhonek, pet ger galianek (ha pet ger latin) a zo e brezhoneg. Hogen, dreist-holl dre ma oa ar brezhoneg kozh hag ar galianeg kar an eil d'egile, n'eo kement-se nemet pismigerezh dall e-kreiz an noz. Keit ha ma ne vo ket bet dibonet ar c'hudennoù kentañ.

P. BOURDELLEZ

### Notennoù ar Renerezh

(1) E-touez fedoù anavezet, menegomp anv Sant Irenaios, eskob Lion (177-200), ur gresianegour anezhañ hag a rankas deskiñ ar yezh damvarbar : galianeg e amzer !

(2) Kemer kentel gant Smith, diwar-benn *Silieg-Silfieg* : toponymie bretonne (1940).

*Seliffiac* (871), *Siliffiac* (1251), *Siliphiac* (1387), *Siliffiac* (1441), *Silviac* (1283), *Sybiac* (1234). N'eo ket sur-sur e vefe *Silviacus* *furm-otin* ar ger.

## LEVRIOÙ

Adolphe ORAIN (1834-1918) : **La chouannerie en pays gallo**, suivi de *Mes Souvenirs*. Armor Editeur, 240 pages.

Ul levr digempouez, hep unanded : div rann, netra boutin etrezo nemet anv ar skrivagner. Touellus eo an titl ; rak n'eus ger ebet amañ eus ar Chouannerezh dre vras e Breizh-Uhel (Bro-Gallou) : dibuniñ a reer hepken darvoudoù eus an Dispac'h bras hag eus Emsavadeg 1832) hep liamm, hag e Bro-Witreg hepken pe v-Baen Veur. Goude-se un eilskrid bennak diwar un diell ofisiel, ha setu tout ! Linenn-stur ebet. N'eus ket aze un oberenn genaonet, n'eo ket ul labour-skrivagner.

Memes tra evit an eil rann *«Va Eñvorennoù»*. Lakaet en devoa A. Or. war ar paper *«Eñvorennoù e vugaleaj hag e yaouankiz»*, koulz lavarout seul ma tifou-pent en e goun, alies gant un dro-blunn divlaz, a skuizher buan ganti. Er pajennoù diwezhañ ur vieufvennig romantel pe varzhel bennak hag a dremen mat a-walc'h. Met pegen paour eo andastumad-se, ken evit an danvez, ken evit ar stumm, e-kichen *«Eñvorennoù Kastellbriant pe Renan»*, e-kichen danevelloù Anatol ar Braz pe zoken Emil Souvestr. N'eo ket skrivagner neb a fell dezhañ ! Met kargiad e prefeti Roazhon, gopraet gant ar Stad, e oa aes dezhañ furchal en dielloù ha bale bro evit kuftuilhañ eñvorennoù. Deuet eo A. Orain da vevañ brudet -gant gwir abeg- met evel arbennigour war draoù folklorel e rannvro; evit ar peurrest avat...

J.C.

Alain CROIX, Jean GUIFFAN : **Histoire des Bretons**, T. 1. Coll. Dossiers de l'Histoire. Fernand Nathan. 160 p., ill.

Souezhus eo pegen niverus eo al levrioù 16

embannet, abao warlene, o zitl : *Istor Breizh* pe, evel amañ, *Istor ar Vretoned* (hep na vefe e gwirionez diforc'h talvoudus ebet). Ha n'eo ket echu !... Bez'ez eo al levr-mañ lod eus un dastumad savet gant an embanner Nathan diwar-benn pobloù rannvroioù Bro-Frañs. Setu perak, marteze, n'eo ket lezet dieub ar skrivagnerien da zibab an doare-diskouezañ, an doare-skeudennif nag, a-hervez, spered ar skrid. Setu perak ivez ne c'hell ket ur broadelour bezañ a-du, daoust dezhañ kavout mat e vefe muioc'h anavezet istor ar Vro gant lennerien nevez.

Sklaer eo an destenn. Amañ pe ahont, faziou-istor, faziou-deiziadoù, met, n'int ket a-bouez. Pajennoù dedennus diwar-benn ar brezhoneg : e istor, e emastenn, ster an anvioù-lec'h. Kerseüs eo n'eo ket tolpet ar pajennoù-se asambles met dispartiet : un doare-ober hag a laka diaes adkavout heuliad an destenn. Pismigañ a c'hellfed diwar ar ster-mañ-ster eus ur ger bennak : da skouer, evit Lesneven : *«La cour neuves»* ; n'eo ket Lesneven memes tra ha Lez Nevez ; ar ster roet, diouz boaz, a zo *«Lez ar C'hont Even»*, Les 'n Even. Ha pa zeu (re alies) viod-koukou en anvioù-lec'h, n'eo ket gwellaet an traoù. D'hor meno, meskailhez a zo er bajenn 54 diwar-benn 'Sent kozh Breizh; biskoazh n'eo ket lakaet da vreizhat St Lubin ha St Livertin. Bez'ez eus gant istor Sent Breizh muioc'h a wirionez eget an hini roet da gievout gant al levr.

Perak ivez klask izelaat merit ha talvoudegezh Nevenoe, nac'hañ outañ bezañ *«Tad ar Vro»* ? Met setu sklaer aze spered an destenn dre vras, oc'h hanter-lezel da gredif e vo dedennet ar Vretoned, dreist-holl ar pennoù, a-hed ar c'hantvedoù, etrezek Bro-C'hall. Lavaret e vefe eo bet savet al labour-mañ da ziskoez eo bet staget Breizh ouzh Bro-C'hall dre zroed.

Buan ha buan e tifoarer eus Anna Vreizh : ur bajennad ! Hag evel just, e leverer ez eo ar Vretoned o-unan eo a c'houlennas e 1532 ma vije staget Breizh ouzh Bro-C'hall. Ger ebet, avat, diwar-benn an arc'hant dispignet gant ar Roue evit prenañ mouezhiou ; ger ebet diwar-benn ar strolladoù soudarded deuet gant ar roue da Gastellbriant, prest da aloubiñ Breizh, ma...

Hag-efi ez eo an doare-displegañ-se ar youl da lavarout ar wirionez ? En Istor : hanter-wirionez gwirionez ebet !

Diskleriañ e oa gwan-tre an emskiant vreizhat dre ma tivroer aezet ar Vretoned, ha zoken an dudjentil evit mont da servijañ ar Roue, n'eo ket sirius. Hiziv an deiz, Itiliz pe Bortugaliz hag a zeu da labourat e Frañs, ne gredont evit-se, bezañ Gallaoued. Pa oa deuet ar Marichal-a-Saks da servijañ Roue Frañs, ne fellas ket dezhañ bezañ lakaet da «Frañsezad». Goprosoudard ne lavaran ket.

Diaes eo chom hep merzout ur menoz kuzh marksat en doare da ziskleriañ stumm-prezeg ar venec'h kesterien (paj. 108) dezho evel pal, a-hervez : lakaat ar beorien da voredif dre ziskoez e vevent o-unan evelto *«Mouchañ daoulagad ar bobl izel ouzh o dienez !»*.

Meur a luc'hskudenn a zo el levr, betek re ; rak petra o deus da ober kement-se a skeudennoù hag a weledvaou gant an Istor ? Da gredif e vefe e oa dav leuniañ pajennoù, dreist-holl pa chomont dilufr, rak moulet ez int war baper an destenn hec'h-unan.

E fin ar gont, piv a fell d'al levr tizhout ? Doare-skol gantañ, hag evelato ne deo ket asur ez eo evit skolidi eo bet skrivet. Un daolennad anvioù-den hag anvioù-lec'h a vije bet dav kaout evit ul levr-studi. Mat eo avat, rolloù an taolennoù-douaroniezh. Bez'ez eus daou bennad hag a glask dezrevell buhez ar bobl hag an armerzhez : diresis avat e chom ar pajennoù-se, ken paour ha ma'z eo an dielloù.

Diwezhatoc'h e vo embannet an eil rann : Istor ar Vretoned adalek 1532 betek hiziv, en ul levr all : dav eo eta gortoz evit barn ervat perzhioù-mat ha perzhioù-fall al labour-se.

J.C.

Michel de MAUNY : **Le pays de Leon: Bro-Leon** : 400 paj. Plus 48 p. Hors-texte, Armor-Editeur, 59 straed Duhamel, Roazhon.

Embannet en deus Michel de Mauny nevez 'zo, ul levr diwar-benn **«Bro-gwened»** (Cf. Barr-Heol, Kerzu 1976). Emañ o paouez embann ul levr all, fetisoc'h : **«Le pays du Leon»**. Reif a ra da c'houzout e teuo er-maez kent pell : **«La Cornouaille»**.

Amañ e lavar mat-tre an eil-titl eus petra a zo anv : *«Son histoire, ses monuments (Hec'h istor, he savadurioù)»*. N'eus ket eta da glask ennañ ur studi war an armerzh, pe hefc'hadurioù evit an douriste-lezh. Met, goude lenn pajennoù ken leun a draoù-istor pe a draoù-arz, o komz eus ilizoù ha kestell -muioc'h eus ilizoù eget eus a gestell- e sav c'hoant da vat da vont d'ober tro ar vro, hefc'het gant ur mestr evel M.M.

Ur mestr ez eo Michel de Mauny, un arbennigour war draoù Breizh, war Istor Breizh dreist-holl, un arbennigour war arz ar savadurioù relijiel pe nann-relijiel. Da sevel e skrid, en deus gouezet kaout ar mammennoù gwellañ ; met anat eo en deus bizitet ha gwelet a-dost ar vro emañ o tiskuilh gant ampartiz ar pinvidigezhioù anezhi. Dirak ar savadurioù dedennusañ, e vo re dezhañ chom euriou hag euriou evit dizoleiñ pep tra dre ar munud. Met dre ma'z anavez dija meur a dra, e vo aes dezhañ reizhañ ur menoz bennak arvarus a-wechoù ha faos zoken. Ken barrek ez eo war ar vicher ma c'hell degas hafvaladurioù ouzh savadurioù eus an hevelep doare, e Breizh, pe e lec'h all : savadur, delwenn, gweracrezh... Ken gouiziec ez eo war an danvez ma c'hell diazezañ menozioù start, resizañ deiziadoù, anvioù ar saverien, h.a. Anaoudek ez eo war an traoù nevez-dizoleet dre lenn ar c'helaouennou-istor hag ar c'helaouennou-a-hendraouriezh. Dre-se ez eo deuet al levr er-maez, e poent hag en amzer, ul levr ha na vo ket aes kaout ennañ faziou grevus.

E-kichen paotr-an-aroù ha paotr-arskiant, sec'h un tammig e dro-blunn, e kejer gant ar skrivagner a oar dibunañ ur vojenn, gant an istorour a oar lavarout traoù sebezus, evel da skouer, ar stumm ha vefe sikouret sevel ilizoù gant arc'hant tapet diwar an tailhoù, pe ar c'hustumoù dastumet er foarioù kozh (Landivizio, ar Merzher, h.a.) ; kejañ a reer gant ar Breizhad penn-kil-ha-troad na chom ket da dortal evit dispakafi e soñj diwar-benn an Aotrou Perrot hag an drouklazh anezhañ ; kejañ a reer gant ar c'hristen feal a gred en darvoudoù burzhodus, gant ar c'hristen

17

pennek e gri a zispri evit ar gizioù nevez, a-wechoù amzereat, degaset el liderezh, e fulor dirak an dismantr, diot amañ hag ahont, eus oberennoù-arz hon hendadoù.

Ne deo ket ul levr marv, met ul levr leun a vuhez. Zoken ar re a oar meur a dra, pe a gred gouzout pep tra (diwar-benn Breizh, a gavo c'hoazh da zeskif. Ha dre ma'z eo M. de Mauny un den divent e ouiziegezh, e kavint plijadur gant e venozioù dedennus-tre peurvuiañ, gant e brederia-dennoù uheloc'h eget na vije kredet da gentañ : da skouer an diforc'h sklaer etre an arz relijiel hag an arz sakr «*Lakaet groñs ez eo an arz sakr er-maez eus hon ilizoù, hag en e lec'h, pa'z eo bet dibabet mat an traoù, eo bet lakaet an arz relijiel... Komz a ra an arz relijiel eus an den ouz Doue ; komz a ra an arz sakr eus Doue ouz an den.*»

E fin al levr, 40 pajennad «notennoù ha skleriadurioù» o tisplegañ dre ar munud penaos eo bet graet gant an arouezelezh evit taolennañ ur personaj bennak, un danvez bennak. Dre-se ez eo pinvidik-meurbet hon ilizoù evel binvioù-kelennañ ; ne oar mui en deiz-a-hiziv, ar bobl kristen, ster damguzhet an arouezioù-se ; setu perak eo deuet mat pajennoù ken pinvidik.

Kaeraet eo an oberenn gant skeudenoù ha tresadennoù tennet eus levrioù kozh, ha gant 48 pajennad luc'hskeudenoù-diell war baper aozet a-ratozh. Setu aze ul labour hag a blijjo d'ar re a venn anavezout gwel o bro.

J.C.

Louis ERGAN et Loeic LAURENT : *Vivre au pays: comment guérir le mal français de la concentration des hommes, de l'argent, du pouvoir.* 184 paj ; 42 F. Ed. Le Cercle d'Or, B.P. 110, Les Sables d'Olonne, 85102.

N'eo ket ul levr diwar-benn Breizh hep muiken, nemet e chom Breizh da gentañ dirak daoulagad an daou skrivagner o deus savet ar skrid-mañ. A-hend-all, pa'z anavezet personelezh hag hent-buhez an eil hag egile, n'eus ket da souezhif.

N'eo ket ul levr da vezañ lennet evit ar blijadur da lenn, ha netra ken, nag ul levr o studiañ a-zevri kudennoù an ekonomiezh : bez'ez eo kentoc'h ur seurt levr-prederia-dennoù war an ekonomiezh. N'eo ket a-walc'h d'an oberourien merkañ ur si pe un

droug bennak, met kinnig a reont c'hoazh al louzoù, ha neuze an hentoù a seblant ar re wellañ da zegas ar pare... Penaos lavarout e berr-gomzoù ar pezh a zo ken fetis a-hed ar pajennoù, harpet war sifroù ha taolennoù tennet eus ar mammenoù gwellañ ?

Eus a douez ar menozioù nevez ha talvoudus hag a verv koulz lavarout, dre an oberenn a-bezh, dibabomp un draig bennak.

«*Dav eo reiñ arc'hant d'an dud d'o sikour el lec'h m'emaint o vevañ, ha ket el lec'h ma'z eont.*» Ar politikerezh-arc'hant a-vremañ a c'hoari da harpañ ar broioù bras, ar c'hêrioù dreist-holl. Fall ez eo an doare-se, a laka, e gwirionez, ar gwall hag an droug da greskif. Kit da welout da Bariz ! Diaes-tre eo tremen ha distremen dre ar straedoù. Neuze setu ar Gouarnamant o 'ispign yalc'hadoù foll, arc'hant sitoaianed -keodediz- Bro-C'hall a-bezh, evit aezetaat d'ar gweturioù tremen. Aezetaet ez eo evel-se an traoù, met ne c'hell kement-se nemet broudañ an dud diwar ar maez da zonet da Bariz ! Hag e vo diaezet adarre an dremeniri, ha dav klask un diskoulm adarre. Dispignet ez eus bet neuze arc'hant bras-direizh evit an «hent-tro» : hemañ a zo en em gavet leun adarre, hag e komzer eus ober un hent-tro-all !... Met mar befe laosket an dud da vougañ tamm-ha-tamm betek rankout chom diflach ez eo sur hag asur e savfe c'hoant dezho da garzhañ kuit da lec'h all. Ha neuze ne vefe ket foeltret, koufonet, treetz arc'hant an holl evit treiñ ar maezioù e dezerzh.

\*  
\*  
\*

Kemerout a ra an oberourien ar ger «pays» (Bro) gant ar ster : «*tachad etresuje-digezh ar c'hêrioù hag ar maezioù.*» Evito ez eo an arondisamant eo a vefe ar muzul gwellañ gant ur gêr-benn, pe ur gêr-greizenn dibabet evit ar c'horn-bro hervez an hengoun, ha pleg naturel ar bobl e-keñver ar ger-se... Evel-se ez eo bet rannet Breizh e 17 bro, ur sifir degemeret hiziv gant an holl armerzhourien hag an arbennigourien.

Sed aze ul levr bet savet gant paotred hag a anavez o micher hag a zispleg sklaer un dezenn resis ha nevez. N'eo ket brizh-huñvreoù eo a zo ganto. Un diskoulm ginnigont, met gouzout mat a reont n'eo ket en ur ober ur mizvezh pe ur bloavezh bennak eo e c'heller fislval ur bed evel ar

melestradur gall ken kreizennet. Hogen n'eo ket dre ma'z eo diaes-spontus diblasañ ur menez, e ranker chom a-sav gant an divrec'h a-istribilh, ha dilezel ar stourm. An dud-mañ a gred en amzer-da-zont. Fellout a ra dezho reizhañ ar bed a zo bremañ, evit ma kavo o bugale ur gwir vuhez-den.

A-hervez, ne blijjo ket an oberenn-mañ da bep hini, na da dud ar Gouarnamant hag a fell dezho chom atav hep flach, ha diffiñ. Terrif an departamantoù, frammañ pep ranndir en ur c'hevredad «broioù», ha Bro-C'hall en ur c'hevredad ranndirioù, n'eo ket un dra aezet da zegemer ! Met penaos esperout e vefe kemmet tra pe dra, anez e teufe ar re o deus menozioù nevez, d'o embann ? Louis ERGAN ha Loeic LAURENT o deus bet kalon da ober kement-se : trawalc'h eo lenn niverenn miz Du 1977 : «*La Bretagne économique*» (Breizh armerzhel), evit gwelout n'eo ket chomet diefed o labour... Gwell-a-se.

J.C.

Yann BOUESSEL du BOURG : *Xavier de Langlals, peintre, écrivain, illustrateur breton.* 110 paj ; Kanevedenn, Roazhon.

Ul levrig ne deo ken, met kempennet

brav gant meur a skeudenn pe luc'hskeudenn, tennet eus oberennoù Langleiz e-unan, hag o tiskouez splann doare e arz. Goñt a ouzer ivez e voe Langleiz skrivagner e galleg hag e brezhoneg. Gant poell ez eo bet rannet al levrig e div lodenn : buhez Langleiz gant Kervourc'h pe gentoc'h gant kalon Kervourc'h (skrivet en deus bet dija ur pennad-skrid diwar-benn Z.L. war al *Liamm*). Goude-se notennoù dedennus-tre ; prezegen Maodez Glanndour evit obidoù Z.L., arroudoù diwar skridoù Z.L. o tiskouez e-unan e bennreolennoù hag e bennvenezioù ; lizheroù o tiskleriañ pegen uhel e oa prizet arz Langleiz evel livour. 'Vit pezh a sell ar skrivagner, ez eo iskis adkavout an testennoù o lakaat anat en devoa Z.L. kenlabouret dija e 1936 gant R. Hemon da beurnvaniñ ar brezhoneg, ha kinniget ar ZH : un dra ha n'emañ ket kaer a-du gant al laverenn c'hroffs brudet, e vije bet ijinet an doare-skrivañ K.L.T.G. diwar atiz an Alamaned !

J.C.

Notenn

Meur a skridvarnadenn diwar-benn levrioù brezhonek ha galleg a rankomp lezel a-gostez, en dro-mañ : levrioù gant Menga, Goulven Jacq, hag all...

## AR C'HONTOUR KOZH

Dihunet e voe Levenez, er beure-se, gant sonerez hec'h curier. Ar bann-heol a skede e melezhour he fres koad skav-gwrac'h, he dalle. Sevel a reas prim ha kerzhout war-du ar prenestrig.

— *Kaer e vezo an deiz, a soñjas-hi.*

A-us d'ar stêr, damwelet ganti etre ar pupli bras, e verze ur vrummennig skafv e-keit ma pare an heol seder en oabl. Gwelout a rae, tostoc'h dezhi, liorzhiq he breur, bevennet gant ur c'harzhad gwez-keir yaouank. War al letonenn e klaske un drask kof-ruz tapout krog en ur mell buzhugenn tra ma tike un torkad golveni war an

orjalenn-dredan.

Buan en em walc'has hag en em wiskas. Gant mall e redas d'al lec'h ma kemere bep beure ar c'harr-boutin he c'hase d'he labour. Ret e voe dezhi gortoz ur pennad. War an hent e ruille diehan ar gweturioù-dre-dan. Un nebeut krennarded ha krennardez, o c'hortoz ivez ar c'harr-boutin a c'hoarzh he gormze e galleg Bro-Gebek, ganto an taol-mouezh-se a vez kavet ken iskis gant an diavaezourien.

Pa zeuas ar c'harr-boutin e lammas an holl e-barzh, ha da nav eur nemet div vunutenn, ez antree Levenez e burev.

Degouezhout a reas, nebeut war he



lerc'h, ar c'hontour kozh, an Aotrou Lefrançois. E zaoulagad glas-tener, a baras warnezh :

— *Demat, dimezell Levenez, emezañ.*

Daoust d'e bevar-ugent vloaz, e kendalc'he an den kozh da zont da labourat bemdez. Krog e oa da zaougrommañ. Ur pennad a oa, koulskoude, e pasae mui-ouzh mui ha diaesoc'h e teue e gerzhed da vezañ. Un toullad mizioù kentoc'h, pa'z oa Levenez nevez-degouezhet er burev-se, ez oa-ef kalz sershoc'h.

Ganet e oa bet an Aotrou Lefrançois e kêrbenn Loeiziana, e Bâton-Rouge. Akadian e oa e dad. E dad-iou-goazh a oa genidik eus a Vro-Sant-Malou e Breizh : deuet e oa, evel kalz a re-all, d'ober e annez en Akadia, «Bro-Skos Nevez» bremañ. Ac'hane, ez oa bet harluet da Loeiziana da heul miliadoù all eus e genvroiz. Mar o devoa darn eus Akadiz choazet donet en-dro d'o bro, kalz diwezhatoc'h, en devoa kavet gwelloc'h Yann Lefrançois, e dad, chom e Loeiziana. Ne oa ket ken gary bevañ eno hag en Akadia, en notz, war ribl ar Mor-Atlantel. Ur Skosadez e oa mamm ar c'hontour kozh, «a-ouenn rik» evel ma plije dezhañ lavarout. Un deiz en devoa diskleriet da Levenez :

— *Gant ho plev du, ho tivjod ruz hag ho proz giz skos, ez oc'h heñvel-tre ouzh va mamm pa oa yaouank !*

Hag e tiskouezas dezhi ul luc'hskeudenn eus e vamm, a oa gantañ en e yalc'h-paperoù. Lorc'h a oa ennañ o vezañ ma komze-hi gouezeleg.

— *Pa oan bihan, emezañ, e plije dezhi kontañ marvailhoù burzhudus din. Kanañ a rae ivez sonioù kaer ha dudius Bro-Skos gant kement a deneridigezh ma...*

N'hellas ket d'erc'hel gant e gomz : un daerenn a berlezenne en e lagad.

Souezhet e veze Levenez o klevout ar c'hontour kozh o tistagañ, ken disi ha ken disi, gallec pe saozneg. Hogen desket e oa ar paotr. Graet en devoa ul lodenn eus e studioù e saozneg e Baton-Rouge hag ul lodenn e Pariz evel douaroniour. Da c'houde e teuas d'ar C'hanada da chom, e kornog ar vro, er c'hreisteiz d'an Alaska. Bevet en devoa eno bloavezhioù evurus, emezañ, ha deuet e oa da vezañ perc'henn

da ziv vengleuz aour.

Siwazh, re bell edo e vengleuzioù diouzh al lec'hioù poblet : ker e kouste dezhañ lakaat kas ar c'hailh-aour d'al labouradegoù, re ger. Setu ma'z oa bet ret dezhañ serrif e boullou.

Diskouezet en devoa bet ur maen-aour da Levenez a oa bet sebezet gant ar greunennoù-aour o lugernif evel ken lies steredennig. Kontañ a reas dezhi pegen tomm (ha pegen berr) e veze an hafv du-hont, pegen buan e c'helle al louzoù-kegin kreskiñ, ur marz !, pegen hir avat ar goañv, meur a sizhunvez hep gwelout goulou an heol, met pegen plijus evelkent bevañ e-unan e sioulder ar menezioù uhel.

— *N'eus ket kaeroc'h bro er bed, a lavare. N'anavezan netra par da arvest an heol o kuzhat a-dreñv d'ar menezioù en hafv !*

Hiziv avat ez oa trist penn ar c'hontour kozh. Kollet en devoa ul lodenn vat eus an arc'hant en devoa da warantif e gozhni, en ur freuz-stal. Ar mousc'hoarzh ken hegarat ha ken kalonekaus evit ar re a veve en-dro dezhañ, a oa nijet diwar e zremm. Daerou a rullhe gwech ha gwech all war e zivoc'h kleuz, un druet !

— *An dud fall-se ! emezañ.*

Ne rannas ger all ebet a-hed ar beurevezh. Ne labouras ket nemeur kennebeut. Da zek eur pa'z eas Levenez da c'houlenn digantañ ha kerc'het e vefe un tasad kafe dezhañ, evel m'emañ ar c'hiz en Amerika, e nac'has. Kuitaat a reas ar burev da greisteiz hep sellout ouzh ar plac'h yaouank zoken.

Ne zeuas ket en-dro d'ar burev en deiz-se, nag en deiz war-lerc'h. Daou zevvezh diwezhatoc'h e klevas Levenez ez oa marvet an Aotrou Lefrançois. Klafv a galon ! Re griz ez oa bet evitañ an taol ganas-se.

Gouelañ a reas-hi d'he mignon kozh.

Ivona KONAN  
*Krec'h-ar-Roue, 1963*

## AR GRISTENIEZH

### DIRAK KADOR-VARN GWENC'HLAN

A-hed ar c'hantvedoù, e pep bro, deiz pe zeiz e voe an liz ar pal eus argadoù, argadoù ha na oant ket atav leal ha sklaer, argadoù ha na zeuent ket atav a-berzh ar Stad nag a-berzh enebourien naturel. Alies, e teuent a-berzh tud vadezet, kollet o feiz ganto, ha neuze binimusoc'h a-se, ha muioc'h korvigellek. N'eus ket da vezañ sebezet gant se : diouganet e oa bet kement-se gant ar C'hrist d'e ziskibien.

E-touez an tamalloù boazietañ emañ hemañ (ha n'eo ket unan nevez !) : an liz o kreskiñ en ur vro bennak a zistruj sevenadur ha doare-spered ar vro-se. Rakwelet o doa ar visionerien ar rebech-se ; ha peil-amzer e vo komzet c'hoazh eus «rendael al Lidoù sinaat» : fellout a rae d'ar Jezuided mirout e Sina ur c'hiz bennak a sellent evel talvoudus, goude he gwiskañ gant ar spered kristen ; nac'het e voe an dra-se gant Roma, siwazh.

Met n'eus ket pell, e broioù eus Afrika, e c'houlenne grofs ar gristenien nevez digant ar visionerien ma vefe torret ar c'hustumoù pagan, saotret alies gant brizhkredennoù diverzus d'un estren, hag a lakae en arvar o feiz kristen. Neuze, a-raok barn pe damall...

Emañ Gwenc'hlan ar Skouezeg o paouez embann dindan un titl dedennus : **Bretagne, terre sacrée, un ésotérisme celtique**, (Breizh, Douar Sakr, un ésoté-rieh keltiek), ul-levr hag a zo un argad taer a-enep ar Gristeniezh, ur argad soutil avat, ha troet-mat. Evit gwir, eus a betra ez eus

kaoz gant an oberour ? Klask didamall ar frankiz war dachenn ar reizh-natur, ar seksologiezh, ar garantez dieub, ouzh he diskouez evel ur c'hiz naturel er pobloù keltiek, ha dra-se dallezek a valeudi ; ur c'hiz avat, hag he deus an liz stourmet a-enep dezhi. Ar stourm-mañ a-berzh an liz eo a laka Gwenc'hlan da gonnariñ. War-dro ar gudenn-se eo emañ al lev'r a-bezh, ha war bep seurt digarez ez eus meneg anezhi. Santout a reer evel ur seurt-debron gant ar skrivagner war ar poent-se : kounañ al lidoù kozh, taolennañ ar «sabadoù», talvoud-gezh seksual (an ezel-gour), ar peulvanou hag an taolioù-maen.

Ster gwir pe faos, pa n'ouzer mann ebet diwar o fenn, hervez an dud ouiziekg hag an arbennigourien. Alies e santer ez eus aze evel ur plede «pro domo», plede unan bennak o klask lakaat da reizh e zibaboù, hag o kuzhat e zilezioù dindan abegoù uhel o veritout bezañ doujet. Livet ha goloet ez eo kement-se dindan stumm ur studiadenn ouiziekg, met aes da welout evit al lenner evezhiek. Un tammig fentus zoken hag iskis, ez eo gwelout tagañ spered «poellvestronius» liz Roma enebet ouzh spered «kevrinel» ar C'helt, pa verzer, penn-da-benn al lev'r -hep na vefe lavaret sklaer- ez eo nac'het e vefe un «dreistnatur wirion», a-us d'an nerzhioù krouet. Met komz a reer eus huñvreoù-diabarzh, esoterek, strobiniellus, e-lec'h ma c'hoari ar faltazi romantel, o reiñ sterioù gwirion a-wechoù, gwirheñvel a-wechoù all, ha fals a-wechoù all, da labour an nerzhioù-natur damanavezet pe zamaprouet. Setu aze emzalc'h rik poellvestroniourien (poelle-gourien) an XVIII<sup>vet</sup> hag an XIX<sup>vet</sup> kantved.

A-hend-all, e c'halv Gwenc'hlan, Renan hag Anatol ar Braz d'e sikour, tud anavezet evel spereoù «dieub».

Alies e reer gant ar ger «mystique» e-lec'h ma vefe reishoc'h ar ger «mystérieux». A-dreuz (hag a-ratozh-kaer) ez eo intentet traoù an ens. Evit ar skrivagner n'eus ket a c'hoursav gwirion, nemet diwar ar reizh-natur; memes tra evit ar blijadur hag al levez. Sklaer eo, pa gomz diwar-benn ar Werc'hez ar Baradoz (un taol dispiljuz-tre evit ur c'hristen): pe levez a c'hellfe-hi da santout?... Evit gwir, n'eus baradoz gwirion ebet, nemet hini Mohammed eo a vefe. Penaos krediñ e plijadurioù ha goursavioù spered pe ene ?

Amañ hag ahont e kaver lavar-dislavar. Skrivet eo paj. 171 : «N'eo ket ar gristeniezh er c'hornog, frouezh emdroadur naturel ar pobloù, met aloubadur ur gredenn estren, bet heskinet da gentañ, ha deuet da vezañ mestrez da c'houde -ha skoazellet gant ar veli-stad... En ur stumm kriz a-walc'h, hervez doare an ofiser a oa bet eus Sant-Varzhin, en em ziazezas ar Relijion gristen e Galia ar C'hornog. Met, da gentañ, ne leverer nep lec'h ebet e c'hoarias Sant Varzhin dre nerzh; ha da c'houde, e pelec'h e leverer ez eo bet lakaet dre heg ar Relijion gristen war Gelted Iwerzhon, Breizh (pe Arvorig)? Hag un tammig pelloc'h e lenner e c'helle ar Gelted degemerout aes ar gredenn gristen diazezet war Zascor'h ar C'hris ha Dasorc'h an dud, peogwir e krede ar Gelted dija en Advevadeg e Tir-na-'n Og» (paj. 190) !

Relijion ebet o tont en ur vro nevez n'eo frouezh emdroadur-natur ar pobloù. Ne zeu nemet dre labour ha bruderezh tud c'hredus, leun gant gwirionez-Doue.

Evel just, e kaver e pep pobl dre ar bed lidoù heñvel, evel da skouer an devosion d'an hendadoù. N'eo ket souezhus e vefe degemeret aesoc'h hini pe hini eus al lidoù o klotañ gwell gant spered pe ene ur bobl bennak. Peurliesañ, seul baouroc'h ha seul henvedloc'h (brimitivel) ez eo ur relijion lec'hel, seul aesoc'h-a-se e vez degemeret

(met n'eo ket dre heg !) ur relijion estren a gelenn kredennoù uheloc'h. Evelato, zoken en un degouezh evel-se, ne vez ket degemeret en un taol-krenn, met tamm-ha-tamm war-bouez stummañ an aergelc'hiad.

E levr Gwenc'hlan, n'eo ket taget war-eeun ar feiz, zoken pa vez laketaet en arvar, evel da skouer, pa lenner e voe degaset d'ar Gelted soñj ar pec'hed originel ha zoken soñj ar pec'hed e-unan gant ar Gristeniezh. Taget eo dreist-holl ar vuhez-gezh kristen, degaset, hervez an oberour, koulz lavarout, gant Mikael an Noblez hag an Tad Maner (ar re-mañ, e loened du, e-giz ma vez lavaret), mat da vezañ distrujet kousket a gousto. Taerded an dagadenn-se a ziskouez splann ha fraezh pegen frouezhus eo bet labour an daou visioner-se, evit reizhañ ar gwall-voazioù oc'h ober o reuz e-touez ar bobl, da heul ar brezelioù-a-relijion (un daolenn un tamm duet marteze). Met n'eo ket an daou visioner-se eo o deus krouet reolennoù ar vuhez-gezh kristen, nag o degaset da Vreizh. A-viskoazh, emañ ar stourm-se, ha bemdeiz e ranker adkreññ da reiñ he ster kristen d'ar vuhez gant an den fidel, hag e pep kantved, ha gant pep rummad. N'eus nemet lenn labour Sent kozh Breizh er V<sup>et</sup> kantved. Neuze labour Sant Erwan, Sant Visant Ferrer, hep ober meneg eus ar re all, evit gwelout edo an Tad Maner er memes chadenn ganto.

N'eo ket onest-kaer kennebeut lakaat an Tad Mat da lakez ar Stad, war zigarez m'en deus harzhet ouzh Emsav ar Bonedoù Ruz d'en em astenn, hag e Bro-Blougennevel hepken, ya eno hepken. Miret en deus na vije brasoc'h al lazhadeg, pe niver ar c'haleourien. Skoazellet en deus ar re gondaonet da vont dirak Doue en ur ober evel-se e labour a veleg (paj. 102). Ha netra ken !

Fentus eo gwelout tagañ ar Jezuisted (gant ur fazi bennak) dre na fell ket dezho reiñ e vennad da bep hini (hag ar wirionez a zo ganto, pa weler spered an hini a zo o klotañ an traoù-se...), fentus gwelout kaout abeg en dielloù diwar-benn ar stumm da c'houlennata an dud fidel diskred warno da gemer lod e lidoù diskr ar «Sabadoù». A-hend-all n'eo ket gant an Tad Maner eo e voe ijinet ar reolenn-c'houlennata; ne voe ket graet ganti e pep lec'h, ha ne voe ket graet ganti hep asant eskob ar vro. Douget eur da grediñ ez eo kerse gant Gwenc'hlan o vezañ m'eo bet lamet digantañ ar blijadur da lenn aze marteze doareoù isklis hag

orgedus... E Breizh, ne voe losket sorsor ebet. Met, hervez al levr, m'en em gavas an traoù evel-se ez eo dre ma oa douget izili Lez-Varn Veur Breizh da gompren ar gudenn ha da vezañ a-du i Hml Perak chom hep degemerout e voe mouget ar sorserezh aze dreist-holl dre labour ar visionerien ? Ha pa'z anavezet ar reuzioù hag ar mac'homerezh savet, hiziv an deiz c'hoazh, da heul ar sorserezh, penaos hirvoudiñ war zigarez ma voe dilamet kuit eus ar Vro ?

Penn-da-benn ar pajennoù-se e vezer feuket gant «a-priori» dispiljuz a-walc'h : brav e oa pep tra er Baganiezh Keltiek; perak bezañ he distrujet ? A dra-sur, ez eo despetus e voe diskaret ur wezenn-sakr bennak, pe savadurioù kozh, peulvanoù ha taolioù-maen. Arabat, avat, lakaat kement-se war gont ar Relijion, rak alies ez eus bet distrujet traoù (hag e vez c'hoazh) dre leziregezh, digasted pe sotonni e-kerz an adlodennañ, pe gant al labourioù-stad, gant tud ar vro o-unan. Kerse eo e voe dilamet, gant debron Roma da greizennañ ha da stummañ an holl hervez an hevelep patrom, boazioù relijiel dereat, hini pe hini anezho eus ar c'hoshañ. Dav eo avat, derc'hel kont e klot an debron-se gant tro spered Bretoned 'zo, evel Leoniz da skouer... Dav e vefe marteze kompren e oa chalet Roma gant ar «c'hrennlavara» «*Lex orandi, lex credendi*» (ar stumm da bediñ a ziskouez petra eo ar feiz). Alies, gwir eo, e tiskouez al lid petra eo ar feiz. Met, goude Pelagius ha Skot Origena, n'eo ket souezhus e vije bet pennadurezhioù an liz war evezh da virout ouzh an diheñchadurioù...

Met daoust ha brav e veze pep tra er Baganiezh Keltiek ? Gant lidlazhadoù-tud, lidlazhadoù-gwragez pe vugale nevez-c'haret, h.a. ? A-hend-all, hervez arbennigourien ouizieka a-hiziv (cf. De Vries : *Relijion ar Gelted*, 1963, adembannet nevez 'zo) petra a sirius hag a dalvoudus a anavezet diwar-benn kredennoù, mojennoù, doueed ar Gelted ? Nebeut a dra, ha traoù distroll ha distumm; ha war ar marc'had, emañ an diskleriadurioù diwar o fenn oc'h en em zislavarout !

Reolennoù kristen ar vuhez-gezh ? Bez'ez int estregret ur strobard traoù «tabou» ha n'eo ket hep abeg resis eo e vez difennet pe bermetet an dra-mañ-dra. N'eus nemet sellet en-dro dimp hiziv evit gwelout ar frouezh mantrus a sav ken e buhez an tiegezhoù, ken e buhez ar gevredigezh da heul ar fae hag an dispiz taolet warno. Anat eo, ma kreder n'he deus ar vuhez ster all ebet estregret kinnig da bep hini -hep derc'hel kont eus ar re-all-, plijadurioù ar muiañ ar gwellañ, emañ ar gwir gant Gwenc'hlan. Met daoust hag-efi ez eo kement-se un uhelvennad evit an den ? Hag-efi emañ aze ar wirionez ?

Daoust d'e berzhioù fall, en deus al levr meur a berzh mat a-hend-all. Ur menoz bennak dedennus, evel da skouer, pouez an nerzhioù-natur, anavezet pe zianav, en un douar bennak, da stummañ temz-spered ur bobl; lakomp karantez ur barrez ouzh ur sant lec'hel -sant hag a c'helle bezañ a-wechoù heritour un doue kozh lec'hel bennak, h.a... Ha na skedusat tro-bluenn pa grog ar skrivagner da liavañ un dremwelid strobinnellus bennak, dremwelid-dour, pe dremwelid-vor; ha pa vefe un tammig c'hwezhet a-wechoù, e tegas da soñj eus Kastelbriant (Chateaubriant). Na pegen c'hwek e oar skudennañ un darvoudig bennak bet bevet gantañ...

Mantrus eo evelkent, gwelout ur paotr hag a anavez kement a draoù, ur paotr ken barrek war ar sevenadur braizhek, ur paotr o santout Breizh ken mat, o plediñ gant skridoù leun a hufvreoù, anezho traoù ha ne dint ket difennapl. Gwelloc'h, ya, kaiz gwelloc'h eget-se ez eo barrek da ober. N'eo ket «permetapl» koufoniñ evel-se e zonezonou.

J.C.

## yezh gwened

E-touez an traoù kinniget gant Kuzul Breizh evit ar GARTA SEVENADUREL, emañ ar goulenn o sellout ouzh Yezh Gwened, er Radio hag er Skingomz : 3 munutenn bennak bemdeiz. Ne c'hellomp ket bezañ a-enep an dra-se, p'en deus **Barr-Heol** goulennet meur a wech ma vefe dalc'het kont muioc'h eus Yezh Gwened. Ne ouzomp ket petra a gompren pobl Gwened e yezh Radio FR3, Brest, daoust d'ar bommoù gwenedek a glever ha d'ar c'hanaouennoù e yezh Gwened. Ar pezh a zo mat eo e vefe, e yezh Gwened, doareoù ha keleier evel ma vez graet evit ar vrezhonegerien arall. Gwir eo, diouzh un tu all, e vefe mat reiñ da nebeutañ un diverrañ e yezh Leon-Treger-Kernev, eus an traoù a glever e gwenedeg e Radio FR3 Brest, rak me 'zo sur ne deo ket stank kennebeut e-touez ar bobl ar re a c'hell meizañ gwenedeg.

Met dav e vefe ivez d'an displegerien «ofisiel» lakaat muioc'h a volontez vat da sikour addeskiñ o yezh d'ar vrezhonegerien ha pourchas dezho ar gerioù modern a zo ezhomm. Met kement-se a zo un afer all...

N'eo ket dre faot brezhonegerien dibenn an XX<sup>et</sup> kantved maz eus rannyezhoù ken disheñvel an eil diouzh eben ; kantvloazhoù ha kantvloazioù a sujedigezh d'ar gall, a zo krog da zougen frouezh... Evel-se emañ kont, arabat bout dall dirak ar seurt fedoù.

Un dra vat eta, reiñ da vrezhonegerien Gwened o lod en abadennoù-keleier, e skingasadennoù Radio Breizh. Gras dezho da gaout un displeger a-seurt ma oa prezeger oferenn Nedeleg 1977, e Krac'h, o tistilhañ ken spis e yezh ma oa ken aes da heuliañ ha ne vern peseurt prezeger eus Kernev-Treger ha Leon !

Gallout a rer a-hend-all en em c'houlenn hag-eñ ez eo bet studiet a-zevri-kaer yezh Gwened. Abaoe un toullad bloavezhioù ne weler mui a gwenedeg skrivet, koulz lavarout : abaoe m'eo bet marvet «**Dihunamb**» (\*944) **Bro Guened, En Had**. Peadra a zo da vezañ nec'hañset o welout gouzieien o kompren a-dreuz gerioù 'zo eus parliand kreisteiz ar vro. Digarez hor boa bet amañ, war **Varr-Heol**, da verkañ ar faziou souezhus graet gant un den akuit-meurbat war ar yezhoù keltiek, hag a oar ar brezhonegerien, kenkoulz hag e bater, o strebaotif e geriadur-an Abad Henoù (Cf. **Barr-Heol**, niv. 86, paj. 21).

Sed amañ **Skol Vreizh** oc'h embann ur studiadenn eus an troc'h kentañ, war oberenn L. Herriou «**Kamdro en Ankeu**», hag oc'h ober meur a fazi (Ebril-Gwengolo 1977).

Un tammig ez eo kriz ar pennad diwar-benn levr L. Herriou pa ziskleir ez eus e-leizh a bajennadoù diamzeret ha koshaet; met n'eo ket war ar poent-se eo e fell deomp pouezañ ; merkañ hepken un nebeudig gerioù treuzintentet gant ar skridvarnour :

- **Paj. 13** : e yezh Gwened, nemet e kornadou e vefe ? ez eo disheñvel, an daou verb : **Gober** ha **Reiñ**. Un diforc'h spis-tre a zo etrezo. Ur skouer hepken : «**Plijein e hra d'er Sant reiñ dehon er péh e hoanté kement**» (Buhé er Sent, eit pep dé ag er blé, 1907, paj. 122) : **hra** diwar **gobér** eo a skriv paotred Gwened, ha **ra = ro**.

- **Paj. 23** : setu kemeret ar verk *stuein* evit ur vi-koukou, ha lakaet «skurif» (?) en e lec'h ! Kar-tost e tle bezañ

STUEIN ha STUZIAN koulskoude ! Petra eo eta e yezh Gwened, «stuein boteù», «stuein douar» ???

- **Paj. 27** : ez eo troet «*chañchet e oè arne-hon*» : il avait changé, il s'était transformé. pa dalvez an dro-lavar : deuet e oa da vezañ drol, troet e oa e spered, trevariet.

- **Paj. 39** : hujaoal, hujaoeün, a zo kunujenif ha n'eo ket krozal hepken.

- **Paj. 40** : gwel, d'hor meno, skrivañ **truék** eget **truezek**. Gwriazienn ar ger a zo «*trué*». Cf. «trugarez». E Konk-Kernev, e levere : u(r) paou(r) kèzh *trué*. Ha neuze *truegez*.

Aozet mat-tre a-hend-all e oa ar studiadenn, daoust d'ar skritur implijet, da blijout nebeut a-walc'h deomp.

Met n'eo ket echu c'hoazh. Setu ar gazetenn *Evid ar Brezhoneg* (niv. 97), oc'h embann kontadenn (marteze an hini vrasañ-holl savet gant Vedig en Evel) **MOGEDENN** hag o treiñ ar brezhoneg-mañ «*Hag ar vaouez kozh da dapout he bleud gwinizh, d'ober bras...*», «*Et la vieille femme de prendre sa farine, de s'affaires*» (sic!). Petra a vez graet gant bleud gwinizh *bras*, moarvat (BAS) d'ober krampouezh !

Traoù all a zo, estreget-se hon eus da welout hiziv !

..

Diskouez a ra kement-se ez eus ezhomm da grouiñ ur strollad da studiañ en un doare skiantel Yezh Gwened, n'eo ket, evel ma lavare L. Herriou, evit tennañ diouti un toullad gerioù kozh ha troioù-lavar ispisial hag he skeiñ er blotoù da c'houde, met evit anavezout gwelloc'h hor yezh, pa'z eo Yezh Gwened, ur brank anezhi.

### SKRIVAGNERIEN EUS BRO WENED

An hent nemetañ, koulz lavarout, da studiañ yezh Gwened ez eo studiañ al levrioù. Tu a vefe ivez da zastum gerioù dizanav e-mesk ar bobl, met se n'a ket gwall vuan, ha trawalc'h a zo d'hor meno da besketa en oberennoù embannet un tamm 'zo d'ja. Oberennoù ha ne dint ket nevez, peogwir n'eus mui koulz lavarout skrivagner ebet a yezh Gwened. Arabat

ankouazh ez eo un dra eus ar priziusañ, kaout ur gelaouenn o vodañ en-dro dezhi un toullad skrivagnerien, evel ma oa kont gant **Dihunamb**, hag enni end-eeun ez eus peadra da studiañ. Pa ne oant ket mui evit derc'hel en he sav ur gelaouenn bennak (un dastumadenn, 'giz ma lavare L. Herriou) ez eo chomet mut ar skrivagnerien, nemet unanig bennak, evel rener kozh En Had, S. Kidna, hag a zalc'h da zispenn roudoù X. Langleiz, Ropèr ar Mason, dre implijañ ar gwenedeg lakaet da glotañ gant ar yezh peurunvan. Re all, akuit war o rannyezh, evel T. Pabu a zo merglet e bluenn pell 'zo !

Studiañ al levrioù ? Bez'ez eus meur a hini hag a raio ur yeuskenn o soñjal ez eo an darnvuiañ eus al levrioù-se, levrioù a zevosion, levrioù diwar-benn ar relijion ! Ne din ket d'ober roll ar skrivagnerien da studiañ, ne din ket zoken da denañ evezh al lennerien war an hengoun lenneget a zo e Bro-Wened, dreist-holl abaoe an Aotroù er Joubiuz, Jegouzoù, ar Gow (Pier ar Gow) Gwilhevig, Prielleg, Herriou, Kalloc'h, Tiegezhad an Arbouleded eus Pleheneg, Olleroù, person Kistinig, an Tad Beleg eus a Velrann ha me 'oar. Menegiñ a rin hep-muiken daou skrivagner an Aotroù Jelvestr Sevenoù, moarvat an hini frouezhusañ eus ar skrivagnerien : 25 levr embannet gantañ ! Holl, na petra 'ta, diwar-benn ar vuhez kristen ! Ne domp ket deuet a-benn da sevel ar roll klok anezho ; setu amañ evelkent un alberz bennak : Histoér en Intron Varia a Lourd (1905), Histoér er Perhinded a Santez-Anna (1905), Buhé Jeann d'Ark (1910), Miz Mari er Vretoned (1911), Buhé en Eutru Vianne, person Ars (1912), Histoér en liiz (1912), Kalon sakret Jezuz (1912). En Aviél espliket (1913) ; Histoér burhudeu en Hoér Térèz (1913), Histoér er Vretoned (1913), Burhudeu en Hosti santél (1914). Er Gomunion santél revé en Eutru Ségur (1915), Er guir Dévosion é kévér er Huerhiéz Vari revé en eutru Grignon Montfort (1915), Miz Mari sant Alfonz a Ligon (1916), En Nor ag er Vuhé dévot (1922). Ar pezh a ra hervez ar roll-se 16 titl. C'hoazh e vank S, peogwir, e deus bet embannet 25 levr ! Darn eus al levrioù-se ne dint ket tev-tev, met levr «*an Nor ag er vuhé dévot*» a zo ennañ evelkent 314 pajenn moulet-stank ! A dra-sur, ne deo ket niverus ar skrivagnerien vrazhonek hag o deus bet embannet kement all a



levrioù. Daoust ma skrive laosk un tamm, ec'h anavez evrat e yezh. War-lerc'h levr *Aviel an Aotrou Olierou*, person Kistinid, emañ e *Aviel espliket*, pell zoken war-lerc'h, met didalvoud n'eo ket...

Goude menegiñ an Aotrou Sevenoù, e fell dimp menegiñ ur skrivagner all ha na gomz mui den ebet diwar e benn, hag a zo hervez tud, a anaoudegezh, da vezañ lakaet war renk Y.B. Kalloc'h da nebeutañ : an Aotrou Per TANGI, genidik eus a Gistinig (1904). Moarvat, emañ e holl oberennoù e dastumadenn DIHUNAMB, rak ne ouzomp ket hag-eñ en defe embannet oberennoù distag. Meur a lesanv-pluenn, evel ma leverer, en devoa, daoust ma siner e bennadoù e yezh-plaen (darn anezho da vihanah I) : Pièr Tual. Kentañ tra a vefe da

ober e vefe didoueziañ e bennadoù-skrid hag e varzhonegoù, evel just, kent ober ur studi a-ratozh warnezho, hag o embann en ul levr hepken.

Setu amañ dre vras hent e vuhez-gezh : ganet e Kistinig d'ar 14 a viz C'hwevrer 1904 ; e kloedri bihan Keranna e 1917 ; er c'hloerdi bras, 1922, beleget d'ar 7 a viz Gouere 1929. Mestr-studi e Keranna, e-pad 4 bloaz ha neuze kure Klegereg (1933-1938). E 1938, person kanton Bignan, ha marvet e miz Mezheven 1965, taget gant ar c'hriñ-bev. Kement ha diduñ e amzer pa oa klañv war e wele, e talc'he da lenn Barr-Heol.

Un dra eus ar gwellañ, hep mar ebet, ha talvoudus evit ar yezh e vefe strollañ e oberennoù. Piv eus Bro-Wened a savo deomp ur pennad fetisoc'h diwar-benn ar beleg brogarour-se ?

klery

## UR SKRIVAGNER EUS BRO-WENED : AR CHALONI MATELIN PRIELLEG

(1869-1945)

Bez'ez eus bet e Bro-Wened, skrivagnerien eus ar c'hwekañ, evel m'hon eus merket en hor pennad all : «*Yezh Gwened*» Tud gouizie-k tre e pep keñver, met ivez war o yezh. En dro-mañ, e studiomp un tamm oberenn an Aotrou chaloni Matelin Prielleg hag e roimp un alberz eus e vuhez abalamour da skoazellañ, marteze, ur fucher bennak da gas pelloc'h an erv boulc'het amañ ganeomp.

An Aotrou Prielleg a zo bet marvet e dibenn ar brezel, e 1945, pa oa pep tra e disirt e Breizh : kouezhet ar c'helaouennoù o devije graet meneg da vihanah eus e varv, en o-zouez *DIHUNAMB* dastumadenn L. Herrieu hag he dije graet dimp e brezhoneg yac'h an daolenn eus buhez ha labour an hini tremenet... Ha ken berr ez eo ar meneg a ra Abeozen e-unan, en e *Istor al lennegezh*

*vrezhonek*, ma c'heller en em c'houlenn hag-eñ e c'halle an Aotrou Prielleg bezañ ur skrivagner ken akuit e-giz ma oa (paj. 67). Ne gomz Abeozen nemet eus levr Yehann Marion «*Iniz er Vertu*» bet adkempennet gant ar chaloni Prielleg hag a voe advoulet e 1925. Ne gomz ket eus e *Liv-Oferenn* embannet e 1927, hag a zo e meur a gefiver ur bennoberenn lennegel.

Kaerañ pennad-skrid savet diwar-benn an Aotrou Prielleg a zo bet moulet (e galleg) war Gannadig eskopti Gwened (1946), paj. 145-147, ha 150-154. Sinet eo ar studiadenn-se gant X.Y. ha moarvat ne deo ket dizoleiñ ur sekret ez eo lavarout e oa bet aozet ar skrid gant an Aotrou Chaloni Mari (Mary), ar brogarour anavezet hag a oa bet darbet dezhañ bezañ lazhet gant ar batrioted da goulz reuzius an «dieubidi-

gezh» (ur beleg ouzhpenn e vije bet, neuze !). Eus ar pennad-skrid-se, hag ivez diwar notennoù kaset d'jin gant ur c'henvroed d'an Aotrou Prielleg, an Aotrou Eosten Marouilh, eo tennet ar pep gwellañ eus ar pennad-skrid-mañ.

Evel m'emañ ar c'hiz pa gomzer eus un den bennak hag eus e labour, eo dleet ober un diverrañ eus e vuhez da ziskouez peseurt den e oa, hag e-skeud-se kompren gwelloc'h e labour.

Ganet e oa bet Mathurin Priellec (skritur ofisiel) e Gregam, e Kerberc'hed war ribl al Loc'h war bantennoù Lannvaoz, d'an 2 a viz Mezheven 1869 (Kerberhuat eo skrivet an anv-se, e levr an Nomenclature, hini an INSEE). Ur barrez poblet-stank e oa Gregam d'ar mare-se, rak e 1880, e oa 3 627 a dud (n'hon eus ket ar sifroù avat, evit 1869).

Dindan baeroniezh Sant Tual, eskob kentañ Landreger, emañ an iliz-parrez. Tost d'ar vourc'h ez eus ur prad hag a vez graet anezhañ : gwèh Pabu (Gwazh-Pabu). An iliz-parrez kozh eus ar XV<sup>vet</sup> kantved a oa bet diskaret ha savet un all en he lec'h, e 1868, ur bloavezh bennak kent ganedigezh M. Prielleg. Bez'eo ivez Chapel Itron-Varia ar Brugué (Burgo), hervez ar skritur ofisiel) kouezhet en he foud gozik holl a-benn bremañ, daoust ma oa war roll ar savadurioù istorel. Brudet e oa ar c'hrister-se en askont d'ar foarioù bras a veze graet eno 5 pe 6 gwech er bloaz.

Chapel **Loperc'hed** (Loperhied, e gwenedeg), bet savet etre 1569 ha 1588, hervez an enskrivadurioù hag a ro c'hoazh anv ar piker-maen L. Karton (L. Carton) : 5 kard-lev diouzh ar vourc'h ; diouzh tu ar biz. Nepell ac'hano, emañ Kerberc'hed, lec'h genidik M. Prielleg. Gouestlet e oa gwechall chapel Berc'hed da Sant-Vazhev. Bremañ, emañ dindan baeroniezh Santez Berc'hed ha Sant Kadoù.

Neuze, **Moustoer-ar-Bleuñ**, gouestlet gwechall da Sant Weltaz ha bremañ, d'an Itron-Varia.

Sant **Berteleme**, tostik-tra da vourc'h Meukon, war harzoù parrez Gregam.

Lokveran (Locmeren). Ur fazi ez eo sellet *Meren* amañ evit Marzhin (Sant), evel 27

ma rae ar chaloni Prielleg (a-hervez) ha n'en devoa ket lennet moarvat levr J. Loth «*Noms de Saints Bretons*» (1910), paj. 92, e-lec'h m'eo meneget Locmeren ha Ploeren (Pleren), Ploeveren e 1402 evit Ploe-Meren, na petra 'ta !

Menegomp c'hoazh Lomikel (Locmi-quel ha *Lopabu* (Locpabu). Taolit evezh ouzhan anv-mañ : *Lopabu*, gant Pabu evel eil anv Sant Tual, anv emaoomp o paouez kaout uheloc'h : *Gwazh-Pabu*.

Ur barrez bev-buhezek e ranke Gregam bezañ d'ar mare ma teuas M. Prielleg war an douar, gant kement-se a dud ha kement a chapelioù hag a foarioù.

Maer Gregam e oa bet tad M. Prielleg e-pad un toullad brav a vloavezhioù. Hor Matelin, an hini a gomzomp diwar e benn, a oa ar mab henañ eus 7 a vugale. E-lec'h mont d'ober e studioù eil-derez da Geranna, pa voe erru d'e 13 vloaz, ez eo da Skolaj Sant Frañsez Zavier an hini e voe kaset, moarvat dre ma oa eno ur mignon d'e dad : an Aotrou Klafich (Le Clanche) hag a oa bet kendiskibl end-eeun da hemañ, er VI<sup>vet</sup> klas, e Keranna. Setu perak ec'h en em dommas an Aotrou Klafich ouz Matelin yaouank ha ma savas mignonezh etrezo diwezhatoc'h, kement ha ken bihan ma teuas an Aotrou Klafich da vezañ gwarezour egile.

An Aotrou Klafich-mañ a oa bet ganet en Orient, d'an 8 a viz Meurzh 1838. E 1880, e oa bet anvet da superior Skolaj Sant Frañsez, e Gwened, met tamallet e voe dezhañ kaout Jezuided, 8 anezho, e-touez e gelennerien, ha difennet e voe outañ gant Kuzul Akademiezh Roazhon (11-6-1881) kelenn e-pad 6 miz, ha kadarnet e voe ar setañs-se gant Kuzul Meur an Deskadurezh renet gant Jul Ferry (17.7.1881).

Dav e voe dezhañ mont kuit, ha pa voe galvet gant an eskob da berson d'ur barrez-kanton bennak, e voe nac'het gant ar Ministr d'ar mare-se en devoa ar gouarnamant e c'her da lavarout pa veze anvet ar veleien d'ur garg bennak-. Neuze e voe kaset da berson d'an Erdeven (1882), ha goude bezañ bet e-pad 5 bloaz e penn skolaj Sant Loeiz en Orient (1886-1891), e voe anvet da berson Krac'h e-lec'h ma chomas betek 1912. Neuze e roas e zilez evit mont da chom d'an Erdeven, hag eno e



skriüet ker reih el ma skriüer bremen ; peb unan e skriüé un tammig doh é chonj hag ér mod ma hellé.

En eutru PRIELLEC, chanoën é Guéned, un dén fur ha gouiek hag e hanaü biskoah guel er brehoneg, en des groeit un tammig kampen d'el livr-men ; lamet en des el lod brasan ag er girieu gallek ; reiheit en des er mod de skriü, hag elsé, sekouret get deu pé tri a duchentil aral, ean en des groeit ur péh tam labour hag e hrei plijadur d'er Vretoned.

Er skolaerion a gloérdis Santéz-Anna, en abéed ag er Séminér, ol er vugalé ag er skolieu, bras ha bihan, e gavou én-nou treu mat ha braü de lén.

En dud iouank a gér hag a zi ar mézeu, pautred ha merhed, en devou ul livr kaer de lén ér gongrégasion, ér retredeu, ér misioneu, hag e gavou én-nou avizeu mat ha fur e sekourou geté biüein el kristénion vat ha chervij a zeuri en Eutru Doué.

Plijeet get Doué ma vou stréuet el livrig-men é pep parréz, é pep tiegch ag 'en eskopti, ha lénet muioh-mui get en dud, ha ma vou karet alaü, ar un dro, get er fé, lavar er Vretoned :

Rak un dra hanat é :  
Genemb é bro Guéned,  
El lavar hag er Fé  
Zou brér ha hoér perpet !

Guéned, er 15 a viz imbrill 1925.

#### A. GUILLEVIC, vik. bras.

Lezel a reomp war gont al lennerien barn drezo o-unan menozioù ar «rakskri-dour», nemet e karfemp tennañ o evezh war ar gerioù e-lec'h ma tiskleir ez eo bet sikouret an Aotrou Priellec «get deu pé tri a duchentil aral». Hep mar ebet ez eo gant hemañ e oa bet graet ar pep brasañ eus al labour !

Bez'ez eus un toullad gerioù en Iniz er Vertu hag a c'heller en em c'houlenn hag-efi ne dint ket gerioù bet ijinet gant ar Priellec. Dav e vefe keñveriañ evel just, gant ar mouldadur kentañ evit gwelout. Hogen meur a hini anezho n'o c'haver ket e geriadur R. Hemon, da skouer *Arvare-re(z)h* = entremar, amzivin, stad un den ha ne c'hell ket ober e soñj.

*Plijañs* : diwar ar galleg moarvat. Gant un arliv doutañ e-unan eus ar ger 30

«*plijadur*». Cf. anv maner duged Vreizh *Plaisance*. Ur ger hag a c'hellfe marteze bezañ implijet da skouer er sportoù-hañv : bagoù-plijañs.

Al levr e-unan a gont beaj un den -yaouank, Simon, o klask ar Vertuz hag e weler a-hed e veaj war-vor tud ha darvoudoù a bep seurt, o tiskouez a bep eil sioù-fall ha sioù-mat mab-den, da reih c'hoant d'al lennerien da zilezel an droug evit en em reih d'ar vuhezgezh vat.

Daoust ma'z eus meur a bajenn hag a dalvezfe bezañ filmet da ziskouez d'hol lennerien, e tibabomp ar bajenn 18 dre ma'z eo klok anezhi hec'h-unan. Ar ger *Meañs*, e penn al lennadenn a gaver e geriadur R. Hemon, hag a dalvez «*emgarantez*». Ur ger eus ar c'hentañ.

#### 2. — KÉR PLIJANS HA STÉR MIGNONAL.

Goudé m'hur boé kuiteit Méans, é oemb arriü én ur stéd pradeu karget a bokéteu e daulé er vlaz huekan e fehé bout. Er hornad-sen e zou er bouraplan ag en Iniz. Ur blijadur é aveit en diskoarn kleuet trouz dasonus riolenneu deur-sklér e dréz er pradeu-sé hag e rid ar er guim hag er bokéteu. Kaer é guélet, stédet a bep tu d'en henteu, gué derü hag oulm kampennet braü. Un aüélenig flour e hoari dalhmat get deliaü er gué-zé, hag elsen er valéerion e gav édan-dé, de bep kourz, en dichaul dousan. Ne chuéhér ket é kleuet kan en éned e lra ou néieu én-né. En ur gir, koutant bras vezen bet a chom de zichuéh énou, deoustou n'hur boé ket hoah groeit kalz a hent.

En ur vonet ér méz ag er pradeu-zen é kavér ur gér, hag e zou karget a dud : rak ma tér dehi a gement korn zou ar en doar, én éngorto a dolpein dañné. Er ruieu anehi e zou digor ; mes en tiér nen dint ket ol ur sord : bout e zou mar a unan biskoah kaeroh, mes bout e zou eüé paud disto ha koéhet d'en dias. Er vorhizion e zou amiabl é kevér en ol ; hag er ré goh én ou mesk e laras d'emb é vezé guélet er guellan tiegheü ag er gér-sen é vonet kent pèl de glask ol bouid, hag é oé neüé-flam ol er péh e huelemb braüan én-ni. En intron e hieu er gér-sen e zou hanüet *Plijans* (1). Él ma oemb é valé ar ur blasen get er

(1) Bout e zou tud nanval mat doh er voéz-sé hag e glask plijein d'en ol. Truhéket ur vechér ! Ret é d'en neb zou elsé chanjein a gonz taul ha taul : kavet fal kent kreisté er péh en devé kavet mat de vitin, ha mélein kent en noz er péh en devé karéet de greisté. Get er ré santél, ret é dehou kavet kaer er vertu ha lous er pehed ; get er ré dirollet, ret é dehou mélein en dirollereh ha dikri en dévosion. Mar degoéh ur goal daul get unan benak, ret é dehou bout joéius get éneberion en dén-sé hag ankinet get é amied. En ur gir, ret é dehou troein perpet get en abél ne vern a bé tu é huñh.

Petra da soñjal bremañ eus an obereñ ? N'eo ket ken aes-se respont ! Met mar klaskit enni lennegezh pur, e kavot ul levr hag a zo e meur a gefiver ul levr-katekizañ, gant notennoù puilh e traoñ ar pajennoù d'ho sikour da gompren an destenn hag ar gentel a zo enni. Mar klaskit lennegezh uhel, e kavot un toullad taolennoù treset gant ampartiz. Met mar fell deoc'h ober anaoudegezh gant yezh Gwened, dreist-holl yezh Gwened-Uhel, neuze e vlot servijet diouzh ho krad. Tostik a-walc'h d'ar wirionez emañ ar c'homzoù

diwar bajenn VIII al levr : *Istoér é (simoi.) voiaj burhudus e ra (ro) deverrah d'er ré ne hrant meit hé lén diar-skan ; mes hi e ra diskemant d'en neb hé savl a dost*. Ne vern penaos n'eo ket er seurt levrioù eo ez aed da glask deskadurezh kristen.

Pet skouerenn eus al levr a oa bet tennet ? Pesurt levezon en deus bet e-touez ar bobl ha war ar skrivagnerien a Vro-Wened ? Petra a chom anezhañ e spered an dud ? Diaes ez eo pouezañ an traoù-se !



LEVR-OFERENN

Ne ouzomp ket hag-ef e oa oberennou all war ar stern gant Prielleg ha Gwilhevig, diouzha doare *Iniz ar vertu*, met ul labour all a oa da vezañ sevenet ganto : *Al levr-ofere-nn*. Amañ e voulomp pajenn gentañ al levr-ofere-nn-se, da ziskouez penaos en em ginnige d'an dud.

LIVR PEDENNEU  
OVEREN HA GOSPEREU

GROEIT

É LATIN HAG É BREHONEG

GET EN

DD. GUILLEVIC HA PRIELLEC



GUËNED  
É TI LAFOLYE

1927

Evit ober ur rentañ-kont pervezh eus al levr-ofere-nn-mañ, e vefe ezhomm eus un niverenn a-bezh eus **Barr-Heol**, ha c'hoazh ! Ret e vo deomp eta krennañ an traoù.

E penn-kentañ al levr, e kaver ur rakskrid sinet gant an Aotrou Gwilhevig a-unan hag a zo evel-hen : *D'er Vretoned a eskopti Gwened* ! Biskoazh kement-all ! 32

Petore tud eta a zo o chom en eskopti Gwened, nemet Bretoned ! Darn o komz brezhoneg ha darn all galleg, pe romaneg ! Dav evel just, kompren : brezhonegerien !

Bez'ez eus avat, un dro-lavar ha n'emañ ket e-barzh, hag a vez kavet peurvuiañ el levrioù a zevosion brezhonek, hag a ra deomp hursuniñ bep tro : an dud diwar ar maezioù (*en dud a ziâr er mézeu*)

hag a gaver e rakskrid *«Iniz ar Vertu»*. Da lavarout eo levrioù graet evit ar werin, hep meneg ebet eus ar c'hêrioù !...

Ur mell-labour, hep mar ebet, eo al levr-ofere-nn-se : war-dro 1 000 bajenn en-nañ : XXIV + 957. Gant lizherennou eus ar bihanañ a-blasoù, dreist-holl ar pedennoù pemdeziek, ha notennoù a bep seurt, evel, lakaomp, an diskleriadurioù berr a-raok Lennadegoù an Ofere-nn : Abostol hag Aviel.

..

Ar pezh a zo heverk avat, ez eo yezh al levr : yezh Gwened meret gant daou spered lemm ha gouizieik. D'hor meno, ez eo kalz bevoc'h ar yezh-se eget hini ar chaloni Ugen hag en devoa embannet ivez ul levr-ofere-nn (1924). N'eus tu ebet da reiñ skouerioù amañ, met ar re a zo an daou levr etre o daouarn a c'hello keñveriañ anezho.

Emaomp o paouez lavarout : yezh Gwened meret gant daou spered lemm ha gouizieik, peogwir ez eo diaes-tre merkañ lodenn pep hini anezho. Hogen bez'ez eus un dra hag a seblant bezañ diavvar : gant ar chaloni Prielleg an hini e oa bet troet an imnou, ar meulganou, ha troet en doare da glotañ gant tonioù gregorian ar meulganou-se, e latin. Ar pezh a ziskouez pegen akuit e oa Matelin Prielleg war al latin ha war e yezh.

Gallout a reer avat, en em c'houlenn

perak en devoa graet al labour-se, peogwir, hervez ar reolennoù en implij d'ar mare-se, e tlee an ofis bezañ e latin. Da aesaat kompren an imnou ? Moarvat. Pe gant ar spi e vefent implijet un deiz ? N'eus ket da grediñ kement-se...

Hep kontañ antifonennoù ar Werc'hez (Salve Regina, hag all), hag an traoù all evit Salud ar Sakramant, pe ar c'hanennoù a vez kanet e-kerz an Azvent (Rorate), Nedeleg (Adeste Fideles), ar C'hroaz, klotennet holl gwitbunan, na petra 'ta, ez eus da nebeutañ 50 meulgan all bet kompennet da vont war an tonioù gregorian. Ur c'hoari e ranke bezañ al labour-se evit ar chaloni Prielleg. Alies a-walc'h avat, e rae gant klotennoù re aes. En deiz a hiziv, gant ar reolennoù nevez war al Liderazh, e vefe tu d'o implijañ hep, kemmañ seurt enno. Ha graet e vez marteze... M. Glanndour en deus bet klasket a-wechoù en em skoueriañ diwarno, met diaes eo tremen eus an eil rannyezh d'eben...

Hogen, daoust d'ar pezh a greder peurvuiañ, emañ an troidigezhioù-se war-lerc'h al latin. Disheñvel ez eo ljin an div yezh, ha treiñ barzhoniezh ha kanennoù latin a zo moarvat dreist galloud an den, dreist-holl ma klasker o lakaat da vont war an tonioù gregorian.

Div skouer hepken a gemerimp, ouzh o moulañ amañ. Ar re a oar latin a c'hello keñveriañ an div yezh ha gwelout ne dizh ket ampartiz ar Prielleg treiñ ez-peurvat, al latin.

PEDEN. — O men Doué, pe hues choéjet sant Ivon de vout ur beleg gredus de salvein en ineañ-neu hag un avokad abil de zihuen er beurerion : groeit, ni hou ped. ma veemb karantéus éldou ha ma kavemb getou sekour dirak-oh. Dré Jésus-Krist.

HYMN.

Y vo, lux cleri, patriaque  
tutor,  
Corde qui puro miseros ju-  
vabas,  
Hac die clemens populi ro-  
gantis  
Suscipe vota.

Y von, gloer hur bro, skuir gaer  
er velleion,  
De sekour er peur ken douget a  
galon,  
Reit degemér mat hiniù d'hur  
guerzenneu  
Ha d'hur pedenneu.

Orphanus, pauper, viduae,  
 clientes  
 Te suum dicunt merito pa-  
 tronum,  
 Namque moerore animique  
 curas  
 Ipse levabas.  
 Ecce calcato petis astra  
 mundo,  
 Condito illic loculos repos-  
 cens.  
 Pauperi quidquid tua dextra  
 fudit  
 Reddit Olympus.  
 Nunc opem nobis, miseratus  
 affert,  
 Qui tuos laeti canimus trium-  
 phos;  
 Erudimentem, patriam tuere,  
 Suffice pacem.  
 Summus aeterno sit honor  
 Parenti,  
 Par decus Nato miseris le-  
 vanti,  
 Atque sit compar tibi laus per  
 secum,  
 Spiritus almae. Amen.

Épad hou puhé hui e oé avokad  
 Er gch intanvez, er peur, en  
 cnevad :  
 Pe oé poén, soursi é pouizein  
 arnehé,  
 Hui ou disammé.  
 É kuitat er bed, én nean e hues  
 kavet  
 En ol trezouliou hou poé énou  
 kuhet,  
 Hous alézoncu péet get larganté  
 Dre en Eutra Doué.  
 Hiniü pe gannamb mélasion  
 d'oh get joé,  
 Reit d'emb hou sekour, doh-  
 omb hou peet truhé,  
 Dihuenet hur bro, reit sklér-  
 dé d'hur spered,  
 Lakeit peah ér bed.  
 D'en Tad éternel revou inour  
 ha gloér ;  
 Gloér, inour d'er Mab aveit-  
 omb guir Salvér ;  
 Inour, gloér eüé d'oh hui, o  
 Spered glan,  
 De berpet én nean. Elsé re-  
 vou groeit.

26 GOURHELEN. — SANTÉZ ANNA 787

DER HETAN GOSPÉREU

Él éh él Gospéreu, namétt er péh e zou amen :

HYMN.

LUCIS beatæ gaudiis  
 Gestit parens Britannia.  
 Annamque Judaëe decus  
 Matrem Mariæ concinit.  
 Regum piórum sanguini  
 Jungens Sacerdotes avos,  
 Illústris Anna splendídis  
 Vincit genús virtútibus.  
 Caelo favente nexuit  
 Vincli jugális foedera,  
 Atvoque sancta condidit  
 Sidus perénne virginum.  
 O mira cæli grátia !  
 Annæ paréntis in sinu  
 Concepta virgo conterit  
 Sævi draconis vérticem.  
 Tanto salútis pignore  
 Jam sperat humanum genús ;  
 Orbi redempto prævia  
 Pacem columba núntiat.

ÉURUS é hiliü Breih-izél  
 É kañneia get ur joé santél  
 Én inour de santéz Anna,  
 Mamer Huerhitéz gloér bro Juda.  
 Anna oé saüet a ligné-  
 Er véleion hag er foañné,  
 Mes ihueloh dré santelch  
 Aveit dré hé gannédigeh.  
 Doué dré er santelah éred  
 Hé ra d'ur sant aveit priéd ;  
 Hag un dé é laka ér bed  
 Er buran ag er guerhitézed.  
 O burhud soéhus a hrés Doué  
 Um hroa étre hé digosté ;  
 Mari dré hé Honsepsion glan  
 E flastir a nezé pen Satan !  
 Bremen en des er bed abéh  
 Espérans a salvédigeh ;  
 Hanat é ma tost en amzér  
 Ma te ar en doar er Salvér.

Sit laus Patri, sit Filio,  
 Tibique, sancte Spiritus ;  
 Annam pié coléntibus  
 Confer perénnem grátiam.  
 Amen.

D'en Tad, d'er Mab gloér éternél,  
 Gloér eüé d'er Spered santél !  
 Dre santéz Anna, o men Doué,  
 Reit d'emb ér hrés d'arriü en né.  
 Elsé revou groeit.

D'er Magnificat. ANT. — Magna fecit. En Doué  
 ol-gelloudek en des groeit un dra kaer é rein d'er  
 bed santéz Anna, eit boué un arréz ag é Vañ e  
 zelié donet émber.

D'EN OVÉREN

INTROÏT Gaudemus. — Um rejoycissamb é Doué  
 én ul lidein en dé gouil-men én inour de santéz  
 Anna ; hiniü en Eled inq memb e zou él leüné  
 hag e ra mélasion de Vañ Doué.

Ps. 44. — Eructávit | Ps. 44. — Ag en don a  
 cor meum verbum bo- | me halón é teñnan me

DA GLOZAN

Prielleg, graet o hini !

KLERG

Er brezegenn graet gant an Aotrou  
 Trec'hioù, eskob Gwened, deiz interamant  
 an Aotrou Gwilhevig e lavare an eskob  
 penaos ma vije deuet al « Livr-Overenn », un  
 50 vloaz bennak kentoc'h e vije bet bleu-  
 niusoc'h stad ar yezh e Gwened eget n'edo  
 e 1937.

Marteze, met ne dalvez ket ar boan  
 skuilh daerou war an amzer dremenet, met  
 gwelout petra a zo tu da ober. Implijet e vez  
 alies-tre c'hoazh testennoù al Livr-Overenn  
 gant beleien Gwened, pa n'o devez ket  
 amzer da brientiñ testennoù all.

Hogen, mar o deus c'hoant, e  
 gwirionez, beleien Gwened, d'ober un dra  
 bennak evit al Liderezh, en o rannyezh,  
 arabat dezho chom da dortal. Mar dint  
 kalonek a-walc'h, n'o deus nemet kem-  
 rout ar pezh a zo bet embannet, da skouer,  
 gant Barr-Heol, ha gant Studi hag Ober,  
 hag e kavint kement o deus ezhomm :  
 Testennoù evit ar 3 Bloavezhad Lennade-  
 gou evit ar Sulioù (A.B.C.) ; al Lennadegoù  
 Pemdeziek (Bloavezh 1 ha Bloavezh 2) ;  
 oferennoù evit an Azvent-Nedeleg-Epifa-  
 niezh-Koraiz ; Gouelioù ar Sent. Hag o  
 lakaat hervez o soñj en o yezh dezho  
 o-unan : o zreuzskrivañ eta, ouzh o  
 gwiskañ hervez reolennoù yezh Gwened ;  
 pesketa e levr-oferen o daou genvroad  
 meur : Gwilhevig ha Prielleg, ar pezh o  
 devezho ezhomm da glokaat o labour. Kalz  
 aesoc'h ha fonnusoc'h e c'hellint ober al  
 labour-se eget n'o devoa Gwilhevig hag ar 35

Notennoù

(1) Istor an Aotrou X. superior kloerdi bihan  
 Plouazel Breizh-Uhel, galvet da ren ar  
 c'hloerdi-bras... Feuket e oa bet an Ao-  
 trou Gwilhevig ha facht e chomas  
 meur a vloavezh, ouzh Le Père la Vic-  
 toire, en askont d'un nebeut gerioù  
 dievezh lavaret gant hemañ diwar-  
 benn ar «Vretoned»... Bez'ez eus darn  
 hag a lavar e oa bet komprenet fall  
 komzoù an Aotrou X., met peg outañ e  
 chomas e lesanv !

(2) An testennoù diwar-benn ar chaloni  
 Gwilhevig a zo tennet eus Dihunamb,  
 re all eus ul lizher a-berzh an Aotrou  
 Taleg, beleg e Sant Joasim, Keranna,  
 hag eus lizheroù digant tud all...  
 Ar re a garfe studiañ buhez an Ao-  
 trou Gwilhevig, a gavo doareoù e «Se-  
 maine Religieuse de Vannes, 1937»,  
 N° 6, brezegenn an Aotrou Trec'hioù,  
 evit e obidoù, ha neuze en niverennoù  
 11, 13, 17 ; 19, 21, 22.

## Celtic League

Kenvroad ker,

Ober a ran dave d'ar pennad kaer digant hor mignon L. Andouard e niverenn miz Kerzu B.H. (p. 33-35). Kompren a ra mat an tu Iwerzhonat koulz hag an hini Breizhat. Pennabeg donañ an enkadenn m'en em gav pesketerien Vreizh eo ar rouesoc'h-rouez ma teu ar pesked da vout. Ha mont a reont rouez peogwir e vez pesketaet re, en ur zistrujañ ar munuz hag all. Neuze, ret-mat eo lakaat harz da gresk ar peskerezh, pe e teuo sur an deiz ma ne chomo mui netra da bakañ. Penaos ober an dra-se e doare da ziwall mad ar muiañ ar gwellañ eus hor c'henvroiz, setu ur gudenn all.

Dleout a rafemp moarvat klask lakaat an darempredoù etrekeltiek da dalvout war an dachenn-se. Gwir eo ne daol ket «paotred ha merc'hed ar brezhoneg», na re ar yezhoù keltiek all, evezh a-walc'h ouzh ar c'hudennoù armerzhel. N'hon eus ket kalz a bouez nag a levezon e-metou ar re a ren an armerzh, an ezhec'h vras («patroned») hag ar sindikadoù, ha n'omp ket niverus a-walc'h evit kaout kalz krog war ar bolitikerien. Perak ? Ne gav ket din ez eo kement-se en abeg ma vefe hor pennoù er c'houlmoul daoust ma kredan ne studiomp ket pizh a-walc'h an nerzhioù hag an darempredoù a laka ar gevredigezh vras da vont en-dro, ken e chom re eeunik hor meizadur eus ar politikerezh. Kentoc'h, evit ma c'hellfemp lakaat an darempredoù etrekeltiek da dalvout war dachenn ar pesketeriezh, e rankfe pesketerien Vreizh koulz ha re ar broioù keltiek all gouzout ez eus un tamm kerentiezh etrezo, ha bezañ chalet gant an dra-se. Kerentiezh, en degouezh-mañ, zo dreist-holl, un afer a yezhoù. Met n'int ket chalet gant ar brezhoneg na gant yezh keltiek all ebet, peurluiañ. Evel an darn vrasañ eus an dud e

kement bro, ez int chalet dreist-holl gant gounit o buhez, ha dastum danvez. Neuze, ne weler ket perak e rofe pesketerien Iwerzhon divizoù emsavusoc'h da re Vreizh eget da re Holland, Bro-Saoz, Alamagn...


Ma vije dieub an holl vroioù keltiek, ha ma ne vefent ket dalc'het gant reolennoù ar Gumuniezh Armerzhel Europat, e c'hellfent marteze en em glevout evit aozañ ur C'henvarc'had Armerzhel Keltiek. Ezhomm o defe avat da vout barrek da zifenn ar riblennadoù peskedus en-dro d'o aochoù, rak pobloù all a zo hag a gav dezho o deus «gwirioù istorel» er biojoù-se ivez. Iwerzhoniz a c'helfe deskiñ digant Breizhiz penaos diorren o fesketerezh. Daoust hag e vije ar besketerien vreizhat prest da zegas lod eus o fesked d'al labouradegoù iwerzhonat ? pe da vihanañ da ziskouez er porzhioù iwerzhonat pegement o devez paket ? Diaes e vefe trec'hifi war an disfiziañs. Un nebeut bloavezhioù 'zo e voe klasket ober un emglev etre Gaillimh (Galway) hag An Oriant hag en dije talvezet da besketerien ar porzh iwerzhonat. Ne voe ket goulnnet o ali digant ar re-mañ evel ma teree, war a seblant. Ha setu ar mennad o vont da netra.

Ur C'hendalc'h Keltiek Armerzhel ha Kevredigezhel ne vo anezhañ moarvat nemet en deiz ma vo krefv a-walc'h an emskiant o deus pobloù ar broioù keltiek eus ar c'hudennoù boutin dezho o-unan, dishevel diouzh re ar pobloù amezek, hag o defe da c'hounit o klask o diskoulmañ a-gevret. Evit ar mare, n'eus nemet tud 'zo en emsavioù sevenadurel hag a wel an traoù evel-se. Abaoe pemzek vloaz, e striv ar C'hevrec'h Keltiek (Celtic League) da startaat an darempredoù etrekeltiek war an tachennoù all, da grouñ un hengoun a gengred politikel dre skrid ha dre ober en ur embann ur gela'hgelaouenn hag en ur aozañ displegadoù a genskoazell. Ma vefemp harpet gant muioùc'h a dud e c'hellfemp

diavaez eus hor strolladigoù, ha marteze e taolfe rummadoù-labouerien evel ar besketerien -pe da vihanañ ar re a zo e penn o sindikadoù- evezh ouzh ar mennadoù a voe degemeret gant ar C'hevrec'h Keltiek, er vodadeg-vloaz warlene, o kinnig un diskoulm a zalc'hfe kont eus goulennoù grofis Iwerzhoniz ha Kerneveuriz koulz hag eus gwirioù ar besketerien vreizhat (gwelout CARN, Niv. 19, p. 19, mennadoù 20 hag 21). Gant gwellañ goure'hemennoù.

Alan HEUSAFF

**CARN** : trimiziek, 24 fajenn, koumanant : 20 kur ar bloaz. E saozneg evit an 3/4, e yezhoù keltiek evit ar peurrest. A c'heller goulnnet digant J. Derouet, Hent Kemper, Bourc'h Pluguñvan (Plu guffun), 29000, KRP 3264-47 Naoned. Evit al lennerien vreizhat e vez embannet ur stagadennad a ziverradurioù, e brezhoneg hag e galleg, eus ar pennadoù.



AR "SANTA-MARIA" LESTR KRISTOFORO KOLOMBO  
DIBENN AR XV-<sup>vet</sup> KANTVED

Hervez doare, ne ouzer ket re penaos e oa al listri en deus Jakez Karter kavadenet ar C'hanada ganto. Pe, da nebeutañ, ne ouzon ket. Er c'hontrol da Gristoforo Kolombo, ne ro Karter disklariadur ebet diwar-benn e listri. Ne ro deomp da anaout nemet o anvioù hag o ment. En e veaj kentañ, an div vag a oa dindanañ a rae bep a 60 tonnellad. An eil beaj a voe graet gant tri lestr : an «Erminig Bras» a oa, evel ma skriv e-unan, «war-dro kant pe dri-ugent tonnellad» e vant, an «Erminig Bihan», war-dro 60 tonnellad hag erfin «an Emerillon», war-dro 40 tonnellad. Listri bihan a oa anezho eta.

Al lestr diskouezet a-us a zo ar «Santa Maria» a gasas Kolombo an Amerika, evel ma voe adsavet er bloaz 1892 gant ur gomision eus ar Spagn, 22,60 metr hed dezhi ha 7,80 metr treuz. Un tel-gwern e oa. Ar wern vizan anezhi ne zouge nemet ur ouel garrez, ar wern vras a zouge div ouel garrez hag ar wern volosk a zouge ur ouel duc'hornek. Dindan ar wern-gorn e oa ivez ur mizan-balouin.

An «Erminig Bras» ne ranke ket bezañ wall-zishevel diouzh lestr Kolombo.



## JAKEZ KARTER UR VEAJ EVIT MANN

Ne c'hell ket an teirvet beaj graet gant Karter d'ar C'hanada bezañ displeget war he hed rak n'eus deuet betek ennomp, siwazh l, nemet un tamm bihan eus an danevell a savas evit ar roue. Ar peurrest, da lavaret eo, ar c'hreiz hag ar fin anezhañ a zo bet kollet.

N'eus forzh l Dudius eo an derou anezhañ rak ma tispieg Jakez Karter ennañ penaos e voe aozet ar veaj ha peseurt pal a voe merket dezhi. A-hend-all, dre skridoù all, ec'h ouzomp petra a zeus a-ziwarni.

### Mont d'ar C'hanada ? D'ober petra ?

Lavaromp diouzhtu ne voe nemet e 1541 ez en em gavas Karter prest da vont en-dro d'ar C'hanada. Neuze e c'heller en em c'houlenn perak e voe ret dezhañ gortoz pevar bloavezh hanter evit lakaat da ouel en-dro.

Da gentañ, m'en doa kavet Karter ur stêr vras ha ledan o' reddek dre greiz ur vro stujus ma kreske warni gwezh eus ar c'haerañ, n'en doa kavet, anat eo, nag aour nag arc'hant. N'en doa ket kavet kennebeut, an hent misterius-se a gase da Gatay, da lavaret eo, da Vro-Sina. Neuze ne ziskoueze ket an «douaroù nevez» bezañ ken talvoudus ha ma kreded e vijent bet.

Er c'hontrol, ar goañvezh tremenet gant Karter hag e gompagnuned du-hont, en doa diskouezet pegen garv ha risklus e c'helle bezañ ar vuhez er C'hanada. Daoust ha ne oa ket ar ouezidi o-unan, bet degaset gant Karter dre heg, kement a brouennoù bev eus paourentez ar vro peogwir n'o doa d'en em wiskañ nemet kozh tammoù krec'hin anevaled ?

Bez'e c'helled en em c'houlenn enta da betra e servijfe mont d'ur vro ken paour

ha ken rust ma ne oa bet kavet enni nag aour nag arc'hant, p'en doa ar roue kement ezhomm anezho evit brezelekaat a-enep Charlez ar Pempvet.

Nemet e vez diaes diwiziennañ ar spi eus kalon an dud hag, ouzhpenn, e veze rouaned an amzer-se bepred a-zevri o klask brasaat o domaniou hag, en tu-hont d'ar mor, en «douaroù nevez», e oa tachenna-douù divent poblet rouez a c'helle, a-hervez, bezañ lakaet aes a-walc'h dindan dalc'h ar roue.

Kerkent ha Gwengolo 1398, e oa bet kinniget d'ar c'honestabl Montmorency, amiral-meur Frañs, kas du-hont 276 treva-dennad -na mui na maez- hag int «a-youl vat ha barrek war an arzoù hag an ijinerzhoù», da lavaret eo mañsonerien, kilvizien, toerien, goved, gwiniieren (ya l) hag orfebourien (zoken) a rankfe, ur wech erru en o bro nevez, bezañ gwarezet a-zoare.

### Roberval gouarnour a-berzh ar roue

Hag ez eo evit seveniñ ur seurt embregerezh e voe aozet teirvet beaj Karter kerkent ha m'en devoe ar roue Frañsez kentañ, echu gantañ e droioù-brezel, goar hag amzer da soñjal er broioù tramor. Kaoz a voe neuze da lakaat broioù Hochelega ha Kanada dindan e zalc'h. Un denjentil eo a ranke ar wech-mañ kas an traoù en-dro. Perak, avat, e voe dibabet Yann-Frañsez La Roque, marc'heg, aotrou Roberval, evit mont du-hont, evel letanant ar roue ha «gouarnour broioù Kanada hag Hochelega» ? Ur skrivagner (1) a gormz anezhañ evel eus un den speredek nemet skañv e benn hag, ouzhpenn, «goloet a zleoù».

38 Karter, eñ, kabiten-meur ma oa ha

mestr-loman al listri, a voe lakaet en e gerg ober kavadennoù all e Saguenay dreist-holl a oa, sañset, dalc'het enni pinvidigezhioù bras ha broioù eus ar c'hentañ. Bez'e rankent mont du-hont gant 5 a listri. An daou bennrener a voe a-du, evit ur wech, evit ma vefent paramantet e «Sant-Malou-an-Enezenn e Breizh».

Hervez doare e oa aotrou Roberval berboellik un tamm, rak n'en em gavas e Sant-Malou nemet pa voe peurbrest al listri. Jakez Karter a lavar zoken «edont er-maez eus ar porzh hag e oa savet d'an nec'h o delezioù ganto». Gwashoc'h a zo, avat, rak ne voe nemet neuze e verzas Roberval ne oa erru nag ar c'hanolioù, nag ar c'hanolioù, nag ar poultr, nag ar pourveziou all a felle dezhañ kas gantañ. Cheñch a reas penn d'e vazh hag e tivizas ez afe d'an Normandi da vezañ tostoc'h ouzh e bourveziou hag e lakafe aozañ e porzh Honfleur, ul lestr pe zaou evit o c'has du-hont.

Divizet e voe ivez ez afe kuit Karter gant e bemp lestr, hep mui gortoz, evit sentiñ ouzh urzhioù ar roue.

### Karter er C'hanada evit an teirvet gwech

D'an 23 a viz Gwengolo 1541 eo ez eas kuit al lestr gant vihan (2). Ken fall, avat, e voe an amzer a gavas war he hent, m'en em gavas Karter en Douar-Nevez hemet gant ul lestr all, an hini m'edo beskont Beaupré warnañ, an tri lestr all, kollet o c'habiten-meur ganto, na errujont nemet pell en e c'houde. Ken hir e voe an dreizhadenn ma voe ret, dre ziouer a zour, reiñ sistr da evañ d'an anevaled a gased d'ar C'hanada da baotat eno. (3).

Souezhus a-walc'h, e porzh Karpont, e penn hanterosañ an Douar-Nevez, eo e touras J. Karter hag e kemeras evit mont d'ar C'hanada war e c'horregezh un hent a anaveze mat bremañ, peogwir e oa an hini bet heuliet gantañ en div wech a-raok.

Ar pemp lestr malouat en em gavas a-benn ar fin e Sant-Kroaz d'an 23 a viz Eost, tri miz goude bezañ lakaet da ouel.

Degemeret brav e voe hon tud gant an Indianed. Ne ziskouezjont ket bezañ er c'hilac'haret pa glevjont e oa marv Donna-konna. Goude bezañ graet fest ganto, e klaskas Karter ul lec'h a-zoare ma c'hellfe goañviñ e surentez gant e listri. En kavout a reas er C'hab Ruz, nepell diouzh St-Kroaz.

D'an 2 a viz Gwengolo, echu gantañ divourzhañ e bourveziou, e kasas en-dro da Sant-Malou daou eus e listri, ganto lizheroù ma kemenne d'ar roue n'en doa gwelet roud ebet eus Roberval evit c'hoazh.

Bamet e oa bepred Karter gant doare ar vro hag an douar, ken strujus e seblant bezañ. N'hell ket, avat, chom hep sellout amañ hag ahont, tregaset ma vez e spered gant ar metaloù hag ar vein priziuz a garfe kement kavout. Krediñ a ra meur a wech bezañ graet kavadennoù talvoudus ken e kemer mein 'zo evit diamantoù hag e skriv ez int «ar re gaerañ», soñjal 'ta, «a c'hell un den gwelout gant lufrus ha benet disper ma'z int».

D'ar 7 a viz Gwengolo, e sav a-benn ar stêr adarre gant 2 vagig. Ne daio ket betek Hochelega ar wech-mañ. Tremenet gantañ e-biou da zaou lammdour ez en em gav gant ur meuriad all a Indianed. Degemeret brav ganto ha bet diganto diskleriadurioù diwar-benn ar vro pelloc'h hag un trivet lammdour, e ra e venoz distreiñ da Sant-Kroaz. Soñjal a reas, moarvat, e oa erru re gozh ar bloavezh evit derc'hel da vont pelloc'h e diabarzh ur vro ken rust ha ker yen e-pad ar goañv.

Danevell Karter ne da ket pelloc'h, ha, neuze, ne c'hellan ket diskleriañ penaos e tremenas ar goañvezh eno ha petra a reas, ur wech teuzet an erc'h hag ar skorn.

Aet skuizh o c'hortoz Roberval, moarvat, e kemeras penn e hent da zistreiñ da Sant-Malou. En em gavout a reas gant herañ e «porzh Sant-Yann». Bez'e c'heller krediñ edo ar porzh-se e goudor ar C'hab Sant-Yann, war aod mervent an Douar-Nevez, bet gwelldennet gant Karter e-kerz e veaj kentañ. Petra, diouzh ho meno, a c'hoarvezas ? Ma l Lezel a reas Karter «letanant ar roue ha gouarnour broioù Hochelega ha Kanada» d'en em zibab en ur vro n'anaveze ket, ha derc'hel a reas gant e hent.

### Kavadenner ar C'hanada

Ne ouzer ket pe da vare resis en em gavas Karter e «Sant-Malou-an-Enezenn-e-Breizh». A-raok an 21 a viz Here 1542, e voe rak en deiz-se e kemere perzh, evel paeron, e badeziant merc'hig letanant-gouarnour kêr.

Kavadenner ar C'hanada eo Jakez Karter ha den n'en deus morse nac'het outañ an titl enorus-se. Pa seller war ur

garnenn e pelec'h emañ *Krec'h-ar-Roue*, e verzer pegen don ez eo aet e-diabarzh Amerika-an-Norz. Ac'halese, betek toull-digor strizh-mor Belle-Isle, ez eus un nav c'hant milvor bennak, a-nij-askell, hag e c'heller muzuliañ dre-se an hardizhegezh, ar skiant eus ar mor hag eus an dud, kement-se holl kemmesket gant an evezhiegezh ar vrasañ a rankas diskouez Karter evit mont keid-all hep gwall-zarvoud ebet, koulz lavarout. Ma lezas ul lestr war e lerc'h e-kerz e eil beaj, eo abalamour ma oa berr gantañ ar vartoloded goude ar goañvezh kriz ha marvus edo o paouez tremen. Evel ma lavar Peisson, e oa anezhañ, a-dra-sur, ur morær dispar. Bez'e c'heller keuziañ, memes tra, e skrapas un toulladig Indianed a ranke an holl anezho mervel pell diouzh o c'hoadeier. Nemet e oa ar c'hiz d'ar mare-se gant an ergerzhourien, degas ganto gouezidi da lakaat anat dirak an holl o doa e gwir kavet broioù ha pobloù dianav. Daoust ha n'en devoa ket Karter talvezet da baeron d'ur «oueziadezig» e 1528, pell a-raok dezhañ mont d'ar C'hanada ?

Bez'e c'heller ivez kavout iskis en dije Karter dilezet Roberval hag en oc'h erruout en ur vro dianav dezhañ war dreuzoù ar goañv. Sellat en doa outañ a-gorn, moarvat, a-hed ar wech, rak ma c'helle soñjal, ma oa ur gouarnour da vezañ anvet, e oa dezhañ da gaout ar garg-se. Marteze ivez, n'en doa ket fiziñs a-walc'h e Roberval nag en dud a gase gantañ evit chom ganto, rak e-lec'h tud a galon vat o dije «gouestiet o amzer da greskiñ hor feiz santel e meur a vro tramor», n'en doa kavet d'e ambroug nemet galeourien ha lakepoded all.

#### Salud deoc'h.

Gant va lizher, e kavot ur chekenn bank a 36 Lur, evit adkoumanantif da Varr-Heol evit ar bloaz a zeu.

Trugarez.  
Ganeoc'h 'vit ar yezh.

#### Teol gwenn

Roberval hag e dud ne rejont ket berzh er C'hanada ha, kerkent hag ar bloaz war-lerc'h e voe kaset ul lestr da zegas en-dro ar re anezho a oa bev c'hoazh. Tud 'zo a lavar ez eo Karter a vije bet karget eus ar gefridi-se, nemet n'en dije graet nemet mont-dont.

Roberval a reas un eil taol-aesaf evit seveniñ dleoù e garg, hep sikour Karter, ar wech-mañ. Ne ouzer ket, avat, petra c'hoarvezas gantañ.

Ne voe nemet e 1608, gant diazezidigezh Kebek gant Samuel Champlain ma krogas ar C'hallaoued da boblañ da vat ar C'hanada. Hag ec'h ouzer a-walc'h petra a zo c'hoarvezet da c'houde.

J. Karter a varvas e 1557. Adalek 1542, betek e varv, e vevas evel ur bourc'hiz ma oa, hag, a-hervez, ne deas mui war vor -nemet e 1543 marteze. Ne lezas war e lerc'h, na madoù bras na bugel.

DIWEZH

#### Notennoù

- (1) Leon Lemonnier: «Histoire du Canada français», Hachette.
- (2) En danevell eo skrivet 1540 nemet o vezañ ma oa bet sinet al lizher bet kaset gant ar roue da Garter ar 17 a viz Here 1540, e kreder ne c'hellas mont kuit nemet ar bloaz war-lerc'h da lavaret e 1541. Egwir, meur a dra a chom dispis e buhez hon ergerzhour malouat, daoust d'an enklaskoù stank bet graet diwar-e-benn.
- (3) J. Karter a skriv atav «Kanada», hep ger-mell. Me n'am eus ket heuliet ar boaz-se, e gwir pe e gaou.

Roazhon, 23 a viz Genver 78

pajenn 51). Teir pe beder gwech ez eo bet aozet festoù-noz gant mignoned din e Gwizhurieg (Breizh-Uhel), hep gwin ruz, na bier, na chouchenn, nag evajoù alkoolel all, met gant chug-frouezh ha sistr nemetken. Kudenn ebet na tabut, na reuz ha koulskoude, e teu an dud (dreist-holl re yaouank) ha plijadur 'vez bepwech.

A.G.

## ar pezh a soñjer diwar-benn Barr-Heol

Adskrivañ a reomp amañ ar pezh a lavar *Imbourc'h*, niv. 96, 31 Kerzu 1977, paj. 643.

Dont a ra *Barr-Heol* ingal er-maez... Moulet brav ha liesseurt testennoù ha fennadoù, daoust ma'z eo un tammig re «istorek» hag «heleennek» ha «deurennoù» (??). Pezh a skrivont hiziv avat, a zo «diamzerel», koulz lavaret, ha gellat o dije hen skrivañ kerkoulz ugent pe dregont vloaz 'zo. Kement-se avat, a zo tregasus. Rak, e gwirionez, e chom *Barr-Heol*... oberenn un den hepken, un oberenn ha n'eo ket harpet gant strollad ebet, me 'fell din komz eus ur strollad kenurzhiat ha n'eo ket ur gronnad laosk a genskriverien. Setu, evel ma lavaren, nec'het e c'heller bezañ o soñjal e dazont ul luskad katolik e diabarzh an Emsav. Hep mar ebet, ez eus ezhomm eus ur strollad evit bodañ stourmerien vrezhon gristen ha dedennañ ar re yaouank. Anez krouifi ur seurt strollad e vo tonket d'ar (gelaouenn-mañ) mont da get ur wech m'o devo disterniet ar re a ra war (he) zro. Ha tonkadur *Imbourc'h* ne vo ket gwel, evel just, ma ne zeu ket a-benn da groufi ur stroll(ad) kristen bennak e framm an Emsav.

... ar pezh a zo kerseüs avat, ez eo un diouer a genemglev etre kristenien e par an Emsav, en un amzer ma'z eus un enkadenn c'hrevus war dachenn ar Feiz hag an Iliz oc'h ober he reuz e Breizh koulz hag en Europa ar C'hornog dre vras.

IMBOURC'H : koumanant-bloaz : 40 Lur  
KRP Y. OLLIVIER 1 54 25 Roazhon

Hep mar ez eus kalz a draoù gwir er pezh a lavar Y.O. diwar-benn an ezhomm a vefe da sevel ur strollad brogarourien gatolik da vezañ evel ur goell en Emsav 41

breizhat.

Evit pezh a sell ouzh ar pezh a lavar diwar-benn *Barr-Heol*, dav anzav ne deo ket eus ar figusañ, ha rener *Barr-Heol* o terc'hel da glemm dre ma ne deo ket moulet ervat er gelaouenn ! Kelaouennoù evel an *Télégramme* eus Brest a ra alies ivez ar rebech-se. Hep kontañ ar goumananterien !

Ar pezh a lavar diwar-benn danvez *Barr-Heol* hag ar mank a venozioù, e c'hell kement-se bezañ gwir evit darn, lakomp dreist pep tra, ar penrener e-unan. Estregetañ avat, a oar lakaat menozioù reizh ha frouezhus war bajennoù ar gelaouenn, da c'hras Doue !

Evit gwir e vefe dav da *Imbourc'h* ha da *Varr-Heol* kenlabourat, unan o pourchas menozioù hag gile ur yezh dereat ha brezhonek-brezhonek (pe dost !), rak keit ha na bourchaso ket *Imbourc'h*, siwazh ! brezhonekoc'h yezh eget na ra, e chomo izel niver e goumananterien ha ne vo ket risklet da welout e venozioù o tougen frouezh gant ur yezh dinatur evel-se ! N'eus ket 10 a dud barrek da zivinout ar yezh-se. Re a zo re, ne servij ket ! Ha despetus ez eo gwelout ur spered kaer, un den gouizielek evel Youenn Olier o koufoniñ e amzer evel-se, o trailhañ hag o porc'hellat ar yezh.

KLERG

## KEGINEREZH

### BACKEOFE (Podezad kig ha legumaj, giz Bro-Elzas).

- 500 g peultrin ejen,
- 500 g skoaz dañvad,
- 500 g skoaz hoc'h,
- Avaloù-douar, ognon, louzeier-kegin, holen, pebr, gwin Elzas.

Lakait da drempañ e-pad 24 eur, e-barzh ur sasunadur graet gant gwin Elzas, pebr ha kement seurt louzaouenn a blij deoc'h ; kement-mañ, troc'het e karzennoù : 500 grammad peultrin-ejen, 500 grammad skoaz-dañvad ha 500 grammad skoaz-hoc'h.

E-barzh ar bodez pri, lakait da gentañ ur goulezennad (gwiskad) avaloù-douar troc'het munut, goude-se ar c'hig, goude-se ur gwiskad ognon troc'het munut, ur gwiskad all avaloù-douar hag ur gwiskad diwezhañ ognon.

Lakait da boazhañ er forn, war-dro 2 eur hanter, ha degasit ar bodez war an daol, d'an dud d'en em servijañ diouti.

## Pedenn an Iliz

J. LEC'HVIEN

J. LEC'HVIEN : *Pedenn an Iliz*. J. Lec'hvien, 22110 Kergrist-Moelou. K. R.P. 1950-56 Roazhon (25 L + mizoukas).

Dav meulif diouzhtu an oberour evit ar mell labour kaset da-benn gant : e droidigezh diwar levr gallek *«La prière du* 42

*temps présents*. Evitañ da vezañ liesskrivet hepken, ez eo brav-tre al levr da welout hag e tellez ivez an neb en deus e skriverezet, mil meuleudi. Anat eo ez eo darev hor yezh evit al liderezh.

Ne seblant ket an oberour bezañ bet nec'het gant mann ebet : ar meulganou en deus troet evel en ur c'hoari, hag o lakaet da

vont war an tonioù-orin, pe zoken war donioù eus ar vro. Sikouret eo bet, emezañ, gant embannadurioù **Barr-Heol evit al liderezh**: gwir eo en deus implijet ar re-mañ, met mar taolit evezh, en deus gouezet gwellaat meur a gempedenn. Ha neuze pourchaset ez eus bet dezhañ gant Maodez Glanndour meulganou troet aketus hervez ar meulganou latinek.

Rikouret eo bet ivez gant troidigezhioù an Aotrou Per ar Gall, person bremañ e Lokarn. Siwazh ! pa weler pegen brav ez eo al labour nevez-mañ e c'heller keuziañ d'ar stumm un tamm dibalamour m'eo bet embannet e levrigoù gant an Aotrou Gall !

An tamall nemetañ, d'hor meno, a c'heller ober d'an Aotrou Lec'hvien, eo bezañ kemeret da batrom evit e labour-efi, ul levr savet gant ar C'hallaoued, peogwir ez eus tu da gaout abeg e labour ar re-mañ. E-skeud-se, ez eo bet douget J.L. da sachañ a-wechoù re war e c'heriadur evit pegañ gwella-se ouzh ar galleg... Met evel ma lavar e-unan : diwar beseurt labour all en devije gallet ober e hini ?

An embannadur-mañ avat, a ro dimp digarez d'ober ur sell war labourioù ar C'hallaoued, er bloavezhioù tremenet, war dachenn al liderezh, dreist-holl an «Ofis Santel» (pe, mar kavet gwel, *Pedenn an Iliz*), evit esa kompren peseurt menozioù a zo ouzh o ren... O vezañ ma'z eo un tamm bihan «teknikel» ar studiaden-mañ e c'houlennomp digant hol lennerien hon digareziñ, met o fedañ a reomp da sellout ervat ouzh ar pezh a glaskimp dizoleiñ, rak traoù eus ar pouezusañ, ha marteze, eus ar grevusañ, hon eus da ziskleriañ.

Kerkent hag aotreet lavarout an Ofis Santel er yezhoù-pobl, e oa bet embannet evit ar c'hallegerien e 1969, *La prière du temps présent*. Hep gortoz na vefe bet embannet gant Roma ar pezh a vez graet anezhañ e latin an «*Editio Typica*», da lavarout, Skouer ar Brevial Nevez. Se 'oa e miz Gouere 1969. Dav e oa bezañ gwall-breset, ne gav ket deoc'h ? Ne oa mui 43

nemet daou vloaz da c'hortoz a-raok ma'z embannje *Roma Skouer, Patrom al Levr-pediñ ofisiel*.

E 1971 eta, e teuas er-maez al levr latin hag a vez graet anezhañ hiviziken, n'eo ket Breviarium (Brevial), met *Liturgia horarum: Liderezh an Eurioù*. Labour war ar partolo d'an droonion pe d'an adaozerion, ne gav ket deoc'h ?

Er memes bloaz-se avat, e voe adembannet levr gallek 1969 adkempennet evel just, en ur brometif e vije savet un droidigezh diwar al *Liturgia horarum*, a-benn un 3 bloaz bennak.

Ma ! E-lec'h ober kement-se e voe gwel ganto ober ul levr all hag a vez graet anezhañ *«Lectures pour chaque jour de l'année»*. Setu dizarbennet Roma evit an eil gwech. Kement a vall a oa war ar re a oa karget da bourchas danvez-pediñ, ha danvez-prederiañ d'an dud-a-iliz, d'al leanez ha zoken d'ar fidelel !

A-barzh-ar-fin, setu *Le Livre des Jours* (Office Romain des Lectures) o tonet er-maez e 1976, gant aotere Breuriez-Veur al Lidou eus Roma, sinet d'ar 24 a viz Here 1975. Ul levr *Lennadennoù*. Pe evit bezañ resisoc'h : Lennadennoù al *Liturgia horarum*. lakaet e galleg.

Al lennadennoù-se a zo daou rumm anezho evit pep devezh : unan tennet diwar ar *Skritur Sakr*, ha neuze, an eil lennaden, un Homilienn (pe lod eus un homilienn), gant unan eus Tadoù an Iliz, pe draod tennet eus Lizheroù ar Pibien, pe eus Reizhadurioù ar Sened Vatikan-II, da skouer.

(Sklaer a-walc'h ez eo an traoù, a gav deomp, zoken evit unan bennak ha n'eo ket boaz diouzh doare-pediñ an dud-a-iliz). Met amañ, emañ an dalc'h : n'eo ket bet aozet tamm ebet an droidigezh diouzh doare al LATIN. E latin, da skouer, ec'h embanner, bep tro, eus a belec'h eo tennet al Lennaden, ha lod eus al lennaden ez eo an TITL-se e-unan. Ger ebet eus a gement-se en droidigezh c'hallek, nemet ur meneg hepken eus orin an destenn. Goude pep lennaden e vez, evel pa lavarfen, ur c'hantik berr anvet «respon» peogwir ez eus evel un diskan er c'hreiz anezhañ da adlavarout. Rasket eo bet ar respontoù e galleg, pe lakaet un tamm adaozadur diwar



an hini latin, goude an homilienn gentañ, ha neuze ur gempedenn goude an eil homilienn E-kreiz homiliennoù an Tadoù (eil lennadenn) e kaver alies arroudataoù tennet eus ar Skritur-Sakr. D'hor meno, e vije bet un dra a-bouez merkañ spis eus a belec'h ez int bet tennet, Lizherennoù stouet hepken a ziskouez ez int tammoù eus ar Skritur Sakr. Furoc'h eo bet an Italianed war ar poent-se, evel ma welimp bremaik...

Evit pezh a sell ouzh an droidigezh e oa dija ur bern traoù prest ha rac'h, ha na oa da ober nemet pesketa e-barzh : **Skritur Sakr** ha neuze embannadurioù eus ar siriusañ hag eus an talvoudusañ «Sources chrétiennes». Dre-se ne vefe ket netra da abegif el levtr nevez *La prière des jours*, panevet ez eus oberennoù gant Tadoù an Iliz ha n'eus bet embannet biskoazh troidigezh ebet diwarno. Ha neuze e weler en e sklaerañ pegen berr ez eo an anaoudegezh o deus darn eus al latin...

Ne c'hellomp ket amañ evel just, ober un teskad eus ar faziou-se ha ne dint ket eus an niverusañ-holl evelkent. Met, va Doue, re niverus, re stank ez int c'hoazh.

Anat eo n'o deus komprenet netra en Homilienn gant Sant Maksimoz ar C'hofezour (4 a viz Genver, paj. 133). Gwir eo ez eus ur «bed» etre ar gresianeg-orin hag an droidigezh latin, met evelato, skrivañ traoù evel-hen «*Le Christ Dieu, lorsqu'il naît, se fait homme*». Paour-kaezh Maksimoz, ne ouie ket peur e oa deuet ar C'hrist-Doue da vezañ den e gwirionez ! Pa felle dezhañ lavarout un dra bennak evel-hen «*An hini a zo Doue a zo bet ganet evel Krist, deuet eo da vezañ den dre gemer ur c'horf a zo ennañ un ene speredek...*».

Dre zievezhed moarvat, o deus lakaet an droourion an dra-se, met div bajenn pelloc'h, e lenner «*le jour de sa naissance, où il prend la nature de serviteur*». An dro-mañ n'eus tu ebet da damall diaester ar gresianeg, peogwir emañ ar frazenn diwar skridoù Sant Aogustin ! (paj. 137). Hemañ, a-hervez, en devoa c'hoant da lavarout un dra bennak evel-hen : «*Lidomp gant doujañs ha devosion ginivelezh (an Aotroù) (en e) natur a sklavour*».

Daoust ne deo ket stank-stank, evit lavarout stank, an traoù droukkomprenet ez eus evelato kalz-kalz re, hag anat eo, n'eo

ket bet graet al labour a-zevri-bev...

Ne fell ket deomp borrodiñ ha penn, met abaoe m'eo bet tennet kuit ar «*bepred* Gwerc'hez» eus ar Gonfiteur, e c'heller en em c'houlenn petra 'zo e pennoù darn eus an deologourien nevez a weler o paotaat evel louzoù fall, en hon amzer-ni. Petra a soñjit-hu eus al latin-mañ «*semper clausa*» diwar-benn ar Werc'hez, troet «*toujours pure*». E brezhoneg e lavarfed «*bepred gwerc'h*» pe zoken «*bepred kloz*», hag an «*integerrima*» gant Sant Bernez, troet «*très pure*». An eil ger ne ra ket evit egile. Anterin e brezhoneg a rafe an afer brav-mat.

E berr-gomzoù, embann ul levtr evel *Le livre des jours* gant pezhioù-fazi e-barzh, a zo ober goap eus an dud !

An Italianed o deus embannet o zroidigezh diwar al *Liturgia horarum* dindan an anv a *Liturgia Delle Ore*. Ne weler ket petra o deus diverret oc'h ober se, pa'z int mailhed war al latin, hag abeg mat en devoa an Tad Karl Egger da glemm, en ur ziskleriañ e chome an droidigezh war-lerc'h an destenn-orin ; n'eo ket, marteze, dre ma oa fall an droidigezh-se, met dre ma n'eus koulz lavarout yezh ebet gouest da gevezañ ouzh al latin. Met kement-se a sell ouzh an Italianed ! Dav merkañ avat, ez int bet furoc'h, en ur stumm, eget ar C'hallaoued, rak gortozet o deus ar bloaz 1975 kent mouiañ o levtr-pedennoù : 4 bloavezh-labour... Gwir eo o devoa ar C'hallaoued abegoù, diouzh o zu, evit ober dishefvel !!!

Embannet ez eo *Liturgia delle ore* dres evel al latin : 4 levrenn ha memes lizherennoù. Ha war-bouez nebeut memes priz ! Klasel-tre e seblant bezañ o zroidigezh diwar ar pennadoù *Skritur-Sakr* ; implijet o deus ivez «*Les Sources Chrétiennes*», ar pezh a ziskouez n'o deus ket labourioù hefvel en o yezh. Diaes eo gouzout avat, penaos ez int en em gemeret evit embann ar meulganou hag eus a belec'h o deus tennet lod anezho (unan da vihanañ a zo tennet eus *La Divina Commedia* !). Met peurvuiañ o deus embannet war un dro, ar meulganou e latin, evel ma oant a-raok.

Frankiz a-walc'h o deus kemeret e meur a lec'h ! Kalz re bell, a gav deomp, ez int chomet diouzh al latin evit pezh a sell ouzh ar pezh a anver *Pedennou* (pedennou goude Ofis ar Mintin ha goude ar

Gousperou)...

Setu dres ar pezh edomp e-sell da rebech da *Bedenn an Iliz* aozet gant hor c'heneil J. LEC'HVIEN, -ha c'hoazh n'eo ket dezhañ, met da aozerien *La prière du temps présent*. Met ne welomp ket perak e vefe difennet ouzh ur rumm ober ar pezh a zo aotreet da zarn all !

Hogen ar pezh a zo a seblant bezañ sur, hervez ar fedoù meneget ganeomp, eo, emañ

ar C'hallaoued o klask teurel kuit diwar o chouk «*yev*» (?) Roma, evit ober o zamm keusteurenn o-unan. Caveant consules !

**N.B.** *Krog oar dija da c'houlenn «Homiliennoù an Tadoù». O vezañ ma rankomp labourat etre keuz ha reuz ha koll ur bern amzer gant BARR-HEOL, ez eo diaes lavarout a-benn pegoulz e vint prest !*

Klerg

## keleier

### EUSKADI war hent an emrenezh

War-lerc'h Katalonia, setu m'emañ Euzkadi war hent an emrenezh.

Savet ez eus bet, ar 15 a viz C'hwevrer, gant gouarnamant ar Spagn «*Kuzul Meur Euzkadi*» en devezo en e garg aozañ an emrenezh da zont da lavaret eo e ranko en em glevout gant gouarnamant Madrid da c'houzout penaos e vo ingalet ar galloud etre an daou c'houarnamant, hini Euzkadi hag hini ar Spagn. Diaes e vo, rak, ouzhpenn, ma venno hemañ mirout gentañ al lod brasañ eus e veli, en deus diskleriet a-benn bremañ ar strollad ETA, an hini taraañ, e talc'hfe da stourm evit dieubidigezh ar vro.

En em vodet eo ar C'huzul dija. Pemzek a dud a zo ennañ, anezho holl anvet gant ar c'hostezennou politikel hervez nerzh pep hini. Kavout a reer ennañ etre 5 sosialist, 5 broadelour euzkarat, 3 faotr eus ar c'hreiz, unan anvet gant tud an tu kleiz pellañ, hag erfin, unan dieub.

An Aotroù *Ramon Rubial* a zo bet anvet da brezidant ar C'huzul ha kement-se a zo sellet evel un dra-a-bouez evit an daou abeg-mañ : ur sosialist eo anezhañ en deus gounezet war an Ao. *Ajuriaguerra* a oa kinniget gant ar vroadelourien vaskat hag ouzhpenn, ne gomz ket yezh ar vro, an euzkareg. Anvidigezh ar prezidant nevez a ziskouez eta, e vo lakaet ar pouez, moarvat, war ar c'hudennou kevredigezhel.

N'en deus, evit c'hoazh, ar C'huzul nevez, galloud nemet war deir eus rannvroioù Euskadi da lavaret eo : **Alava**, **Bizkaia** ha **Guipuzkoa**. **Nabara**, an hini vrasañ, a chom er-maez eus e c'halloud ken n'he devo diskouezet splann war be du e fell dezhi treif. Gout 'ouzer e oa chomet a-du gant Franco, e-pad ar brezel, e-keit ha m'o doa stourmet an teir all gant ar Republikaned.

Bez'e c'heller en em c'houlenn ivez

preseurt darempredoù a vo etre Euzkadi ar Su, hag hi emren, hag Euzkadi an Norzh, houmañ dalc'het start bepred gant Bro-C'hall.

D'an 20 a viz C'hwevrer 1978

### Radio-Skinwel

Un tamm eo bet kresket lod hor yezh en abadennoù Radio ha Skinwel evit lakaat da dalvezout divizoù ar Garta Sevenadurel. Er Radio hon eus ar gwir da glevout ur skingasadenn eus 3 c'hard eur, d'ar merc'her, da 10 eur 15, diouzh ar mintin. Ha neuze, un abadenn-skinwel div wech ar sizhun (un abadenn d'ar sadorn adroet d'al lun). Ne ouzont ket avat, hag-efi ez eo bet an abadenn-Radio, hini ar merc'her, lakaet d'un eur aes... Poan am eus o kredif...

Met setu kresket da vat labour an daou zispleger a glevet an aliesañ : F. Broudig ha Mai Kervareg. Setu perak moarvat o deus mil boan oc'h errouet da reñf dimp traoù dereat. Ar skingasadenn gentañ (d'ar merc'her 1 a viz Meurzh 1978) ne oa ket ur bennoberenn, pell ac'hano (ne gomzan nemet eus ar yezh). An den goulenataet ne oa ket evit distripañ ur yezh hanter-vat zoken. En eil abadenn (merc'her 8 a viz Meurzh) e oa hefvel gant an itronezed eus Brest : ur yezh truilhennek a zeue ganto, ar pezh a ziskouez ne dint ket boas da ober ganti. Evel just, ne fell ket deomp asantif d'al lavarenn-mañ : evel-se emañ ar yezh bremañ. Perak ne vefe ket prientet pizh an holl abadennoù-se ha pourchaset d'ar gomzerien ar gerioù a vank dezho ? Kefvertit da skouer an div skinweladeg diwar-benn ar mouezhiadegoù. An hini gentañ -war-bouez unan pe zaou eus ar gomzerien- a oa pell-pell war-lerc'h an eil e-lec'h ma oa tud hag a oa anat warno o devoa studiet ar yezh, ha c'hoazh e oa aet al lore gant an hini en deus bet he studiet

ar muiañ: F. Morvanou. Komprenet e veze hemañ hep an disterañ poañ! Sklaer-tre ez eo ar respont da reñf eta, pa damaller da stad ar yezh, ar pezh a zo da damall da ziouzigehz an dud, pe lezober an aozerien-abadennoù !

Petra da soñjal diwar-benn abadennoù-skinwel (hep penn na lost ! ) evel an hini diwar-benn Sant-Kadoù e-lec'h ma lavare paotr-e-votod-koad dindan al loar o sklaer-iañ... «*Al lun... vras !*». Hag abaden-Radio ar sul 5 a viz Meurzh 1978 ? Se ne ra ket sirius. Ne daimp ket betek tamall d'an displegerien labourat a-ratozh-kaer da rukunif ar bobl ouzh o yezh, met a-wechoù e c'heller en em c'houlenn...

Diskleriadurioù Reun Richard, bet embannet war ar gazetenn divyezhek **Evit ar Brezhoneg** a ro da gompren pegen start ez eo aozañ war ar prim un abadenn dek munut hepken : eurvezhioù-labour. Ha betek ur poent 'zo e c'heller degemer kement-se evit un didamall hag un digarez evit skingasadennoù eus an truekañ ! Dreist-holl gant M.K. hag a vez ken poanius, ken kazñus alies, klevout ar c'heleier ganti diouzh ar mintin...

Met evelkent ha goude, ez eo poent cheñch penn d'ar vazh ha stummañ ur strollad displegerien barrek da gas an abadennoù en-dro. Ha da reñf harp dezho, dav ez eo krefvaat ar c'hevredad-selaourien Radio-Skinwel, a c'hellfe neuze komz gant pouez ha beli dirak ar pennadurezhioù.

KLERG

Reñf e anv da «**Skingomz ha Skinwel**»,  
18 bis, Ru Duguay-Trouin  
22000 SANT-BRIEG

Arc'hant ar skodenn (5 Lur da nebeutañ):  
Itron A. Omnès, 2 031 55 T ROAZHON

Levrioù kembraek diwar-benn Breizh :

— **CRWYDRO LLYDAW**, Gwyn Griffiths.  
Ur pikol levr, 300 pajenn dezhañ gant ur bern luc'hskeudennoù.  
Priz : 5,95 Lur Saoz.

Da vezañ embannet gant an hevelep oberour, ul levr **diwar-benn ar Joniged**, paotred an ognon eus Rosgov hag a ya (pe a yae) da werzhañ ognon da Vro-Gembre.

Gwyn Griffiths a zo o chom e Kêrdiz. 46

hag o labourat e B.B.C. Kembre : 53, Charles Street, Caerdydd (Cardiff), CF 1 4 ED.

#### Embannadurioù Al Liamm

Goulven JACQ : *Pinvidigezh ar Paour*, Dastumad efvorennoù ur paotrig yaouank (etre 1913 ha 1925) bet gantañ Priz Lennegezh Zavier Langleiz, e 1976. Dedennus ez eo an danvez, dreist-holl evit an hini a anavez ar vro. Aes eo heuliañ an destenn gant an tresadennoù o tiskouez ar c'hêriadennnoù gant o anvioù, hag an hentoù. Marteze ne deo ket kompennet mat-mat an danvez ha skrivet eo bet an efvorennoù, war a seblant, dre ma tifoupent e spered ar skrivagner. Un diell a dalvoudegezh evelkent, diwar-benn ar vuhez rust en amzer-se war-ar-maez ; ur vuhez eürus, da vihanañ, evit ar re yaouank ha n'anavezent doare-bevañ all ebet. Ar pezh a zo souezhus a-walc'h, eo ne gaver ket nemeur a dra el levr diwar-benn ar vuhez relijiel en ur barrez eus ar c'hristenaf, safset ! Eeun ez eo an dro-blunenn, re eun marteze, met pinvidik ez eo ar geriadur evit displegañ traoù ar maezioù hag ar vuhez pemdeziek, er gêr... Deuet eo ar c'hiz, hiziv an deiz, da embann efvorennoù, testennoù o kontañ un doare-bevañ aet da get, koulz lavarout. Diskouez a ra ar skridoù-se un drouk-hirnezh bennak, ur c'heuz d'un amzer aet e-biou, un amzer diaes, poanius alies, met na veze ket hep dudi na tuioù mat -ur brouenn ne deo ket an araokaat un dra disi e pep keñver ! Hep bezañ ur skrid dreist-dreist marteze e-keñver lennegezh, ez eo evelato, ul levr plijus, ha pec'hed e vefe bezañ re figus pa ne deo ket ken hir, ken pinvidik-se roll ar skrivagnerien vrezhonek, en deiz a hiziv. Mat-tre en deus graet al LIAMM oc'h embann skrid Goulc'hen JACQ.

J.C.

**GOUEL AR BREZHONEG : E Dinzag-Lokrist, Bro-Gwened (12-14 a viz Mae 1978).**

- **D'ar gwener 12 a viz Mae**, da 9 eur e kreizenn sevenadurel Lokrist : Abadenn gant Jili SERVAT.

- **D'ar sadorn 13 a viz Mae**, da 5 eur d'enderv (17 eur) : *Buhez Lokrist en amzer ar Goveleioù* (ar zouar Lokrist e

os Goveleioù an Henbont). War-lerc'h ur filmaozadur *video*, e vo roet ar gaoz da labourerien ar Goveleioù.

Da 9 eur d'an noz (21 eur) : *Filaj «Istor ar Vro dre ar sonerezh, ar c'hanennoù hag an danfs»*.

- **D'ar sul 14 a viz Mae** :

- *diouzh ar mintin* : abadennoù dre ar vourc'hadennnoù tro-dro gant ur *bagad* pe *zaou*.

- D'enderv :

- *Diskouezadeg gant ar strolladoù sevenadurel hag ar c'helaouennoù da ginnig ar pezh a vez graet e brezhoneg*.

- *Diskouezadeg gant arzourien ar vro: treserien, liverion, kizellerion, luc'hskeudennerion...*

- *Gouren*.

- Kenstrivadeg-kan ouzh ar mikro.

- Kanerion ha sonerion -c'hoariva mod kozh

\*Da 5 eur d'enderv: c'hoariva

\*Da 9 eur noz: fest-noz vras.

#### Mouezhiadegoù

12-19 a viz Meurzh 1978. Nebeut-tre a gemmadennnoù e-keñver ar Parlamant diwezhañ e Breizh. Ur c'hannad komunista a zo bet anvet e Gwengamp ha n'eus nemetañ evit Breizh a-bezh. An U.D.B. (Unvaniezh Demokratel Breizh) he devoa meur a zavez-kannad war ar renk, met, evel ma tegouezh pa vez mouezhiadegoù bras, e tastum ar c'hostezennoù bihan nebeut-tre a vouezhioù, ha dre-se daoust d'ar bruderezh graet ganti, n'eo ket keuet a-benn an U.D.B. da gaout ur bern mouezhioù : an 2 000 bennak e Brest, 18 pe 1 900 e Lannuon, ha 900 hepken e Gwengamp. Ur vouezh bennak he dije bet kollet, a-hervez, dre m'he devoa staget he c'harr ouzh hini an tu kleiz.

#### Lavv du adarre

Ur vatimant eoul-maen a zo en em skoet war ar c'herreg e-kichen Porzhall (Bro-Leon) ha mastaret an aodeier adarre: ur vatimant a 250 000 tonenn, an «*Amoco-Kadiz*». Trouz gant an dud a-enep lez-ober ar gouarnamant hag o mouezhioù d'ar gannaded a-du gant ar Gouarnamant, na petra 'ta !

#### Trouz gant an F.L.B. (?)

D'ar sadorn 18 a viz Meurzh, e oa bet ur gevezadeg rugbi, e Kêrdiz, etre strollad Bro-C'hall ha strollad Bro-Gembre ; ar strollad-mañ eo a c'honzas dre 16 da 7. Kent ar gevezadeg avat, e oa bet klevet darn eus paotred vras Kembre evel Meic Stephens o komz diwar-benn stad o bro hag o keñveriañ outi stad Breizh.

#### Priz Langleiz

Daou briz LANGLEIZ a vo roet e 1978:

- unan evit ar c'homz-plaen

- unan evit ar varzhoniezh

Pep priz a zo anezhañ : 1 000 Lur.

Bez'e c'hello an oberenn bezañ embannet gant *Al Liamm*.

Kas ar skridoù, a-raok an 30 a viz Gwengolo 1978, d'ar sekretour :

Bouessel du Bourg  
Gwennargant, 4, rue Jean Macé  
35000 RENNES

## Saveteit

### «WANIG ha WENIG»

Seizh niverenn eus WANIG HA WENIG a zo deut ar-maez er stumm nevez (*abaoe miz Gwengolo*). *Stwez*h, kudennnoù ar-c'hant a zo ganeomp, karzet eo kalz priz ar mouleñ. Ezhomm hon eus eus 5 000 Lur evit paeañ hon dleoù ha kenderc'hel gant ar gelaouenn.

Goulenn a reomp ho sikour ma soñj deoc'h he deus ur gelaouenn evit ar vugala evel WANIG HA WENIG ha fles da gaout e Breizh.

Trugarez en araok.  
Kasit ho profoù da :

M.L. FAVE  
Kernevez  
29200 KASTELL-PAOL

pe war gont :

CCP ROUDAUT 2943-51 Rennes

## EMBANNADURIOU AL LIAMM

TRI LEVR NEVEZ E LIV  
EVIT AR VUGALE :

4. Kroc'hen Azen, gant Perrault ..... 8 lur
5. An Houadig divalav, gant Andersen 8 lur
6. Rouanez an erc'h, gant Andersen .. 8 lur

\*\*\*

LEVRIOU ALL :

1. Ar C'hazhig penn-skañv ..... 8 lur
2. Istor ar Ponsin melen ..... 8 lur
3. An Nadozig vurzhudus ..... 8 lur

Mlle J. QUEILLÉ, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp  
— c.c.p. 1136 82 Rennes —

GOULVEN JACQ

## Pinvidigezh ar Paour

166 pajenn

Ar baourentez e Plougastell  
etre 1917 ha 1925

(Priz Langleiz 1976)

War baper kaer : 32 lur + mizoù

War baper all : 24 lur + mizoù

Mlle J. QUEILLÉ, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp  
— C.C.P. 1136 82 Rennes —

Copie 22 Pédernec

## EMBANNADURIOU BARR-HEOL

- 1 - Lekskridoù ar sulioù hag ar gouelioù (A.B.C.). Pep hini ..... 18,00  
Gant war un dro ..... 50,00
- 2 - Levr oferenn  
Zavent-Epifaniaz ; Korreiz-Sizhunvezh santel ; Amzer Fask (pep hini) ..... 11,00  
Gant war un dro ..... 30,00
- 3 - Lemadennoù pemdeziek (Peder levrenn e pep hini)  
Pep bloavezhad ..... 25,00
- 4 - Ritual ar Briedelezh (klok, liesskrivet) ..... 6,50
- 5 - Ritual ar Vadeziant (offset) ..... 5,50
- 6 - Pedennoù ar sulioù ordinal (liesskrivet) ..... 5,00
- 7 - Levr-oferenn evit Gouelioù ar Sent (a-hed ar bloaz)  
(Liesskrivet brav, ment 22 x 29) ; 166 paj. .... 25,00  
gant un nebeut oferennoù a zevesion (Treinded santel, Sakramant an Aoter,  
Jezuz-Krist beleg, Kalon Jezuz, Unaniezh ar Gristenien, Misionoù, Peoc'h,  
Klaffvourien, oferenn a anaoudegezh vat, h.a.)  
hag ur geriadurig latin-brezhonek !

### EMBANNADURIOU ALL

- Un nebeut skouerennoù a chom c'hoazh eus :  
Otello, Seurez Kerwanan, Aviel Sant Lukaz, Mervel evit bevañ... pep hini ..... 12,00  
Merkit war ho chekenn-bost ar pezh a vennit hag e viot servijet kerkent  
hep mizoù all.

### Koumanant da VARR-HEOL

- Koumanant ordinal ..... 32,00  
Broioù estren ..... 35,00  
Studierien ..... 30,00

K.R.P. 245 453 ROAZHON

### Ul levr-kegin e BREZHONEG

Abaoe 12 pe 13 vloaz 'zo e kaver e *BARR-HEOL* pennadoù diwar-benn an doare da ober kegin.  
Gant SAOZ AN TIEG eo bet savet an darn-vrasañ anezho, ha setu m'he deus kavet mat ober ul  
levrig ganto ha gant meur a hini all embannet gwechall e kelaonengoù brezhonek.  
Al levrig-se, ment 21 x 13,5 a zo embannet evel stagadenn da Varr-Heol.  
PRIZ AL LEVR : 15 LUR.

Imprimeur : Copie 22 Péderneg - Moulur : an Aotroù Gall, person Pederneq  
Directeur de la publication : M. Le Clerc, Buhulien, 22 Lannion, Gérant.  
Renner ar gelaouenn : an Aotroù Klerg, person Bullen, 22300 Lannuon

Périodique inscrit à la commission P.P.P. sous le N° 29 746  
Commentarii in lingua Brittonica editi - Revue kvaronjara en lingvo bretona



# AR MARE DU

Pozioù gant  
Maria Prat

Ton gant F. D.

Me zo ur paour kaezh martolod Glac'haret gant ar mare  
du. Eus ar mazout 'm eus bet ma lod Ha me  
n'ankouain ket diouzhtu Euz ar mazout 'm eus bet  
ma lod Ha me n'ankouain ket diouzhtu !

1 - Me 'zo ur paour-kaezh martolod  
Glac'haret gant ar mare du  
Eus ar mazout 'm eus bet ma lod  
Ha n'ankouain ket diouzhtu

2 - Ur plac'h yaouank eus ar Sklerder  
A garen a-greiz ma c'halon  
Homañ 'oa koant, dous ha seder  
Hec'h ano a oa Marivon

3 - Un deiz 'n ur vale e Perroz,  
'Oamp diskennet betek Trêzhtraou  
Hag eno 'oa juntet hon c'haoz,  
Souchet war ur garreg hon-daou.

4 - Met me a ranke, en deiz-se,  
Mont adarre d'an Oriant,  
Evit echuiñ ma c'hoñje,  
E-lec'h ma oa ma batimant

5 - Homañ 'douas bezañ fidel  
En ur laret din kenavo :  
— Aman, 'mezi, war ar roc'hell  
'Kavi 'c'hanon pa vi distro.

6 - Met setu un taol, a-greiz tout,  
Un taol bet erruet biskoazh:  
Duet hon aochoù gant mazout  
Ha me 'zo bet ar muiañ wazh !

7 - Degaset a zo soudarded  
Evit dastum ar petrol druz  
Ha setu darn eus ar merc'hed  
A zo aet d'o sikour diouzhtu

8 - Ma Marivon 'oa pres warni  
Da vont ivez da reiñ an dorn.  
Ur soudard 'deus laret dezhi :  
— Krog en un tu eus ma c'helorn.

9 - Goude, dorn-ha-dorn, int k arzhet,  
E-lec'h chom da naetaat an aod  
Setu penaos en deus trec'het  
Ar soudard war ar martolod.

10 - Manet on war ma c'hemend-all  
Kaer 'm eus kaout un doupenn ruz  
Marivon 'zo aet gant un all  
Mill mallozh war ar mare du.

(Tennet eus **BARZHONEGOU** Maria Prat)  
(15.5.1967)

**NOTENN :** Savet e oa bet ar son-mañ pa oa bet mastaret an aod da heul peñse an *Torrey-Canyon*, e 1967.

Gwashoc'h avat, ez eo bet peñse an *Amoco-Cadiz*, e miz Meurzh 1978, ha dav e vo astenn ar pennadig dister a gaver pajenn 47 eus *Barr-Heol*, kentañ niverenn a vo. Holl gelaouennoù Breizh ha kalz eus ar broioù estren o deus komzet eus an darvoud-se, hep menegiñ *Skinwel* ha *Radio*. Bernioù laboused-mor distrujet, parkadoù-istr labezet ha kollet, pesked zoken ha plant a bep seurt. Soudarded a zo bet degaset da naetaat an aocheler, hep kontañ bernioù tud a youl-vat (en o-zouez *Beljiz*) ha peizanted gant o zonelloù dour-teil.